

15-7-40 / -10-41

Youenn OLIER

O SELLOUT

WAR VA C'HIZ

eñvorennoù ha deizlevr

3

ROAZHON

GEVRED

1968



Y O U E N N O L I E R

E ñ v o r e n n o ù h a d e i z l e v r

Trede levrenn :

Gouere 1940 - Here 1941

R O A Z H O N

G E V R E D

1 9 6 8

R A K L A V A R D ' A L L E V R E N N O U 3, 4, 5.

Kavet e vo el levrennoù 3, 4 ha 5 an danevell eus ar bloavezhioù 1940, 1941 ha 1942.

Adal 1942 e venegan va deizlevr stank awalc'h. Evel ma kemero hemañ muioc'h a lec'h el levrennoù da heul em eus graet va soñj mirout an hevelep pajennadur diwar ar bloavezh 1942 betek diwezh ar brezel.

Anat eo ne embannan ket va deizlevr dres evel m'emañ ; ar yezh anezhañ am eus reizhet, pergen ; pennadoù didalvez zo am eus lamet ; marteze n'em eus ket diskoultret awalc'h ; evel m'emañ em eus spi e roy an deizlevr-mañ un alberz gwirion eus ar brezel evel m'eo bet bevet gant an emsaverion en amzer-se.

Koulz eo din resizañ ez eo un darn vras eus an danevell-mañ istorel evit an embanner koulz hag evit al lenner : kalz munudoù a oa aet diwar va eñvor ha n'em eus o adkavet nemet e pajennoù va deizlevr.

+++++

P e n n a d k e n t a ñ

Loc'het e oamp diouzh Gwaien eta d'an 10 a viz Gouere 1940. En dro-mañ avat ne glaskemp mui en em guzhat hag heuliet hor boa an hentoù bras. Tremenet e oamp dre Gemper ha Rozporden ; alese e oamp pignet betek Skaer hag ar Faoued. Dre eno hor boa tizhet Bro-Wened en endervezh ; war-dro an abardaez e oamp degouezhet da Glegereg hor boa treuzet teir sizhun a-gent o vont da Waien. Nepell diouzh ar gêrig-se hor boa graet hent gant ur c'hloareg en doa komzet deomp eus un taol fourgas a oa o paouez c'hoarvezout e Pondivi. Neuze, un tamm larkoc'h e oamp chomet a-sav en un ostaleri war ribl an hent, un dek kilometrad bennak araoz diraez Pondivi. Eno avat ne oa nemet brezhoneg ha marvailhoù taer gant an dud, ma voen sebezet ouzh o c'hlevout. Abarzh pell e ouezis gant mestrez an ti perak e oa birvilhet an dud e seurt doare : e-tro an devezhioù-se e oa renerion an Emsav o paouez en em vodañ e Pondivi - da lavarout eo : C. Lainé, Frañsez Debeauvais, Olier Mordrel ha Marcel Guieysse - sevel "Kuzul Broadel Breizh" hag embann "Diskleriadur Pondivi", pezh en doa graet awalc'h a drouz. En ostaleri e-lec'h edomp avat ne ouie ket re vat an dud petra a oa c'hoarvezet. Aterset em boa - e galleg - ur vaouez war an oad ; respontet he doa din e oa bet kaset da benn un taol dispac'h e Pondivi ; petra oa an taol dispac'h-se ne oa ket bet gouest da lavarout deomp.

Kendalc'het hor boa gant hor beaj. Tost da gêr avat, war-lerc'h ar Stivell, e oa tarzhet goloenn adreñv va marc'h-houarn. Dav e oa din pourchas unan all, anez din rankout distreiñ d'ar gêr war droad, pezh na vefe ket bet

ur bam. Dre chañs - edod c'hoazh e deroù ar brezel - e c'hellis pourchas ur c'holoenn nevez-flamm da gempenn va marc'h-houarn. Abardaeziñ a rae avat d'ar c'houlz-se: un eur hanter bennak am boa kollet o klask peadra da ad-aozañ va benveg. Evel ma'oa dic'hallus tizhout korn-bro Roazhon en devezh-se, ne vern penaos, e ris va soñj nozvezhiañ e Pondivi. Dont a rejomp tre en ur vereuri war dreuzoù kêr ha goulenn a rejomp bod; kinniget e voe lojeiz deomp en ur solier; eno en em gavjomp gant mevelion ar vereuri. Bezet pe vezet, un nozvezh c'hwek a dre-menjomp eno; bagol e oamp antronoz veure ha barrek da genderc'hel gant hon hent.

Dilec'hiet hor boa abred diouzh ar beure. Goude bezañ treuzet Loudieg hor boa hedet war hor c'hiz hent kreiz Breizh, o treuziñ Merdrigneg, Sant-Meven, Menez-Alban e-lec'h hor boa adkavet hent Sant-Brieg - Roazhon. Araok tizhout ar gêr-se avat hor boa troet war-du an hanternoz, dre Roveliég. E-tro pemp eur edomp er gêr, e ti-skluz Sant-Jermen, ha laouen oc'h en em gavout rak fall e oa bet an amzer e-doug an deiz, ma oa c'hoarvezet ganeomp meur a wech bezañ gleb-dour-teil gant ar barradoù glav a zisac'he warnomp. Du-mañ ivez e oa bet dinec'hiet an dud ouzh hor gwelout endro yac'h ha saly.

E-pad an devezhiou war-lerc'h e oan chomet er gêr e Sant-Jermen o c'hortoz kaout keloù diwar-benn ar vachelouriezh. E gwirionez, na petra 'ta, e oan chalet dreist-holl gant an darvoudoù. D'al lun 15 a viz Gouere, ebarzh va deizlevr, em boa skrivet un displegadenn hir diwar-benn an emgav politikel a neuze. Feuket e oan, evel an holl gant ar c'hemm trumm a oa deuet e temoù bruderezh ar c'helaouennoù, evit komz resisoc'h, e re ar gazetenn nemeti a veze lennet du-mañ: an "Ouest-éclair". A-hend-all, a-benn reiñ da anaout aergelc'h an amzer-se e kavan gwell menegiñ darn eus ar pajennadoù a skriven d'ar mare-se:

Dilun 15 a viz Gouere 1940

Goap a ra ar gouarnamantoù ouzh ar pobloù emaint o vleniañ. Ar c'hazetennoù a lennemp abaoe daou vloaz a veze bemdez o kanmeuliñ ar Saozon; hiziv ne reont mui eus Bro-Saoz nemet ar c'hozh 'Albion', evel ma skrivont e galleg. Hag an Alamaned a oa enebourion dec'h a zo deuet da vezañ kevredidi pe, da vihanañ, gwarezourion na c'heller ket dioueriñ! Penaos e c'hellfe an dud barn? A bep eil e tesket dezho karout ha kasaat ar bobl-mañ-pobl, evel m'eo c'hoarvezet e Bro-Alamagn nevez zo e ser Rusia.

Ar bobl n'eo nemet ur benveg ha goveliañ a reer anezhi diouzh ezhommoù ar re a zo e penn ar stad, a-benn seveniñ mennadoù ar re-mañ. N'eus ket anv ganto a blediñ gant eurvad ar bobl. A-hend-all, daoust hag ar glod n'eo ket retoc'h d'ur bobl eget an eurvad? Setu pezh a greder moarvat e Bro-Alamagn, e Bro-Italia hag e Bro-Rusia...

Dimeurzh 16 a viz Gouere 1940

Divalav eo an amzer bepred, goloet an oabl, teñval hogen paouezet eo ar glav. N'on ket avat evit mont er-maez. Enoeiñ a ran; kalon ebet da labourat ha n'on ket douget da lenn kennebeut. Den ebet ne weler amañ, alaman ebet zoken. A-dra-wir n'en em ziskouez ket kalz an ostizion-mañ ha na garer ket nemeur war a seblant: hospes hostis, an droienn latin a glot mat awalc'h amañ. Prest eur da grediñ avat e chomont da guzhat dre m'eo deus aon! Ha raktresoù a reer d'o lazhadegañ.

Addisplegoù diwar-benn bombezadeg Roazhon am eus klevet ivez: 8.000 den lazhet, 800 ti distrujet (1) hervez un den a zo tremenet du-mañ hiziv. Bepred e kaver (1) N'on ket evit lavarout ha gwir pe c'haou e oa ar brud-ou-se. Kement-se a veze kontet avat.

Kelanoù tud bet gloazet aet da vervel er parkeier tro-dro.

Piv a zo bet kiriek d'ar brezel : renerion Vro-Alamagn pe ar bobl alaman ? War a seblant, koulskoude, pobl ebet diouti hec'h unan ne c'hoanta ar brezel.

Dimerc'her 17 a viz Gouere 1940

Gwellaet un tammig eo an amzer a-benn ar fin : an heol en deus en em ziskouezet a-dreuz ar c'houlmoul. Dirak an ti hag a-hed ar ganol e tremen repuidi ha na ouzont ket re vat petra ober. Bep an amzer zoken e kejan gant soudarded eus an arme c'hall a zo bet dilezet amañ hag a dremen o amzer o pesketa er ganol. An Alamanned n'o deus ket bet amzer d'o dastum, kredapl eo.

Ken goullou eo bepred an eurvezhioù a reman amañ ; kenderc'hel a ran da lenn evit dizenoeiñ. An dezo am eus ivez da bremañ levrioù brezhonek all. En em c'houlenn a ran avat hag awalc'h e vo din deskiñ ar yezh evit mirout ouzh houmañ a vervel. Eveljust, pobloù a varv pe a zo war var da vervel : n'eus nemet sellout ouzh tonkadur Polonia er mare-mañ. Ma pad an traoù evel m'emaint er vro-mañ ne chomo netra breizhek e Breizh a-benn ur c'hantved. Hogen an dra-se n'eo ket sur c'hoazh ha me 'gav din ez eus tu da gaout spi. Forzh penaos, ar pezh a c'heller tammall da Vro-C'hall eo bezañ klasket kas da get ar broadelezhioù a vev war diriegezh he Stad en ur reiñ gwirioù keodedel kevatal d'an izili anezho ha n'oant anavezet nemet evel keodedourion c'hall end-eeun ; evel Breizhiz n'hon eus bezoud ebet dindan al lezenn c'hall ; e-maez al lezenn c'hall emamp. Hogen deuet eur a-benn evel-se ivez da lakaat hor pobl da chom hep merzout ar gaou spontus a oa graet outi.

Lennet em eus romantoù eus Bourget hiziv adarre "Un crime d'amour" ha "La Duchesse bleue" (1) ... (1) Da heul em boa skrivet ur stumadenn hir awalc'h diwar-benn doare romantoù Mauriac, Bourget ha... Melchior de Vogue, gant menegoù eus Tolstol ha romantourion rusian !

Warc'hoazh e rankan distreiñ d'ar skollaj am eus kuitaet miz zo bremañ hag am boa ankounac'haet a-grenn. Petra a c'hoarvezo ? Emaon o vont da dremen ar vachelouriezh a-benn daouzek devezh. Daoust ha degemeret e vin ? Panevet ar jedoniezh e c'hellfen respont : ya. Ha ma ran berzh, peseurt buhez am bo en ur bed dispac'h-et hag silpennet ? Daoust hag ar brezel a zo echu ? Ma echu dizale, daoust hag e ray gant trec'h an Alamanned ? Ha ma tle ar Saozon gounit, a-benn pegeit e raint ? Hag e peseurt stad en em gavimp war-lerc'h o zrec'h ? Setu goulennoù n'eus respont ebet dezho.

Hiziv ez eus bet repuidi eus Cambrai o weladenniñ ac'hanomp. Edont o chom e-tal hol liorz. Gouezet o doa e oamp bet o vevañ en o c'hêr ha c'hoant o doa bet da gevarc'hiñ ac'hanomp. N'edon ket er gêr paz int degouezhot. Kontet o deus avat e oa bet fuzuilhet hep tamm prosez ebet ur prizoniad gall e Sant-Erieg ; a-hervez en doa bet koñje da vont e kêr da dremen div eurvezh gant e wreg ; distroet e oa avat div eur war-lerc'h ar poent merket ; setu, evit ar felladenn-se e oa bet fuzuilhet ! An Alamanned ne farsont ket : (1)

Diriaou 18 a viz Gouere 1940

Goude bezañ tañkeet epad tri-c'hard eur bennak e porzh-houarn Sant-Jermen ez on degouezhet da Roazhon da seizh eur ha kard. Kêr Roazhon, goloet he mogerioù gant skritelloù al lu-derc'hel alaman, a oa peuz-c'houllo he straedoù. Kejet em eus evelato gant kalzig a soudarded hag a girri alaman, nebeutoc'h avat eget d'ar sadorn diwezhañ (2). Tremena a ris e "Ti-Breiz" a oa bet addigoret da c'houlenn hag erruet e oa al levrioù am boa urzhiadet, dreist-holl ar "Brezhoneg e daou-ugent kentel"

(1) Ar vrozenn-mañ a seblant din hiziv bezañ diwirion pe faziek e stumm pe stumm. Setu pezh a gonted avat. Seurt brudoù a noten : hag ebarzh va deizlevr e kaver addisplegoù taeret e ser an darvoudenn-mañ.
(2) N'em eus notenn ebet diwar-benn an droiad-se.

gant Vallee. Respontet e voe din e oa aet gant ur studier a oa deust d'e brenañ araozon. Levrioù brezhonek all avat a zleent degemer abarzh pell, dreist-holl a-berzh Loeiz Herriou, eus an Oriant. Evit ar poent avat ne oa netra.

Er skolaj ne gejis gant den ebet. An holl a oa gant ar valeadeg, nemet Riolland, Allain ha Leuret a oa o c'hoari kartoù dindan ar goudor. Savet e oan d'an hunva da renkañ va zraoù. O tiskenn e oan degouezhet gant Le Cadre a oa deuet da dremen eizh devezh e Roazhon kent mont war e giz da Bondivi e-lec'h en doa lakaet e anv evit ar vachelouriezh ; Geschwind ivez am boa gwelet. Pa oan en em gavet war ar porzh endro e oa distroet an holl diouzh ar valeadeg : o c'hoari kartoù hag o vutuniñ e oant (aotre o deus diwar vremañ) arak diskenn d'ar predva.

Ouzh taol, e-doug koan, ne voe graet marvailh nemet diwar-benn an emrenerion, pezh am lakaas souezhet. Hervez a gontas ar re all din ez int oberiant da sabatuiñ "abaoe m'emañ an Alamaned aze evit o gwareziñ". Disklariet e voe din ivez e oa bet savet ganto ur "c'hKuzul broadel Breizh" e Pondivi. E gwirionez em boa klevet kel eus an dra-se p'edon o ruilhal war-du Pondivi d'ar merc'her arak, e-tal ur beleg yaouank : hemañ en doa livet an afer-se din evel displegadeg un daou-ugent bennak a dud o vlejal (n'oa ket emrener, end-anat). An darvoud avat en doa graet trouz peogwir e krede ur vaouez kozh am boa gwelet da c'houde en un ostaleri e oa c'hoarvezet an dispac'h e Pondivi. Ma ! An dra-se a c'hell en em gavout a-benn ar fin : krog eo an traoù hepken.

Pezh a zo sur, an holl er skolaj a gemere an afer-se a-zevri ha rak-se moarvat ne voe anv nemet eus an emrenerion e-pad ar pred. Ouzh an daol m'edon ne ziskoueze den kaout kas ouzh an emrenerion daoust ma ne oa hini ebet a-du krenn ganto kennebeut. Moarvat e soñje dezho e

e c'helle an emsav-se ober berzh. Kement-se a oa da zegemer evel ar peurrest. Ouzhin-me e voe komzet end-arbennik (gant Tostain dreist-holl) dre ma soñjed - n'oa ket e gaou penn-da-benn - e oan un emrener.

Ne savas ket kaoz diwar-benn ar brezel. Ar re avat o deus rannet ger pe c'her war an divoud-se ne gredont ket nemeur e vo trec'h ar Saozon (1).

Kendalc'het o doa an divizoù war ar porzh, goude koan. Eno e voe roet din titouroù ouzhpenn diwar-benn an emrenerion : a-hervez, paotred ar "c'hKuzul broadel Breizh" a oa o kuzuliata a-gevret gant gouarnour alaman Breizh..."

Ar frazenn diwezhañ-mañ a oa chomet diechu. En he sigur eo ret kounañ o doa an Alamaned anvet ur "gouarnour" arbennik evit Breizh, pezh a oa anzav ur berselezh bennak da Vreizh hag a oa bet moulet en abeg da se gant an emrenerion. A-hend-all, marteze e ve da din ouzhpennañ un nebeut addisplegoù da gement-mañ. Soñj am eus e veze lennet an "Heure bretonne" war ar porzh-c'hoari en devezhoù-hont. War an niverenn gentañ (a gav din) e oa bet moulet ul luc'hskeudenn eus ar pevar rener eus an Emsav a neuze : Olier Mordrel, Neven an Henaff, Marcel Guieysse ha Frañsez Debeauvais. Evel-just e oa dedennet an holl gant al luc'hskeudenn-se a ziskoueze, war a soñjed, pennoù ar re a vefe o ren Breizh antronoz ; klask a raed o barn diouzh o doare ; darn a yae a-du gant hemañ pe egile. Kounañ a ran avat e oa savet unan eus va c'honskolidi - ur paotr eus Maouron - a-du gant Neven an Henaff : hemañ an hini eo en devoa ar muiañ a dalvoudegezh, war a lavare. Ne ouien netra diwar-benn renerion an Emsav d'an ampoent (1) Anv de Gaulle ne oa ket anavezet. N'em eus merket netra diwar-benn "galv an 18 a viz Mezheven". (2) Din da c'houzout n'eus diazez ebet d'ar goñchenn-se. Setu pezh a gleven endro din avat. Ma oa divizoù, n'oa netra ensavadurel enno.

ha n'oan ket eveljust evit reiñ va ali.

Adkroget o doa ar c'hentelioù evel a-raok nemet e vanke dek pe zaozek eus va c'hamaladed ebarzh va c'hlas. An darn-vuiañ eus ar re-mañ a oa chomet sac'het e kreisteiz Bro-C'hall e-lec'h e rankjont tremen ar vachelouriezh gant al lodenn dre gomz ; e Roazhon avat e oa bet divizet ne vefe ket goulennataet dre gomz an arnodennidi : chañs hor boa eta. Hervez hor boa klevet, hini pe hini en doa klasket divroañ da Vro-Saoz - anvioù Perrin ha Gaudry a veneged - hogen ne oant ket deuet a-benn. Keloù resis ebet n'hor boa diwar o fenn. An holl re a oa repuet e kreisteiz Bro-C'hall avat ne oa ket mall warno distreiñ da Vreizh. Aon o doa na ve ket echu ar brezel ; an emgannoù a c'helle adkregiñ ; bez e c'helle an Alamaned aloubiñ Bro-C'hall a-bezh ha furoc'h e kavent chom e-lec'h edont.

Menegiñ a ran va deizlevr adarre :

"Dibacuez, e-doug an deiz, e tremen ar c'hiri-nij alaman a-us d'ar skolaj, izel awalc'h ; aerborzh Sant-Jakez a zo tri c'hilometrad ac'hann. Distreiñ a reont diouzh Bro-Saoz, a-hervez.

Hep astal ivez e ruilh an ambrougadennoù kirri alaman war ar straed. Dre brenestr digor ar c'hlas o gwelan o vont e-biou, divent, dopéz, gorrek ha trouzus, gant stlejadelloù bras dreist-geñver adreñv dezho a-wechoù."

Ur wechad e voen dihunet da beder eur diouzh ar mintin gant an todilhon spontus a raent war st. Etraon. Da noz tro pe dro, epad ar veilhadeg, e klevet ar soudarded o kanañ ouzh son an akordeoñs ha Bretagne - ar gaoz eus Laelig - a voe skandalet gant Laieg dre ma oa chomet da selaou ouzh ur sonerezh ken dibatriot : n'en doa eta brogarantez ebet (brogarantez c'hall ebet, klevit!) Ar memes kelennner a gendalc'he da damall laoskentez ar soudarded c'hall;

hep meizañ en em zislavare e unan e tisklerie e oa prest, en eneb, da stardañ dorn ar soudarded alaman rak ar re-mañ da vihanañ o devoa graet o "dlead". War a hañval, an estlammour-se eus ar Romaned ha Corneille a grede awalc'h e vaste ar "Vertuz" da c'hounit n'eus forzh peseurt brezel !

Dilun 22 a viz Gouere 1940

A-benn ar fin e rafe gwell Geschwind o reiñ peoc'h eget o komz evel m'en deus graet hiziv diwar-benn Breizh. Ar gwashañ zo eo en em dromene da Vreizhad ouzh henn ober ! Kement-se war zigarez m'en deus lennet levr pe levr eus ar Bras pe ar Goffig, e galleg eveljust, rak an dispriz brasañ en deus evit ar brezhoneg koulz hag evit kouer Breizh "an hini sotañ eus holl gouerion an holl vroioù", gouez dezhañ. N'anavez nemet Bro-C'hall ; ne gar nemet ar vro vrein-se (1) a zo bremañ o vont da adsevel e skeud maz eo bet diskaret ar werinveliezh euz pa en em gavje louzoù ur Stad er gouarnerezh hepmuiken.

D'ar beure-mañ, war-lerc'h un digoradur diwar-benn ar werinveliezh - gwashañ hini eus an holl ouarnerezhioù - hag e ziskan diwar-benn ar rouezelezh a zere ouzh Bro-C'hall, goude bezañ diogelet n'en devoa e unan mennoz politikel ebet - se evit reiñ da grediñ, end-anat, e oa diuntusk - goude bezañ asuret e c'helle an emrenerezh bezañ reizhwiriek goude holl, en devoa meneget dibenn ar gaoz distaget gant an arc'heskob nevez, "priveskob Breizh", a-hervez, da geñver un oferen evit ar re vary er brezel. E fin ar gaoz-se eta, en devoa diskleriet penaos "sous peine d'un grand préjudice pour la France blessée et pour la Bretagne qui voulait vivre (bouille'hurun! Evit se dres e ranke bezañ emren!) il fallait absolument qu'elles restent unies..."(2)

(1) Se a skriven neuze. Levezonet e oan gant bruderezh dehouiz c'hall a varne an trede Republik.
(2) Menegiñ a ran va deizlevr. N'em eus diell all ebet.

Ha Geschwind da ouzhpennañ en doa an no. Roques komzet a-berzh-karg hag a-gefridi, avel arc'heskob, hag e ranke ar gristenion selaou e ali ha sentiñ outañ. Evelato ne grede ket re kadarnaat e soñj marteze rak a-raok menegiñ komzoù n'arc'heskob en devoa graet un hir a zistro-prezeg diwar-benn kened ar sonerezh en devoa klevet en iliz.

Ar skolidi n'o devoa graet van ebet o selaou prezegenn o c'helenner. Moarvat, ar re a zo Gallaoued en o zouez, da vihanañ, a oa ali gant Geschwind a ra eus an emrenerion "de petits agitateurs" paet gant an Alamaned, eveljust !

Ne vern penaos e rafe gwelloc'h an arc'heskob o plediñ gant aferioù ar relijion eget oc'h ober war-dro politikerezh hag oc'h en em lakaat e servij ur gouarnamant gall war zigarez ez eus ur gall anezhañ ; ar re all o deus ar gwir da vezañ Breizhiz..."

En endervezh en boa kavet tu da vont d'ober un dro e kêr. Fellout a rae din gouzout petra a c'hoarveze e Roazhon, dreist-holl kaout keloù ha diskleriadurioù diwar-benn labour ha bruderezh an emrenerion. Diskennet e oan gant st. Etraon war-du leurgêr an ti-kêr war ar riblennoù-straed e oa stank ar soudarded alaman a oa toueziet gant repuidi ha Roazhoniz. War ar c'haeoù e chomis a-sav dirak levr di ar Skol-veur ; er stalioù-gwer e oa bet lakaet war wel n'oupet levr diwar-benn Breizh. Daoust hag un heuliad eus an darvoudoù e oa kement-se ?

Goude bezañ pignet un toullad skridoù e levr di-mañ e oan pignet endro betek "Ti-Breiz", war leurgêr ar Breudoù. Netra n'em boa kavet diouzh va grad eno avat nemet levr Guieysse "La langue bretonne" hag ur pezh-c'hoari divyezhek gant an abad Joanno, "Santez Trifina".

War blasenn Hoche, p'edon o tanzen distreiñ

d'ar skolañ em boa kejet gant ur c'hamalad ha n'em boa ket gwellet abaoe ar vombezadeg, Coignard e anv, genidik eus Plouarzel (1). Savet e oa kaoz diwar-benn an Alamaned. Va c'hamalad a estlamme ouzh o nerzh hag o efedusted. Neuze e teuas an emrenerion war an dabier (e-kuit-se e oamp erruet dirak stal-vutun traon boulouard Seigné e-lec'h e felle din pourchas an H.B.) Va c'hamalad a oa ur paotr mat hag a glaske ober plijadur d'an dud, a zisklerias kerkent neuze : "Ya, chafis bras o deus ar re-mañ d'ober berzh..." Hemañ a oa ur paotr seven da vihanañ.

Ambrouget em boa Coignard betek traon kêr endro : ur gefridi en doa d'ober eno. Deuet e oamp tre er stal-veur "Prisunic" hogen va c'havandad n'en doa ket kavet eno pezh a rae diouer dezhañ. Manet e oamp neuze da evañ pep a chopinad bier du e-mesk ur bagad a nijourion alaman. Goude e oamp aet d'an "Nouvelles Galleries" hogen n'hor boa ket graet muioc'h berzh eno. Merzet hor boa er stal-se ivez un niver bras a soudarded alaman hogen an astelloù ne hañvalent ket bezañ bet skarzhet a-grenn evit keloù-se (2).

A-benn ar fin ne oan deuet endro d'ar skolañ nemet da seizh eur hanter goude bezañ erbedet start d'am c'henseurt leun a youl-vat mont da gerc'hat raktres Pondivi e sez "Kuzul Broadel Breizh". Hogen a-benn an diwezh, evel maz eo aes gortoz, n'en devoe hemañ biskoazh hardishegezh awalc'h evit kas da benn ar gefridi-mañ. A-c'houdevezh e rankis mont va unan. Hogen tro am bo da gomz pelloc'h eus ar weladenn a ris neuze.

(1) Klevout a ris un nebeut bloavezhioù war-lerc'h e oa bet lazhet Coignard e-kerzh ur vombezadeg e Plouarzel e miz Gouere 1944. Ur paotr mat e oa, lent hag aonik da saba-tuiñ avat - n'helle ket gwelout ur gontelli - ha goapaet e veze alib en abeg da se.

(2) Ar brud a rede e oa riñset an holl stalioù gant an Alamaned a brene pep tra gant o markoù. Kv. Ur pennad gant Abeozen war an divoud-se ebarzh "Galv" niv.1. "Dirak an dismantrou". Mourzh 1941.

Da c'hortoz e kavis va gwalc'h o lenn levr Guieysse e-pad ar c'hentelioù hag ar studioù e-lec'h se-laou randonennoù Geschwind diwar-benn ar varzhed hag ar romantourion c'hall kempred".

Ken n'em boe tremenet ar vachelouriezh e kendalc'has an tabutoù diwar-benn an emrenerezh er skolaj. Moarvat e oa diseblant an darn-vuiañ eus va c'hamaladed ; darn a oa a-du, evel ar Rouzig am eus meneget. Hogen meur a hini - Breizhiz diaes o c'houstiañs - a oa aheurtet kræ'n a-enep d'an emrenerezh. Daou eus ar re-mañ - Guibourg hag Hanzer (hemañ a oa ur gall e gwirionez) - a rene o amzer e-doug an ehanou-kentel o lenn pizh hag o tizezhiañ - war a soñje dezho - an "Heure bretonne" o klask dizarbenn ar mennozioù displeget enni dre ar munud ; poan a gemerent e gwirionez. Darn eus va c'helennerionn oa ken kilvers all : an ao. Layec, am eus meneget endev, a rae eus renerion an Emsav "studierion c'hwitet o studioù ganto". A bep seurt kunujennoù a veze taolet outo : dreist-holl e raed "treitourion" anezho dre ma oant aet da repuiñ da Vro-Alamagn (pe da Vro-Italia) ; rak, eveljust, e oant gopret gant an Alamaned.

En un doare souezhus awalc'h hogen a c'heller kompren evelato, ar C'hallaoued a oa ganeomp ne raent ket nemeur a van ouzh ar rendaeloù-se. E fed, hag int Gallaoued rik ha digemplezh a-grenn, e tiskouezent ar brasañ dispriç ouzh ar Vretoned a dremenent da hironed peogwir e c'helled arvariañ diwar-benn o gallelezh ; seurt dismegañs ne c'helle ket degouezhout dezho atav ! Un drovezh, e-kerzh ur vreatadeg, p'em boa arguet ne oa Breizhad ebet er gouarnamant bet aozet e Vichi e oa bet respontet din : "Ils sont bien trop cré-tins, pas étonnant !" Dizampart e oa seurt komzoù en aergelc'h a neuze ha war an taol e oa savet a-enep dezho meur a Vreizhad ha n'oa ket betek neuze a-du gant an emrenerezh.

Ne oa tu ebet d'en em glevout gant ar c'hallgarourion ha na raent diforc'h bet etre stummoù politikel ha stummoù "sevenadurel" an Emsav. Evel ma tisplegen ur wech e oa bet devoudet an Emsav, evit darn, gant an difenn kelenn ar brezhoneg er skolioù e responte ar c'hallgarourion din ne oa abeg ebet da reiñ hevelep aotre : Frañsizion e oa ar Vretoned ha yezh ar vro a zleent komz ; ma chome ar brezhoneg digelenn er skolioù n'en doa kement-se pouez ebet. Hevelep diseblantted a c'heller digareziñ : ne c'hell teurel pled ouzh ar brezhoneg da vat nemet ar re a gar Breizh.

A-hend-all e pade ar vuhez evel a-gent. Fourmenadennoù a raemp didan ar glav peurvuiañ - rak an amzer a oa deuet da vezañ diarak - betek ar c'houronkva e-harz Tuchenn-Vrulu ; eno e renemp hon endervezhioù o c'hoari kartoù, o poazhañ el ludu avaloù glas bet skrapet er Pradoù tro-dro, o neuñ en dour lec'hidek.

Tremenet em boa ar vachelouriezh d'al lun ha d'ar meurzh 28 ha 29 a viz Gouere. Aes em boa kavet an arnodenn. Va fennañ preder e-doug an devezhioù-se e oa bet adkavout Foucray an emrener hogen ne oan ket deuet a-benn. Evelato em boa bet keloù diwar e benn gant Ballot (1) en doa kejet gantañ ; hervezañ e oa "drôlement jouasse !" Displeget en doa dezhañ dre ar munud penaos e vefe urzhiet Breizh emren h.a. h.a.

P e n n a d _ _ _ 2

Antronoz, d'ar merc'her 31 a viz Gouere e oan distroet d'ar gêr e Sant-Jermen gant tren 6 eur 58.

(1) Eus Maouron e oa ar paotr-mañ, ma ne fazian ket.

Den ne oa en gortoz d'am gwelout o tistreiñ ken abred all. Goude bezañ roet keloù diwar-benn va arnodenn ha diskleriet pezh a soñje din awalc'h diwar he fenn em boa kroget ker-kent da gomz eus kudenn an emrenerzh. Hogen hep dale e oad staget d'am dislavarout. Evit serriñ va genoù e voe taolet ouzhin ne oa ket Bretoned eus Debeauvais ha Mordrel (1), e oant o daou gopret gant an Alamanned d'ober bruderezh evito : unan a douche 9.000 lur hag egile 7.000 lur digant o mistri. E pelec'h en devoa va zad diskoachet ar sifroù -mañ, n'ouzo ket ; fromet e oant bet avat gant o resister. Marteze e oa bet roet an titouroù-mañ e **skingomserzh ar Saozon**; marteze awalc'h ivez e oant deuet dezhañ dre hanterouriezh archerion Sant-Albin-an-Elvinieg a oa darempredet gantañ. Pelloc'h, ebarzh va deizlevr, d'an 13 a viz Gwengolo, e not-an un darvoudenn a dennfe da gadarnaat ar goulakadur-mañ. An ao. Guitton, labourer-douar e Sant-Jermen, a oa bet prizoniet gant an Alamanned hag aotreet ganto da zistreiñ d'ar gêr epad ur pennad a-benn plediñ gant e vereuri. Echu e berrmision gantañ e oa o prientiñ loc'hañ d'ur c'hamp e Bro-Alamagn. N'oa ket tomm tre d'ober seurt beaj eveljust hag emichañs en devoa meneget ur wech bennak e klaskfe bezañ dieubet evel Breizhad gant an emrenerion. Beset pe vezet, erru e oa ar brud betek an archerion hag ar re-mañ a oa deuet kentizh da gavout an òn hag int d'erbediñ dezhañ start, en an' Bro-C'hall emichañs, chom hep kas da benn hevelep mennad torfedus rak, ken sur ha tra, emezo, e vefe gwisket dezhañ livrez al lu alaman ha kaset d'ober brezel d'ar Saozon(2)

(1) E gwirionez e oa dianav krenn c'hoazh anvioù renerion an Emsav a neuze. Marteze o doa va zad lennet anezho da goñver ar prosezou a oa bet graet d'an emrenerion daou vloaz arak hogen n'eo ket sur. Tud yaouank e oa c'hoazh Debeauvais ha Mordrel. Evit ar peurrest, un tech islis e oa neuze a-berzh Bretoned dallet fogasiñ gant o orin breizhat a-benn nac'hañ o broadelezh end-eeun. Se am lakae da vont en egar bep taol.
 (2) E-giz ma ouzer, e-pad un nebeut sizhunioù e c'hollas ar brizonidiñ vreizhat a embanne e oant Breizhiz distreiñ d'ar gêr.

(edod o c'hortoz dilestradeg an Alamanned e Bro-Saoz). Petra a reas a-hend-all an ao. Guitton, n'on ket evit lavarout deoc'h. Ma konte an archerion avat seurt **serbiennou** e c'hellent ivez kontañ re all. E gwirionez e oa poanuis ar breutadegoù-se er gêr. N'ouien ket kaer petra respont d'ar "fedoù" a oa daalet ouzhin. Eveljust e soñjen e oa ar re a raen anezho "emrenerion" (evezhiit n'anavezenn neuze hini ebet diout) Brezhoned ha netra ken ; neuze eta oao degouezh d'an ampoent heñvel ouzh hini De Gaulle a oa gopret neuze gant ar Saozon (hag a voe a-hend-all barnet d'ar marv gant ar C'hallaoued end-eeun). Evelato e oant strafuilhet gant hevelep tamalloù ha laouen e oant bet p'em boa kojet gant Guieysse ha Debeauvais d'an 8 a viz Eost o Klevout Guieysse e uran o c'houlenn arc'hant evit an Emsav : an dra-se a ziskoueze e oa paour an emrenerion ha ne oant ket 'paet' gant an Alamanned.

Arabadus e vefe adskrivañ amañ danevroll an tabutoù a oa er gêr neuze. Diskleriañ a raed din ne garfed ken bezañ Breizhad en deiz ma vefe roet an emrenerzh da Vreizh, da skouer ; awalc'h e oa dezho bezañ sellet evel Frañsizion par d'ar re all (aze e oa an dalc'h dres rak va zad o devoa gouzañvet o-giz m'em eus merket e levrennoù kentañ an eñvorennoù-mañ diouzh an dismegañs a oa stag ouzh ar vreizhadlezh d'ar c'houlz-se). A-hend-all, gant m'o defe peadra d'en em vevañ ha d'en em wiskañ dindan gwarez Bro-C'hall ne raent ket forzh eus netra. Keuziañ a raed da vezañ roet deskadurezh din (ne oa ket c'hoazh ken boutin-se e-touez tud ar bobl d'ar mare-se) : santet e oa va zroidigezh d'an emrenouriezh evel ur gwir zrouziwezh a oa war var da wastañ va buhez ; neuze e save enzud un disfiz sakr ouzh al levrioù a oa hini an dud dizek ; karse a oa ganto zoken da vezañ distaget bomm brezhonek ebet dirazon. Taeriañ a raen diouzh va zu hogen, anat eo, se ne zegase emglev ebet.

A-benn habaskaat va zud e Klasken diskouez dezho hepken stumm sevenadurel an Emsav. Hogen ne raen ket muioc'h berzh. Da skouer em boa graet anv ur wech eus ar Skol-veur geltiek e oa kel a sevel e kornog ar vro, hervez an "Heure bretonne" en devezhioù-se. Va zad avat ebet nemet en degouezh ma vefe bet adsavet ur Stad vrezhon. Nac'hañ a raed eta ober komm ebet etre an emsav sevenadurel hag an emsav politikel. Din-me e veze tamallet plediñ gant ar yezh dre ma oa kement-se ober un "doare politikerezh". Hag evit bezañ eun e ranken anzav e oa ar wirionez gant va zud nemet, eveljust, seurt gwiriadur am lakae hepken da gompren ne oa silvidigezh ebet evit ar yezh er-maez eus ar Stad vroadel(1).

E gwirionez e oa luziet ha distreset doare kudenn Vreizh d'ar mare-se gant dalc'hidigezh an Alamanned ha rak-se, evit darn, ne dizhe ket va zud meizañ ervat eus petra oa kont. Moarvat ne oan-me ket a-du gant an Alamanned (evezhiadennoù enep-alaman e-leizh a gaver ebarzh va deizlevr a Eost hag a Wengolo 1940) hogen komprennat a raen ivez ne oa ket ar poell pe vennoziou politikel start a lakae va zud da zisturel beli an Alamanned, o diorreadur gall nemetken, ne lavaran ket ; diseblant e oant ouzh

(1) Renet e oa emzalc'h va zud gant an aon rak an heuliadoù a c'helle kaout evidon va dibab politikel nevez. Hogen c'hoarvezout a rae ganto kodianañ ganin tamm pe damm a-wechoù. Va mamm, da skouer, a damalle kannaded Vreizh evit bezañ chomet hep tizhout lakaat ar brezhoneg er skol. Ha d'ar 17 a viz Eost 1940 e notan e oa va zad an hini a oa tuet ar muiañ d'am mennoziou, pezh a ziskouez e oad gouest da blegañ d'am arguadurioù ~~trc~~ **pe dro**.

Ret eo din merkañ ne oa ket aesaet va emgav er gêr gant bruderezh enep-saoz an "Heure bretonne", renet neuze gant O.M. Seurt bruderezh a oa didalvez d'am soñj ; ne c'helle nemet reiñ da soñjal e oa an emrenerion lakizion an Alamanned. Pennadoù all a oa dizampart hepmuiken ; va zad a oa taeret en-abeg d'ur pennad ma Klasked isañ ar Vretoned a-enep d'ar C'hallaoued dre embann kunujennoù distaget gant ur Gall bennak - ~~sañset~~ - ouzh ar Vretoned. Kilemzalc'h diboell un den gloazet don e stoker ouzh ouzh e wiridig e oa henezh.

Breizh dre ma oa bet graet Gallaoued anezho. Hag ar vezadenn-mañ a zo alc'hwez va emdroadur er mizvezhioù war-lerc'h : an droukrañs a save ennon ouzh Bro-C'hall dre m'he doa di-vroadelet ar Vretoned am lakae da zisturel anezhi a-grenn. Anat e oa din ne c'helle nep levezon ostren bezañ gouzañvet el ledenez-mañ anez gwanaat emskiant ar vreibadolezh e-touez Breizhiz ha lazhañ hor broadelezh en diwezh. Rak-se ne gollis biskoazh va amzer o c'hoanagiñ hanter diskoumoù ar gevreadelezh hag an emvelestrezezh. Gwelout a raen eta en emskiant vroadel adsavet dre ar stourm evit ar frankiz vroadel an tu nemetañ da saveteiñ ar yezh. Ivez ha war un dro, dre ma oa sklaer din e oa diazezet karantezvro c'hall va zud war ar skiant ~~er~~ oa bet roet dezho eus meurded ar Stad c'hall e oa dic'hallus din er bloavezhioù-hont hetañ e nep doare distro ur galloud en defe broudet em c'henvroiz ul lorc'h estren ouzh o broadelezh wirion.

Pezh am lakae da heugañ ouzh Bro-C'hall d'ar mare-se ivez e oa ar c'hemmesk doñjerus a vrizh-kravez hag a garantezvro c'hall diskiantet a lakae ar speredoù da da drevariañ endro din, e korn-bro Roazhon, hag a droe d'ur gwir gatar. Amañ e fell din komz eus albac'henn ar gwelodigezhioù hag an diuganoù a reas reuz e-touez an dud trelatet e-doug pevar miz bennak war-lerc'h donadigezh an Alamanned. N'on ket evit dezvarn hiziv eus pelec'h dres e teue ar brudoù foll-se a veze lakaet da redek ; kavout a ra din avat e tennent o orin eus kelc'hiadurioù ~~so~~ eus ar gostezenn dehoù

(1) Unan a c'hellje bezañ goulennet perak hag evit petra e felle din saveteiñ ar yezh. E gwirionez, va youl da saveteiñ ar yezh, va youl da vezañ Breizhad, a dazhe eus don va boud hep ma c'helljen bezañ roet nep diskleriadur dezhi rak ne gaven ket er yezh evel m'hec'h anavezet neuze, trefoet ha distreset, stag ouzh ur stuzegezh tonket da vont da get, abeg ebet da saveteiñ anezhi. Ur savboent all a oa ret din degemer, hini ar vroadelouriezh vreizhat a roe un dalvoudegezh da geal ar vroadelezh dre vras hag ur roll resis da houmañ en difenn anezhañ. Evel-se ne c'hellen harpañ ar yezh en un doare poslekk hep bezañ vroadelour war un dro.

gall, a-du gant ar roue, hag a zo techet awalc'h da seurt urisinerzh (pezh a ziskouezfe awalc'h n'eo ket gwall yac'h luskad ar re-se).

Eus Gwaien eta e tegemered Lizhiri e-lec'h e tezevelled gweledigezhioù nevez c'hoarvezet e Goueled ar vro : ar Werc'hez he devoa en em ziskouezet d'ur plac'hig e Bro-Leon a-benn dinec'hiñ an dud paour enkrezet gant an darvoudoù ; e gwir ne oa bet graet diougan ebet da geñver ar gweledigezhioù-se nemet e veze menegot pennadoù zo eus an Aviel, hini Ragevezh-Doue pergen.

Hogen gant an diouganou e lakae an dud o albac'henn hag o holl c'hoanag. An diougan a reas berzh da gentañ a voe hini Santez Odila (a denne hec'h orin eus ur rannvro gall rik, egiz ma ouezer : Bro-Elzas). Ar santez-se eta he devoa a-hont ur feunteun a oa kustumet da ziouganañ tri miz en arapak pep diwezh brezel etre Gallaoued hag Alamaned. Evel-se e oa c'hoarvezet e 1871 hag e 1918 ; er bloaz-se avat e oa tarzhet ar feunteun a nevez e miz Meurzh ; e fed e oa ehanet ar brezele miz Mezheven met ne c'helle ket an dibenn-se bezañ unan mat rak ar C'hallaoued o devoa bet lamm en afer. **Setu** e oa ret adober ar jedadennoù a zisoc'he en dro-mañ da amzeriañ diwezh ar brezel abarzh daou pe dri miz d'ar muiañ. A-benn ar fin e teujod da ginnig un deiziad resis tre : hini ar seizha viz Here (deiziadoù all a veze roet, peurvuañ ar re a glote gant gouelioù ar Werc'hez e miz Eost pe e miz Gwengolo). En em c'houlenn a rit moarvat penaos e c'hellje c'hoarvezout hevelep burzhud ? Netra ecunoc'h, evel ma welot. D'ar seizh a viz Gwengolo 1940 e skriven kement-mañ: "Er mare-mañ emeur o c'hortoz d'an Alamaned dilestrañ emberr e Bro-Saoz ; dizarbennet e vo an dilestradeg -se hag ar c'hwitadenn-mañ a zegaso deroù an drouziwezh evit an Alamaned. Ret eo avat d'ar re-mañ hastañ buan da vezañ trec'het rak an diougan a zegemenn e rank ar brezel bezañ echu a-benn daou viz..."

E ser diougan santez Odila eo ret din lavarout ne oa ket diaes ober sigoterezh gant ar sifroù anezhañ rak dezrevellet oa un tammig èvel kudennoù jedoniezh aozet evit bugale ar skolioù : eil lodenn ar brezel a oa par da nouspet gwech al lodenn gentañ h.a. Nemet e tisoñjed end-ecun episaat hed al lodenn gentañ-se. Ouzhpenn-se e oa anv en diougan eus an amzer ma vefe unanet ar greskenn gant ar groaz (pezh a rofe awalc'h da grediñ e oa bet lakaet an diougan-se dre skrid d'ur mare ma oa an Durked e barr o galloud.)

Du-mañ e c'hoanage ar merc'hed e oa gwir an diougan hep krediñ re ennañ. Rak va mamm, daoust ma spie e vije echu ar brezel hep re a zalc, he doa kavet furoc'h dastum ar muiañ m'he doa gallet a bourvezioù ; ar sukr, pergen, ne vanke ket er gêr ha graet e oa bet un niver bras a bodadoù kaotigell mouar en hañv-se. Nec'het e oa va mamm avat o welout ez ae ar bern a chome o war vihanaat bemdez hag erbediñ a rae d'am c'hoar yaouañ - he doa daouzek vloaz bennak d'an ampoent - espern ar sukr ; anez e vefe ~~det~~ buan da netra ; ha va c'hoar a responte dezhi : "D'ober petra espern ar sukr : a-benn daou viz e vo echu ar brezel ! " (Siwazh, gant ar soavon he devoa arboellet n'he devoa ket va mamm muioc'h a chañs : hemañ a yae gant va zad a oa paotr mat hag a glasse rentañ servij da Ber ha da Bol).

Eveljust, estreget diougan santez Odila a oa bet diskoachet er mizvezhioù-se. Paz is da Waien e miz Gwengolo da geñver marv va zad-kozh a-berzh va mamm e klevis kel eus diougan Don Fosco (pa soñjan mat, n'ouzon ket ha n'eo ket en diougan-se e oa bet merket deiziad ar seizh a viz Here), ivez eus unan all savet gant un eskob saoz (hemañ a oa ur brogarour mat : rakwelout a rae trec'h ar Saozon, na petra 'ta!) ; e Roazhon, erfin, va lojerez an it. Legaud, he doa roet din da lenn diougan un tad Joannès bennak (n'ouzon mui eus peseurt bro e oa hennezh) ; ken hir e oa ar skrid-se avat

ma ne oan ket deuet a-benn biskoazh da echuiñ anezhañ. Ragaroueziañ a rae ur brezel spontus e diwezh ar c'hantved, donedigezh an Enep-Krist hag un hoalad aour er bloaz 2.000.

Darn a grede ken start en urisinerzhioù-se ma terment da gas o bugale d'ar skol-lojañ e deroù miz Here en abeg d'an emgannoù a zlee c'hoarvezout d'ar mare-se. Eveljust ar merc'hed a oa ar muiañ hegreidik, pezh a zo natur, hogen kamaladed am boa hag a zegemere sorc'hennoù ken diboeall all hep klask o burutellañ tamm ebet. D'ar 14 a viz Gwengolo end-eeun em boa kejet e Roazhon gant ur c'henglasad eus Sant-Marzhin, genidik eus Kasteljiron, Guibourg e anv : hemañ, d'ar c'houlz-se, a oa a-enep d'an emrenerezh. Fiziet en doa ennon evel ur segred e oa deuet da c'houzout e oa mennet an Alamaned da zezougen da Vro-Alamagn an holl baotred ha plac'hed yaouank eus ar vro-mañ ma teufent da goll ar brezel ; a-hend-all, emezañ, kemendall a raint ma c'honzont ar brezel ivez. Goulennet em boa outañ neuze penaos e krede dont da Roazhon d'ober e studioù ; diogeloc'h e vefe dezhañ chom war ar maez e Kasteljiron e-lec'h e c'hellfe en em guzhat aec'h. Klasket em boa dispontañ va c'hamalad o tiskouez dezhañ n'o defe ket an Alamaned amzer da gas prizonidi ganto ken stank maz afe an tu-koll gant o lu : bec'h awalc'h o defe d'en em zifenn ouzh o enebourion ; ne vefe ket fur dezho kennebeut all ober droug pe noazhout e stumm pe stumm ouzh poblañs ar broioù dalc'het ganto rak gwall aes e vefe d'an danvez trec'hourion tennañ talv-gwall diouto a-c'houdevezh ; ha ma vefe trec'h an Alamaned peseurt gonid o defe bet o lazhadegañ tud a c'helle bezañ talvoudus dezho ? Sed pezh am boa arguet. Ne gav ket din avat em boa kendrec'het da vat va c'hendivizer.

Evel ma welit ne oa ket sirius bezañ gall en amzer-hont pa ranke ar C'hallaoued pe ar re a oa a-du ganto lakaat o holl c'hoanag e stultennoù a seurt gant ar re emañ o paouez displegañ. Evidon-me avat en devoe va buhezadur

e mizioù kentañ an dalc'hidigezh alaman houliadoù a-bouez. Er penn-kentañ e oan enep-alaman evel an holl endro din. Hogen ken amost (1) e oa ar gasoni a ziskouezed kaout ouzh an holl Alamaned, ken foll ar spi a lakaed e trec'h Bro-C'hall, ken trevariet doare ar garantezvro c'hall a oa o ren neuze ma teuis, a nebeudoù, evit enebañ ouzh hevelep diskiantegezh, da zegemer gant muoc'h a evezh an tezennoù a oa a-du gant an Alamaned. An emdroadur-mañ a voe kreñvaet da c'houde gant un anataenn ha na c'hellen ket dizarbenn : distro ar veli c'hall ne c'helle nemet broudañ ar spered gall e-touez ar Vretoned. Din-me e oa sklaer e chome va zud stag ouzh Bro-C'hall dre ma rene bepred meurdeñ ar Stad c'hall en o speredoù evel un idolenn war un acter ; alese n'oa ket hir an hent da hetañ e ve an idolenn-se diskaret da vat evit ma c'hellfe ar Vretoned didouellet a-benn ar fin dibab o bro wirion. Adarre ne fell ket din difenn hiziv hevelep poellatadur. Ma vijen bet diouganer em bije gallet eveljust rakwelout drouzivezh an Alamaned. En amzer-hont avat ha me yaouank flamm - n'em boa bepred nemet seitek vloaz - , dic'houzvez eus gwir amlegoù ar brezel, evel an holl a-hend-all, n'em boa nemet va skiant-vat hag houmañ a lavare din e oa an tu-kreñv neuze gant an Alamaned. Ar re a grede e trec'h ar Saczon n'o devoa neuze nemet o feiz e Bro-C'hall evel ma n'hon eus bremañ nemet hor feiz e dazont Breizh evit skorañ ar gredenn e vo adsavet ur Stad vrezhon el ledenez-mañ (me ' fell din lavarout dre se e rankomp gortoz darvoudoù ha n'int ket degouezhet c'hoazh evit ma seblanto hor mennad bezañ poellek).

Kement-mañ a skrivan evit diskleriañ ha n'eo ket evit digareziñ. E 1940 e oa diskiant goanagiñ trec'h ar

(1) Da skouer en em harped war lavar un den en doa rakwellet trec'h an Alamaned e Mezheven hag a rakwele bremañ faezhidigezh evit asuriñ e vefe pilet an Alamaned hep dalc'h. Neb en doa lavaret ar wirionez ur wech ne c'helle mui faziñ a-c'houdevezh. Dodenn an diouganer a adkaved amañ.

Saozon. Hogen e 1944 ne oa ket mui heñvel ar gont. Dlead ur politiker e oa eta neuze studiañ an emgav politikel nevez ha divizout diouzh ar studi-se un emzoug o klotañ gant henneth e-lec'h spiañ darvoudoù ha na oant marteze na gallus nag hetus e meur a geñver. Hogen emzalc'hoù zo kemeret e 1940 a oa diaes tre da gemm er bloavezhioù war-lerc'h. An Istor en dro-se a seblante bezañ un traped evit ar stourmerion vreizhat.

Da e vefe din evelato diskleriañ perak n'on ket bet tentet da vat biskoazh da harpañ stourm an Alamaned daoust ma oa koazhet un tamm eus va enebiezh outo e-kerzh nizioù kentañ an dalc'hidigezh. An abeg pennañ din eta da nac'hañ en em gevrediañ ganto e oa an disfiz ouzh ar genelwerinelouriezh a chomas gwirizennet ennon bepred e-doug ar brezel. Moarvat n'em boa ket studiet na klasket studiañ zoken ar gelennadurezh-se hag a-hend-all n'avezen ket muioc'h eget enebourion an Alamaned o unan e 1940, lakaomp, gwir natur an torfedoù a oa sevenet a-enep d'ar Yuzevion er bloavezhioù-se end-ecun petra bennak ma ouie an holl e e oa heskinet kriz ar re-mañ e Bro-Alamagn. Pezh a zamwelen avat eus ar genelwerinelouriezh pe ar fagouriezh n'am dedenne tamm ebet. D'al lun 9 a viz Gwengolo, da skouer, em boa klevet ur gaozeadenn er skingomz saoz ; moarvat ne oa ket ar prezeger a-du gant ar genelwerinelourion, eveljust, hogen pezh a zisplege eus o mennozioù ne hañvalc ket din bezañ pell tre diouzh ar wirionez. Dalc'het em boa soñj dreist-holl eus ul lavarenn a arouezie tro-spered meur a oberour fagat en amzer-se hag a felle dezho "krediañ hag ober kentoc'h eget prederiañ..." Skrivañ a raen neuze : "Evit ar re-se ez eo an ober uhelañ pal ar vuhez : Napoleon, Hitler, setu o zud-veur, ha Stendhal(1). Ober ? Poseurt ober avat hag evit petra ? Ha pegeit e pado ar bed-se o devo savet (1) Skridoù ar skrivagner-se a bleustron ivez stank awalc'h en amzer-se. Rak-se en menegan amañ.

hep poell, da dennañ klod ha bourusted dicutañ ? Daoust ha n'eus forzh petra a vo aotreet dezho war zigarez gwalc'hañ o ezhomm a obererezh ? Pep pobl he deus ar gwir da vevañ ha da vezañ dieub hogen an Alamaned, war a seblant, ne reont foeltre ebet eus ar gwir-se. A-dra-sur ez eus bet reet skouer dezho er c'heñver-se gant ar C'hallaoued o unan, gant Napoleon ha n'en doa ket torret e benn da zidamall e vac'homerezh da vihanañ..." Un tamm polloc'h e ouzhpennen : "Dismegañsus e vo moarvat evit Bro-C'hall ha Bro-Saoz - ma vez trec'het - en em gavout dindan gwarez Bro-Alamagn hogen o stad ne vo biken ken gwazh hag hini Vreizh dindan beli Vro-C'hall..."

Ar pezh a zisplije din eta e menozia deg ar genelwerinelourion hag ar fagourion dre vras - diouzh a zamverzen, a resizan adarre - e oa an arliv a fals kevrinel- ezh a wiske anezhi. Daoust ma oa ar politikerezh, da lavarout eo an ober, dalc'h va buhez, e nac'hen reiñ dezhañ un dalvoudegezh peurc'hroñs. An emouestl a galon d'ur c'heal pe d'ar framm en leuriade a veizen - hag a veizan bepred - evel un dra direizh ; ar meneg eus ar feiz - krediañ - en un degouezh ha na zeree ket outi am feuke. Poelligour e oan eta war dachenn an ober, daoust ma vagen mennadoù dic'hallus - da c'hortoz - e politikerezh ha ma tegemeren dinec'h kaer a-hend-all ur gravez ha na rae forzh ebet eus ar poell ; hogen ar mennadoù-se a oa poellek hag int dic'hallus hag ar gravez o plediañ, war va meno, gant un trabed a oa dreist-meiz, en em gave ivez er-maez eus tachenn ar poell. Evel ur si fall eta, e argarzhenn an doug d'an "awen" ha d'ar "feiz" en un ober pleustrek a rank chom kalvezel ha kacot e bevennoù ar bed-mañ. An dañjer, avat, a oa dres, a-benn ar fin, nac'hañ pep trabed pe vezañ dedennet da sovel em spered etre bed ha trabed ur speurenn he defe rannet va fersonelezh hogen tostoc'h e oa din an dañjer kentañ en amzer-se o vezañ ma ne oan ket chalet neuze gant ar c'hudennoù a gravez ; dre lezir-

egezh, evit darn, e talc'henn d'ar gravez, dre ma klote ivez gant va natur. Seurt emzalc'h avat a ziskleir perak e voen dadennet a-c'houdevezh gant ar varksouriezh, dre ma nac'he ar gelennadurezh-se end-eeun sevel dreist da vent Mab-den hag ar bed-mañ ha perak ne voen ket holet biskoazh, evel hini pe hini eus va mignoned e-pad ar brezel, gant mennoziadegoù a denne o awenadur mui pe vui diouzh ar Reter pellañ, dre ma tistaolont ivez gwirvoud ar bed-mañ. Ma n'on ket aet a-du gant ar varksouriezh - ouzhpenn an abegoù a bolitikerezh rik am eus menegët ebarzh eil levrenn va eñvorennoù - e voe kiriek d'an dra-se an dislavar a verzen en emzoug ar stourmerion varksiat e-pad ar brezel pergen : reiñ a raent o bezoud d'o uhelvennad. D'an emro-se ne c'hellen kavout nemet daou jubennadur : pe neuze e roent o bezoud dre verrboellegezh, diwar c'hoari, dre glaoustre, lusket gant o anien tagañ, hep atebegzh denel wirion ebet en diwezh. E pelec'h edo neuze o harozerezh ? Rak ar varksourion a gendalc'h da arverañ, evit ezhommoù o bruderezh, ur geriadur hag a zameuc'h talvoudoù ar sevenadur kristen ; pe neuze e samment o zonkadur hag e asantent e gwirionez da reiñ o buhez ; d'ar marc-se avat e kuitaent tiriegezh ar poell rak ment ar bed-mañ a zo da gentañ, evit pep hini, e vent-eñ e unan ; o plegañ avat da vezañ aberzhet d'ur mad brasoc'h egetañ, o paouez a sollout outañ e unan evel e finvezh e teu tre unan en usved ar gravez, pa ne ve nemet dre reiñ d'ur c'heal un dreistboudlezh par da hini Doue.

Tro am bo moarvat da zistreiñ war ar c'hrafoù -mañ a denn da reiñ ur ster d'an ober politikel dre vras adal ma enouestl buhez un den da vat hogen kement-mañ a verkan adal bremañ a-benn diskleriañ perak ne voen ket tentet biskoazh da zegemer kelennadurezhioù zo ; abegoù a bolitikerezh rik, ovel ma lavaron, a voe moarvat d'am dibab hogen hemañ, endanat, ne voe ket diferet gant an abegoù-se hepken.

E meur a geñver all ivez e tistaolen ar mennoziou a oa awenet neuze gant gouarnerezh damfasgat Vichi. Bepred en devezh-se 10 a viz Gwengolo e raen anv eus Kempennadur ar gelennadurezh e Bro-C'hall. Evel ma oa displeget war vantoù ar gazetenn "Ouest-Eclair" e tisoc'he ar c'hempennadur-se da argas diouzh ar studioù klasel ar pep brasañ eus ar skolidi ; eus an darn-vudiañ eus ar re-se eta e vefe graet kalvezourion ha na gollfent ket o amzer o klask mont da vredourion. Seurt adaozadur eus ar gelennadurezh, evitañ da gaout palioù pleustrek degemeradus d'ar c'hentañ sell - pourchas muioc'h a ijinourion d'ar vro, da skouer - a ziwane e gwirionez diouzh un disfiz dehouat rik ouzh ar vredourion dre vras, a damalled dezho distrujañ ar gevredigezh gant o spered burutellañ (e gwirionez e teu ar re a reer bredourion anezho alies eus renkadoù ha n'o deus perzh ebet er galloud o ren). Damgompren a raen avat diwar neuze ne oa adsav ebet da Vreizh nemet goude distrujañ ar marzhvoud gall ; seurt labour distrujañ avat ne c'helle bezañ kaset da benn nemet gant bredourion bet stummet end-eeun gant ar studioù klasel.

Kement-mañ eveljust ne lavar ket o kaven mat ar gelennadurezh c'hall enni hec'h unan - un dilinennad hir a skriven diwar-benn an doare o doa ar C'hallaoued da dreuz-wiskañ o istor - hogen hepken e anzaven n'em boa gelllet barn Bro-C'hall nemet a-drugarez d'an deskadurezh klasel a oa bet roet din er skolaj. Er c'heñver-se adarre eta e chomen enebet ouzh mennoziou ar fagourion ha damfasgourion a oa o ren un tamm e pep lec'h d'ar mare-se en Europa.

War boentoù zo avat e oan prestoc'h da zigareziñ an Alamaned, en abeg d'ar pezh a hañvale din bezañ pilpouserezh a-berzh o enebourion. Ar Saozon, da skouer, a veze bepred oc'h ober anv eus gwir, lealded ha lezenn en o bruderezh a-enep d'ar genelwerinelourion alaman. Se a hegase ac'hanon un tamm mat dre ma kounen n'o doa ar stadoù gall pe saoz miret reolen

vuhez ebet p'edont o sevel o impalaeriezhoù. Pebeiladur an impalaeriezhoù a yae d'ober an Istor, Japan, da skouer, o kemer lec'h Bro-C'hall en Indez-Sina. Skrivañ a raen d'ar seitekvet a viz Gwengolo: "Karout a rafed e sentfe an hinienn ouzh reolennoù ar vuhezouriezh pa ne ra ket ar gouarnamantoù..." Rebec'h a raen neuze ouzh Bro-C'hall kemer da bennsturienn hec'h emzoug mad ar Stad hepmuiken, da skouer, o Klask distrujañ broadelezh Vreizh. Bez e ouien avat e oa an Istor hervez a skriven "ur steuenn a zireizhderioù hag a grizderioù..." Evit klozañ e anzaven e oa moarvat ar gaou gant Bro-Alamagn peogwir he doa flastret didruez pobloù bihan zo abaoe m'en doa Hitler kemeret ar galloud hogen - ma oa un impalaeriezh - da ren - e oa Alamagn dellezekoc'h eget Bro-C'hall, lakaomp, peogwir ne oa ket ken 'brein' hag hi.

An dodenn-se - hini 'breinadurezh Vro-C'hall' - a zeu endro alesik ebarzh pajennoù va deizlevr er mizioù-se. Seurt dodenne gwirionez a oa pleustret awalc'h e-touez an emsaverion a neuze hag a oa awenet dreist-holl, a gav din, gant bruderezh Dehouiz c'hall. Kustum e oad - Kalloc'h e unan a gomz eus kavelloù goull Bro-C'hall, ma ne fazian ket - da ziazezañ an tamall-se war ar feur-genel e Bro-C'hall e deroù ar c'hantved-mañ : Bro-C'hall a oa o tiboblañ. Hevelep fed avat, dre m'en em gav war ar rez stadegel, kevredoniell rik, n'en deus netra da welout gant ar vertuz ; da vibanañ e fell din lavarout n'eo ket c'hoazh diorreet awalc'h an dud evit m'en defe ar feur-genel un darempred bennak gant ar vertuz. Ne oufed lavarout, da skouer, e oa Porto-Rikoiz pe Indeziz vertuzusoc'h eget ar C'hallaoued en amzer-se war zigarez m'o doa ur feur-genel dreist da hini ar re -mañ.

Ur rebec'h all e oan akourset ivez d'ober da Vro-C'hall d'ar mare-se : bezañ digristen. Hogen eno adarre ne oa ket reizh va savboent rak levezonet e oan bepred gant treuzvennoz Dehouiz c'hall a glaske ober eus ar relijion ul

louzoù da wellaat gwall-stad o bro, egiz ma veizent anezhi. Daoust maz eus tu da soñjal ez eo pep sevenadur kravezel en e zonañ ne c'heller harpañ un dibab politikel bennak nenet war grafoù hag arguzennoù politikel rik a sell ouzh un aozadur gwell eus ar gevredigezh hag ar Stad. Moarvat, dre ma plad ar Stad gant an den e unan ne c'hell ket bezañ diseblant ouzh tonkadur mab-den hag hini ned eo e gwirionez. Hogen diaes eo nac'hañ ne ra "difennourion" zo eus ar gravez nemet klenkañ ar relijion en un urzhaz a dalvoudoù a zo estren ouzh ar relijion hec'h unan pe zoken arverañ houmañ da dizhout ur pal a zo a-is dozhi.

E gwirionez e teuis da zilezel buan awalc'h ar savlec'hioù-mañ dre ma voe anat din a-benn ur pennad amzer e teue darn d'an emsav oc'h en em harpañ warno, hep kaout tamm ebet avat ur spered breizhat yac'h. Goude ar brezel dreist-holl em eus anavezet meur a zehouad gall a ziskouezas bezañ douget da Vreizh dre ma oant bet kerseet gant disoc'h ar brezel en doa degaset an "demokratelezh vrein" endro da Vro-C'hall. Spis e welen avat ne oa ket tu da reiñ an disterañ fiziañs d' an nevez emsaverion-se ha na ziuzent Breizh nemet dre zesped hep anavezout na karout anezhi da vat.

Evit klozañ ar pennad-mañ e karfen merkañ diouzhtu peseurt levezon o deus bet va frouiadennoù brezel a neuze war dech va freder a-c'houdevezh. Diwar va bout arvestet d'ar mare-se ouzh dirollerezh ha trec'h an nerzh e pep lec'h hag a bep tu en Europa ez eus chomet em c'hreiz un diskred don war well-weladurioù zo eus an Istor. Moarvat e oa ar brezelioù en amzer-se frouezh luskadoù mennoziou a oa kozh awalc'h endev hag o doa krouet ar Stadoù a oa krog gant ar stourm neuze. Hogen moment-se a oa ankounac'haet diwar ar mare ma oa deroù an emgannoù. Neuze n'o doa mui ar mennoziou ofed ebet diouto o unan - ne varn penaos e oa par ar louperezh an daou stroll - an armoù ne lavaran ket hag, adarre, ofedusted

ar re-mañ ne ziwane tamm ebet diouzh gwirionez pe ziwirionez reizhded pe zireizhded ar c'helennadurezhioù. An Istor eta d'ar mare-se, a hañvale bezañ diboell, stag ha ma oa ouzh an nerzh hag an degouezh, ken e troe d'ur c'hoari dall : awalc'h e oa d'an Alamaned gonit bloaz pe zaou evit gellout aozañ ar vombezenn atomel ha bezañ trec'h en diwezh ; ma n'int ket deuet a-benn da fardañ an arm-se n'eur ket evelato evit lakaat ar genelwerinelouriezh diouti hec'h unan kiriek d'ar c'hwitadenn-mañ.

Gwiriadennoù a seurt-mañ eo o deus maget ennon an tech d'an arvarouriezh e-keñver finvezh an Istor a-c'houdevezh ha miret ouzhin a reiñ nemeur a feiz da gelennadurezhioù zo evel ar varksouriezh pe an Deilhardouriezh a laka da skedif dirak daoulagad an dud goanag ur baradoz-an-douar nevez ; ne lavaran ket ez direizh a-grenn seurt spi, na dic'hallus zoken ; hogen ne blij ket din kennebeut e ve diskouezet - evel ma vez diskouezet peurliesañ - egiz un disoc'h asur ha diogel.

E i l l p e n n a d

Adkregiñ a rin bremañ gant dezrevelladur an darvoudoù ha va deizlevr.

D'ar c'hentañ a viz Eost eta hor boa bet gweladenn Hamon, ar blenier stlejerez tredan hor boa anavezet e Cambrai. Chomet e oa er gêr-se goude ma oa bet diskleriet ar brezel nemet en doa kaset e diegezh da Vontroulez pa oa bet taget Norge gant an Alamaned, e miz Ebrel. War-lerc'h bombezadeg porzh-houarn Cambrai e oa en em strinket ar pep brasañ eus ar boblañs war an hentoù evit tec'hout diouzh an emgannoù ; darn anezho avat a oa bet lazhet gant mindrailherzed

ar c'hirri-nij alaman, en o zouez, eme Hamon, Monsieur LeBvre, a oa hon amezeg e skluz Selles. Tec'hidi all a reas meur a gant kilometrad war droad hag a voe tizhet a-benn ar fin gant an Alamaned ; ur vaouez a bevar-ugent vloaz a gerzhas evel-se war-hed daou-c'hant-kilometrad hag a oa yac'h pesk o tistreiñ, a-hervez, ha diskuizh meurbet.

Holl Gambreiz avat ne oant kotaet kuit. Poblañs ar "c'horon-ioù", hailhevoded eus ar gwashañ, o doa dalc'het an dachenn hag a oa deuet da vezañ mistri kêr ; graet o doa o mad eus an dispac'hadeg evit preizhata holl stalioù Cambrai. D'abardaez ar vombezadeg eta e oa un engroez a urupailhed o vale dre straedoù kêr, hag an holl anezho gwisket kran ha flamm da sabatuiñ, ar baotred o fogasiñ gant porpantoù ha brageier nevez skrapet er "Palais du vêtement", - bruzhunet an holl werennoù anezhañ da goulz ar vombezadeg - , ar merc'hel o vragal gant mantilli foulenn ker ruz a glote mui pe vui, a zo gwir, gant ar peurrest eus o dilhad. E-keit-se avat e kendalc'he an emgannoù ha gwashaat a rae divandennadeg al lu gall. P'en doa gwelet Hamon kement-se holl en doa soñjet saveteiñ e arrebeuri diouzh an distruj. Gant harp Gosset (1) en doa sammet e c'hlustraj war ur c'hobar ha dezouget anezhañ betek skluz Proville (2). Eno en doa skoachet e draoù ebarzh kavioù ur greanti-bier dilezet. Er c'havioù-se e oant chomet e-doug an emgannoù, o vevañ diwar ar pourvezioù o devoa degaset ganto. Pa zeujont er-maez e oa an Alamaned o terc'hel kêr. En ur stad vantus edo Cambrai avat, dizalbadet un niver bras a diez, dispennet tal-werennoù ar stalioù, skarzhet ar marchadurezhioù : ar soudarded alaman o doa riñset pezh a oa chomet a zilerc'h enno, na petra 'ta. Karterioù zo a oa bet distrujet, hini Cantimpré end-eeun

 (1) Ur blenier stlejerez-tredan emichañs.
 (2) Un hanter lev e kreisteiz kêr. Di ez aemp da vouara d' an dilost-hañv.

pa oa bet lakaet ar pont da darzhañ gant ar C'hallaoued (1). Hamon avat ne oa ket chomet vak pell amzer : deoget e oa bet kerkent gant an Alamaned evit enkevial ar miliadoù a gelanoù hanter brein endev a oa chomet hep seboladur ebet abaoe deroù ar gad, un dek devezh bennak arak, dreist-holl endro d'an ti-hent-houarn ha war an holl hentoù a skoe war-du ar c'hreisteiz. Ken heugus e oa al labour-se avat ma ranke unan bezañ badaout gant an alkol a-benn gellout kas anezhañ da benn. Kaset e vezent un tammig e pep lec'h da sammañ kelanoù a veze diskarget e bered Dorojoù-Hent-Paris ; 21 kelan a veze enkeviet ebarzh pep foz, war-bouez tri steudad a seizh, goude bezañ lamet prim-ha-prim o faperoù diganto ha saket anezho ebarzh seier. Epad dek devezh eta en devoa graet Hamon ar vicher-se, hep ehan ebet, o vont a-wechoù betek Amiens zoken. E-keit-se e kendalc'he da chom en e gav hep tredan na dour. Paest e veze kant mark bemdez hogen ne oa netra da bourchas er stalioù hag evit bevañ e ranke laerezh pourveziou an Alamaned en o dastumvaou - sukr pergen - ha mont d'o eskemm evit amann hag avaloù-douar er mereurioù ha na oant ket bet dilezet gant ar gouerion.

Tamm ha tamm e oa deuet ar vuhez da vezañ reizh endro ; tu a voe da implijout markoù an Alamaned ; ar re-mañ, a-hend-all, a bourvezas o unan ar stalioù ; darnaouiñ a rejont zoken bevañ evit netra d'ar boblañs a oa chomet. Un degouezh-enn espar en devoa kontet din an Hamon e ser kement-se. Ur wechad eta o devoa an Alamaned bodet ar "boblañs" war unan eus leurennoù-kêr, e skeud darnaouiñ bitailh ; stank e oa erru an dud eveljust. Pa voe echu al lodennadeg e savas un ofisour alaman war ur chafod ha kregiñ a reas d'ober un hir a brezegenn, hanter galleg, hanter alamaneg ha n'oa den evit intent grik ebet enni koulz lavaret. Pa voe fin dezhi e savas un ofisour all en e sav evit goulenn digant an dud

(1) Daoust da se e oa tremenet an Alamaned war bont Marquion, ur pont hent-houarn, daou-c'hant metrad uheloc'h, hag a oa chomet dibistig, Doue a oar perak.

sevel o brec'h ma n'o devoa ket komprenet mat komzoù e gevreur ; sed pezh a reas a-unvan an holl re a oa dastumet eno eveljust. Ma ! Kelaouennerion alaman war api, a-hervez, a oa o c'hortoz ar mare-se hag a gemeras luc'hskeudennoù e-leizh a voe daveet kerkent d'ar c'hazetennoù alaman - d' ar "Völkische Beobachter" emichañs - e-lec'h e oant da vezañ embannet gant ar meneg-mañ : "Cambrai-iz leun a amacoudegezhvat o kevarc'hiñ hor Führer muiañ-karet" ! Ha gwir pe c'haou eo ar sorbienn-mañ, n'oa ket evit lavarout deoc'h, tudañ !

En endervezh e oa deuet Hamon ganeomp war ar maez a-gevret gant va zad, ha chomet e oant a-sav en ur ver-euri da sikour ar gouerion d'ober an eost. Kement-se a zegasas soñj dezhañ eus e vugaleerezh emichañs rak diwar neuze ne voe mui nemet brezhoneg etrezañ ha va zad e-doug ar peurrest eus an endervezh.

Sed pezh a gavan ebarzh va deizlevr. Eus ur munud all ha n'em eus ket notet e teu koun din bremañ. D'ur mare, dre zegouezh, e oa bet graet anv eus afer an emrenerezh ha va zad en devoa goulennet ali an Hamon ; hemañ avat a seblante bezañ gwall nec'het gant ar goulenn a raed outañ ha n'ouie ket kaer petra respont, ken dic'hortoz e oa ar gudenn a save dirazañ.

Disadorn 3 a viz Eost 1940

Deuet eo an Alamaned da gouronkañ er ganol adarre hiziv. O neuñ e oan va unan d'ar c'houlz-se ha toullet em eus kaoz en alamaneg gant unan anezho a hañvale bezañ plijus awalc'h. Hemañ a grogas kentizh d'ober ur marvailh hir ha n'intentis dioutañ nemet e oa en em gavet war-dro Orléans da vare an arsav-brezel ; eno o defe ar C'hallaoued en em zaskoret hep en em gannañ ; ivez e vefe trec'het ar Saizon hep dale.

Disul 4 a viz Eost 1940

Setu an eil beuziad a zo tennet diouzh an dour abaoe m'emaon erru amañ. Hemañ a oa douger-lizhiri e

Melez ; mezh e oa moarvat paz eo aet d'en em deurel en dour. A-hervez e veze chabouz en e gêr alies ; war a lavarer ivez n'oa ket deuet a-benn da gemm post egiz m'en doa goulennet ; ha skoet e oa bet e spered gant donedigezh an Alamaned : un emganner kozh eus ar brezel a-raok e oa. Setu da vihanañ pezh a gonte an dud a oa bodet endro d'ar c'helvan hag int diseblant kaer. Penaos empennañ e vimp marv hon unan un deiz ? Ha daoust ivez ha n'eo ket ni hon unan a glemmomp pa glemmomp ar re varv ?

Tomm gwrizias eo an amzer a-hend-all. An Alamaned o deus tremenet an endervezh o tommheoliañ war ar c'hal, war o otoù-kouronkañ ; neuet em eus va unan : klouar e oa an dour.

Brudoù dibocell a gendalc'h da redek hep ma oufe den eus pelec'h e teuont ; evel-se e klever amañ emañ erru ar Saozon e ... Aac'hen ; rak ar Saozon eo o deus dilestret ha kroget gant un argadadeg vras a ra berzh eveljust. Gwir eo e rank an Alamaned bezañ skarzhet diouzh Bro-C'hall a-benn ar 15 a viz Eost pe an 8 a viz Gwengolo : setu pezh he defe kontet ar Werc'hez d'ur plac'hig vihan e-kichen Brest. Diskiant eo an dud !

Gellet em eus kavout an H.B. er vourc'h. Gwall fromet eur bet du-mañ o welout ar gazetenn-se gwerzhet d'an Alamaned !

Dilun 5 a viz Eost 1940

Goloet eo an amzer ; ne zeu mui an Alamaned da gouronkañ. Lenn ne ran ken ha gortoz darvoudoù trivlius ha na zeuont ket. Keloù ebet war ar c'hazetennoù nemet alaman e ve. War an Ouest-Eclair", da skouer, e vouler bremañ rumm-bennaoù diwar-benn al labour-douar ha kaerder ar vuhez war ar maez.

Goude kreisteiz ez on aet betek lenn ar Boulez da leuskel dour da redek ha goude-se da gavout va zad e Kervorin.

Eno em eus divizet gant ar vichercurion (1) a labour war vrielloù ar ganol ha merzet em eus e oa bev awalc'h o emskiant vreizhek ; ne felle ket dezho bezañ disprizet dre ma oant Brezhoned na servijout hepken da bourchas kig-kanol d'ar Stad c'hall ; n'int ket aheurtet a-enep d'an emrenerezh ; gwell e ve ganto ur Vreizh dieub eget ur roue e Bro-C'hall, emezo. Evit o c'hendrec'hiñ eo da arverañ arguzennoù o tennañ d'an armerzh (a zo skiantek, a-hend-all) pe oc'h hilligañ o emlorc'h rak youlet int da vezañ doujet evel Brotoned ; en deiz ha na vo ket re bell, spi am eus, ma vo Breizh dieub e teuo ar Vrezhoned - e-touez ar werin hag ar gouerion da nebeutañ - gwell Brezhoned eget ez int bet Gallaoued vat biskoazh. Awalc'h e vo da Vreizhiz chom dieub epad daou vloaz evit m'o devo c'hoant chom dieub da viken.

Goanagiñ a c'heller : Breizh n'eo ket ken tost -se da vervel evel broad ; ar pezh am eus huñvreet a zo gallus marteze : ur Vreizh a chomo Breizh da viken ha n'eo ket ur rannvro hevolebekaet evel kement a vroioù all o deus kollet o ene gant o yezh.

Dimeurzh 6 a viz Eost 1940

Chomet on er gêr betek 5 eur hanter; neuze on aet da gerc'hat amann e mereuri an Dialaez. Lennet em eus ur romant gant Bordeaux : "Les yeux qui s'ouvrent".

Stank awalc'h eo an Alamaned dre amañ ; atav e teuont da gouronkañ. Unan anezho a zo oc'h ober al lez da verc'h T., a gav din. Neuet em eus ivez.

Fellout a rae din ivez mont da Roazhon da welout roll an degemeridi er vachelouriezh hogenestad fall emañ va marc'h-houarn ha n'em eus ket gallet.

Dimeurzh 7 a viz Eost 1940

N'on ket loc'het diouzh ar gêr nemet evit mont da apotikerdi Mousterele-war-Izol. Lenn ha studiañ ar brezhoneg ne ran ken. N'em eus ket enocet ; kaer eo an amzer ha kouronket em eus d'ar beure-mañ.

(1) Breizhiz eus ar c'horn-bro-se e oant.

Warc'hoazh e vo skritellet disoc'hoù ar va-
chelouriezh e Roazhon. Iskis eo avat : goude bezañ roet ur
pouez dreistgoñvor d'an arnodenn-se em eus tremenet anezhi
hep teurel evezh hag abace em eus soñjet a-boan enni.

An darvoudoù politikel a zo kiriek da se
moarvat. En o c'heñver eo dister pep darvoud all. Ken dis-
heñvel e c'hell bezañ emgav Breizh warc'hoazh marteze!

Diriaou 8 a viz Eost 1940

D'ar beure-mañ hon eus merzet edo an Alamaned
amañ streget evit c'hoari. Da nav eur eta, sed ur c'harr alaman
o tegouezhout hag o skeiñ etrezek ar vilin ; dioutañ e tiskenn
un ofisour, e lakez hag ur jubennour, ur Rouman, a-hervez.
Goude bezañ komzet epad ur pennad gant an ao. Thouminot e
erruont du-mañ ha goulenn a reont gwelout va zad. Hemañ en
em gav kerkent hag int neuze da zisplegañ petra a vanke dezho :
fellout a rae dezho eta kaout endro ar barrikennoù eoul-maen
a oa bet stlapet er ganol da zeiz an arsav-brezel, hervez o
doa klevet : evit se e c'houlennent skarzhañ skorf an Onneg.
Ha va zad neuze da respont n'oa ket dav ober komendall :
gourhedet en doa dija ar skorf-se ha netra n'en doa kavet.
Setu avat hon ofisour alaman kounnaret ruz ha treiñ war-du e
jubennour ha stagañ d'ober dezhañ ur brezegenn hir daonet,
daztroc'het gant garموù skiltrus ha jestroù bras e-leizh :
peadra a oa da vezañ fromet rak ur bern trouz a rae ; evit
klozañ avat e troas war-du va zad ha diskleriañ e galleg
egiz "peroratio" emichañs, bepred ken taeret all : "Tout ça
c'est des mensonges, mensonges et toujours mensonges..."
Hag arc'hiñ a reas adarre e ve goulonderet ar skorf. Va zad
a zaelas neuze n'en doa ket perzh d'ober an dra-se ; dav e oa
dezhañ a-ziagent kaout grad-vat ar burevioù e Roazhon. Eus
koment-se avat ne rae hon ofisour, eveljust, foeltre ebet :
ar skorf a ranke bezañ goulonderet ha goulonderet e vefe.
War an taol e voe gwall nec'het va zad oc'h en em c'houlenn

ouzh peseurt beli e ranke sentiñ, an hini c'hall pe an
hini alaman. Da c'hortoz, a-benn gonit amzer, en doa soñjet
ivez gervel ac'hanon ha meneget e ve da marteze klask
doñvaat al loen gouez dre gomz en e yezh. Se a ris eta.
E gwirionez e voe torret da varrad ar c'habiten pa gregis
da zistilhañ un nebeut lavarennoù alamanek : e-lec'h ar
foeltr-brezel o taranal e voe dizoloet ur c'hargiad bihan
sioul, kuilh ha kofek, divjod livrin ha lunedoù aour dezhañ.
Met evelato, an nerzh a oa gantañ, ha kaer e voe gwinkal ha
diswinkal, sentiñ a voe ret a-benn ar fin. Stagañ a rejod
da sevel ar bannelloù.

E-keit-se en doa gallet va zad pellgomz e
burevioù Roazhon ha kemenn d'an Ijinour Portal petra oa an
aotrounez Alamaned e soñj ober ; o klevout se e oa aet Portal
en egar. "Ca ne se passera pas comme ça," emezañ, "il est
inadmissible qu'on ne m'ait même pas prévenu..." Dec'haloupet
e oa un eurvezh bennak war-lerc'h met erru war an dachenn
n'en doa gallet ober nemet souplesoù d'an ofisour alaman,
na petra 'ta ! A-benn neuze e oa diskennet ar soudarded
alaman er ganol, war o otoù-kouronkañ, hag edont a-zevri o
foutouilh el lec'hid, ar pezh a oa un ebat e welout evel-
just, o walennata gouled ar skorf a-heligena war glask ar
bidonioù eoul-maen daonet-se. Netra n'o doa kavet a-drugarez
Doue. A-hend-all, piv oar, goulonderet e vije bet an holl
skorfoù betek Roazhon, ken buan all !

D'en em frealziñ e oa chomet ar soudarded da
bakañ pesked, pa ne oa ket eoul-maen da gavout, ha berzh o
devoa graet en dro mañ. D'abardaez war a voe kontet din,
e tistroas ar jubennour e unan gant ur roued-karrezek er ganol
c'houllo ha kroget en doa da besketa evit e gabiten a-hervez.
Hennezh, a-hend-all, a oa tremenet du-mañ d'ar beure endev,
war-lerc'h an abadenn, a-benn en em zigareziñ evit an trubuilh
en doa roet deomp : deoget e oa bet gant an Alamaned, emezañ,
ha ret e oa dezhañ ober ar vicher-se, pezh n'oa ket gwall

vourrus, war a lavare (1).

En endervezh e teuis da vezañ bachelour hag emroner war un dro, ha setu penaos. Dre ma ouien e vefe skritellet disoc'hoù ar vachelouriezh en endervezh em boa lakaet em penn mont d'ober un dro e Roazhon d'abardaez. Degouezhot du-se war-dro peder eur ha me dinec'h kaer em boa skoet kerkent war-du leurgêr Sant-Melani. O tont tre dindan porched ar Skol-veur (n'eus mui ono hiziv nemet burc'vioù ar reizhourva gall hag annez ar reizhour e unan, a gredan) em boa kejet gant Maillot a oa bet korbollet e unan hogen a lavaras din edo va anv war roll ar re zegemeret. E devoud e c'hollis gwiriekat ar c'heloù-se danc'houde : merket mat e oa va anv a-gevret gant hini meur a genskoliad all ha n'oa ket en gortoz da gavout eno.

Goude bezañ chomet da varvailhat gant hini pe hini e tiskennis endro e kêr ha chom a ris da straniñ dirak al levrديوù hep kavout netra da brenañ. Fellout a rae din dreist-holl pourchas levrديوù diwar-benn an emrenerzh pe levrديوù e brezhoneg pe zoken emezelañ en emsav. Pignat a ris endro betek "Ti-Breiz" ; Gwalarn ne oa ket erruet dalc'hmat ; prometet e oa bet din e vefe aze ar yaou war-lerc'h..."

A-benn ar fin eta e oan aet en devezh-se betek sez "Kuzul Broadel Breiz", ur c'hankiz bras gronnet gant ul liorz ec'hon, straed Waldeck Rousseau. Seizh eur hanter e oa pa oan en em gavet du-se. O tont tre en ur burev eno em boa kejet gant Marcel Guieysse ; war e dro e oa div vaouez, div vroadelourez, war a gomprens, a oac kentañ pebezh trubuilhoù o devoa bet da c'houzañv a-berzh ar pennadurezhioù gall en abeg d'o mennoziou. Marcel Guieysse a welen neuze evit ar wech kentañ ha n'oa ket sur da vezañ e adwelet a-c'houdevezh.

(1) Uheloc'h en hanternoz en em gave emic'hañs ar barrikennadoù coul-maen. E Sant-Medard e oa chomet arsavet un treniad coul-toullad mat a varrikennoù ha n'en doa prizet o daskorif nemet pa oa bet laketa ur bistolenn dindan e fri.

N'em boe ket tro d'e zaremprediñ nepred. D'ar mare-se em boa taolet evezh ouzh e enebrez kastiz hiraet gant ur bouchig brizh begek, e gorfadur moan hag izil, e zoare dibabet ; fall e oa dija e zaoulagad ha poan en devoa, a gav din, da ziverzout an dud a-dreuz gwerennoù tev ha livet e wask-fri. Gant hemañ e oan chomet da gomz dreist-holl. Displeget em boa dezhañ perak e felle din emezelañ en emsav "Kuzul Broadel Breiz" (1). Goulennet en doa diganin ober bruderezh endro din ar muiañ ma c'hellen ha degas arc'hant da "gKuzul Broadel Breiz", ma oa tu ; an arc'hant an hini eo a vanke : "De l'argent, de l'argent pour la propagande, c'est le nerf de la guerre..." Ali awalc'h e oan gantañ mat n'hellen ket mirout a soñjal e oa gwall faziet o prezeg din egiz pa vijen bet ur mondan pinvidik mor pa n'em boa ket ur gwenneg toull war va anv. Evelato e oan bet laouen o klevout ar c'homzoù-se rak sur e oan goude-se ne oa ket an emrenerion paeet gant an Alamanned egiz ma lavare va zud endro din.

N'em boa ket gellat pourchas program Pondivi a c'hoantaen kaout abaoe ur pennad amzer. Diskleriet e voe din ne oa ket bet moulet c'hoazh. Anv a oa bet eus tra pe dra ha dezrevellet em boa pergen penaos e oan deuet da vezañ emrener. Levrديوù brezhonek am boa goulennet ivez (e pep lec'h e Klasken pourchas levrديوù brezhonek) ; n'oa ket tu avat, a voe lavaret din, rak al levrديوù brezhonek a oa bet distrujet pe a oa dalc'het bepred dindan siell gant ar polis gall (2).

Abarzh loc'hañ em boa graet anaoudegezh gant Debeauvais. Diouzh a gounan hiziv e sav d'am spered skeudenn un den yaouank c'hoazh, gant blev du troc'het berr, daoulagad du krak en e benn, reoliek e dresoù, sirius ha nerzhus e zoare.

(1) N'ouzon ket ha savet e oa bet un urzhiadur politikel bennak d'ar mare-se. Roet em boa dek lur hogen n'ouzon ket mui evit petra.
(2) An dra-se a oa c'hoarvezet e Paris, e Kêr Vreizh, pergen.

E zamwelout n'em boa graet ken, stardañ e zorn a-raok loc'hañ. Diwezhat e oa avat ha poent e oa din distreiñ d'ar gêr (1).

Diwener 9 a viz Eost 1940

D'ar beure-mañ netrararbennik : savet on diwezhat evel boaz ; lennet em eus ; drailhet em eus keuneud evit an ti (2), studiet ar brezhoneg. En endervezh on aet gant va zad d'ober un droiad, a-hervez, rak e gwirionez n'en doa netra d'ober. Tremenet omp dre nouspet mereuri ; eus an droiad-se avat hon eus degaset daou litrad alkohol (odivi avaloù) a vo eskemmet en ur stal eus Sant-Jermen a-benn kaout eoul ha sukr. E-tro 10-11 eur noz e oa paz omp en em gavet er gêr.

Un darvoudig hepken da notañ : e-kichen pont Plouzer on degouezhet gant daou soudard alaman ha chomet e oanda varvailhat ganto epad un herradig. Klasket em boa degas kudenn Vreizh war an doubier ; ar re-mañ avat ne oant ket dedennet tre gant ar gudenn-se eveljust, a oa, a gredan, dreist d'o intent. Gant gred avat o devoa diskouezet din ur pennad eus ar gelaouenn edont o lenn e-lec'h e oa anv eus madelezh ar soudard alaman, ar "Mikael mat" tamallet e goue gant bruderezh divalav ar C'hallaoued a gonte penaos e troc'he daouarn ar vugale epad ar brezel diwezhañ.

Bezef pe vezef, an dud dre amañ ne gredont ket re c'hoazh e madelezh ar soudarded alaman. E kement lec'h m' on tremenet e c'hortozef trec'h D.G. hag ar Saizon.

Disadorn 10 a viz Eost 1940

N'eus c'hoarvezet netra hiziv. Studiañ a ran ar brezhoneg ha lenn a ran. Kaer eo an amzer bepred. Ar c'hiri-nij alaman a dremen bepred a-us d'hor penn, a unanoù pe a strolloù, o skeiñ etrezek Bro-Saoz pe o tistreiñ. Izef e

- (1) Alliesik e tleef adwelout Debeauvais o-kerz an daou vloaz war-lerc'h hogen biskoazh n'em boe tro da skoulmañ mignoniezh gantañ. Alan Louarn en deus e anavezef kalz gwell egedon.
(2) N'oa ket tu da bourchas glaou; gant keuneud eus ar vro e veze graet tan.

nijont, ma c'heller merzout o bombez. Ken stank int bet gwelet en devezhioù-mañ ma kred darn ez eo kroget an gad bras a-enep da Vro-Saoz (1). Skingomzerezh ar Saizon a brezeg ar gasoni a-enep d'an Alamanned hag a gemenn ez eus diskaret nouspet karr-nij alaman. Diaes eo avat gouzout ervat petra a c'hoarvez ; brudoù a bep seurt a red adarre ; emberr moarvat e vo anat disoc'hoù ar gad-mañ, ma c'honez an Alamanned ; ma c'hwitont avat n'eo ket prest ar brezel d'echuiñ rak ne vo ket awalc'h d'ar Saizon dizarbenn an Alamanned : ret e vo dezho ivez adaloubiñ Europa ha se n'int ket gouest d'ober diouzhtu : n'o deus ket kirri hobregonet h.a. Ouzhpenn-se e vo ret dezho reiñ lamm da Italiz.Ouzhpenn-se, goude ar goañv e vo divodet al lu gall, ar pezh a chom anezhañ atav. Mouze ? Ne vern peseurt disoc'h en devo ar brezel, gant m'ho devo Breizh ar stad a rank kaout evel broad, e vo mat an traoù(2).

Disul 11 a viz Eost 1940

Devezh dizarvoud. An it. Manant he deus gouezet a-drugarez d'an emrenerion epelec'h emañ he gwaz ; a-hervez ne vo ket kaset ar brizonidi vreizhat da Alamagn ; awalc'h eo kement-se evit ma vefe an it. Manant douget dezho.

Dilun 12 a viz Eost 1940

Gortoz a reer bepred d'ar brezel un disoc'h ha na c'hoarvez ket. Pegoulz e vo echu ar brezel-mañ ? Pe da vare e vo Breizh dieub ? "

Ar pajennadoù da heul ebarzh va deizlevr ne reont nemet dezrevoll an tabutoù diziwezh an boa lakaet da sevel er gêr gant va mennoziou dispac'hel nevez. Eus an tabutoù-se em eus komzet e-lec'h-all. Kement-se a-hend-all ne vire ket ouzhin a studiañ brezhoneg hag a lenn - galleg eveljust - meur a survezh

- (1) Ma ne fazian ket e oa boulc'het kad Vro-Saoz abaoe daou zevezh.
(2) Se a skriven hogen e gwirionez ne welen ket mat penaos e c'helle ar mennad-se bezañ kaset da wir e degouezh trec'h ar Saizon en defe degaset endro beli ar C'hallaoued e Breizh.

bomdez. "Ni ange ni bête" eus Maurois ha "L'immoraliste" eus Gide am boa lennet en devezhioù-se. Levrioù brezhonek avat a oa kalz diaesoc'h da gavout. Dre zegouezh em boa diskoachet eil levrenn "Barzhaz Breizh" embannet e 1839 hogen seurt levr ne c'helle ket sikour ac'hanon kalz da zeskiñ yezh lennek an ugentvet kantved. Gant dudi em boa lennet anezhañ koulskoude.

D'an 23 a viz Eost em boa evezhiet ne dremene mui ar c'hirri-nij alaman o skeiñ war-du Bro-Saoz ; dastumet em boa e oa echu argad-nij an Alamaned ; ar c'hazetennoù -- da lavarout an "Ouest-Eclair" a rae eus an argad-nij-se ur ganoliadeprientiñ, pezh a roe da grediñ e oa marnet an Alamaned da zouarañ e Bro-Saoz ha da gas da bonn eno ur vrezeliadenn bennak. Hogen netra ne oa c'hoarvezet adarre en devezhioù war-lerc'h.

Disador 24 a viz Eost 1940

Hiziv n'on ket bet er gêr tamm ebet e-doug an deiz. D'ar beure-mañ, a-gevret gant va breur, hon eus stlejet ar skaf betek skluz ar Beuzid ; du-se hon eus sammet anezhañ gant etivi ; neuze stlejañ anezhañ endro betek skluz Sant-Jermen, diskargañ ha dastum ar c'heuneud el lab adreñv an ti. Skuizh marv e oamp a-benn ar fin.

D'abardaez, da bemp eur hanter, ez on loc'het war-du Bruz. O treuziñ Roazhon n'em eus ket kejet en dro-mañ ambrougadegoù kirri-alaman. Da c'hwec'h eur hanter odon e Bruz ; ne oa eno nemet un nebeut soudarded alaman hag un toullad labourerion eus Kenurzhiadur Toët (1) en o livrez gell a oa oc'h evañ en ostaleri an it. Martin. Paeañ a ris dleoù M.M. hag ez is da gerc'hat he zraoù e ti an dim. Aline a reas din un degemer mat hag a ginnigas din sistr ha bara amannenn.

O tistreiñ e verzis e oad o sevel karrdioù war an aerborzh. Roud ebet avat a garr-nij alaman. Prenañ a ris an "Heure bretonne" o tremen e Roazhon.

(1) Ar c'henurzhiadur-se a savas, porgen, moger an Atlantel a weler c'hoazh dilerc'hioù anezhi war hon aodoù.

Disad 25 a viz Eost 1940

D'ar beure-mañ, da beder eur, o deus ar Saozon bombezet laneg an aerborzh e Sant-Jakez. Dihunet eo bet an holl er vourc'h gant an tarzhadennoù. Sklerijennet e oa an oabl gant fuzennoù ha feskennadoù gouloù al luc'hvannerioù a oa o furchal en oabl evit dizoleiñ ar c'hirri-nij saoz. Setu pezh o deus kontet din va zud. Evidon-me n'em eus gwelet na klevet netra : kousket a raen evel ur broc'h.

An Alamaned Melez a zo deuet adarre da gouronkañ war un dro gant va breur ha ganin-me. Lezirek eo avat : chomet eo da dommheoliañ tra ma neuemp-hi betek skluz ar Beuzid.

Bepred e kreder kenstart e trec'h ar Saozon hag e bezoud Doue. Dic'hallus eo e ve faezhet ar Saozon rak ... Bro-C'hall a zo divarvel ; dre se end-eeun e rank Bro-Saoz bezañ trec'h. Kement a ra ar Saozon a mat ; berzh a reont e pep degouezh, da sabatuiñ, tra ma c'hwit mantrus an Alamaned a-hed ar wech ; erfin, un arm nevez ijinnet er Stadoù-Unanet a zo o vont da eilpenañ amplegoù an emgann a-eneb d'ar c'hirri-nij (1).

A-hend-all ez eur spontet gant ar seziz-aodoù o vezañ ma kemenn Churchill e vo emgannoù betek 1942. A-benn neuze o devo an Alamaned skrapet pep tra, a soñjer (diya o deus an Alamaned deoget ar marc'hoù-houarn) ; abarzh pell n'hor bo mui peadra d'en em vagañ na d'en em wiskañ (2). "

Evidon-me, daoust ma ne greden ket eveljust e oa ar Saozon tost da vezañ trec'h ne soñjen ket nemeur kennebeut evit keloù se e oa an Alamaned gouest da echuiñ ar brezel hep dale. E fin miz Eost em boa notet e oa aet darn eus tiriagezhioù Afrika c'hall ar c'heider a-du gant ar Saozon ha D.G. Ret e oa eta bezañ en gortoz eus un hir a vrezel. Pa gounen

(1) Emichañs ez eus anv amañ eus ar radar, daoust ma n'on ket sur.
(2) Amañ e par endro spont hendadel rummadoù-tud is-vaget, egiz hin va mamm end-eeun a denne o bevañs eus ar mor pe an douar mat ar re-mañ ne roent ket bepred ar pezh a c'hortozed diganto. En un doare iskis awalc'h e konted dreist-holl war ar Saozon evit echuiñ emberr ar brezel. Goude ma vos aet war danavaat ar spi a lakaed en diougenoù e oad prest da zegemer trec'h an Alamaned gant ma vije deuet buan.

avat an tachennoù divent dalc'het kerkoulz all gant an Alamaned e oa anat din e talvez e un troc'h saoz kement hag ur brezel hir ; an dra-se eo avat a oa diaes d'an dud degemer. Skrivañ a raen d'ar c'hentañ a viz Gwengolo : "Ret e vo d'ar Saizon sevel un aerlu ha se ne vo ket graet en un deiz ; dav e vo dezho ivez aozañ un tirlu gouest da faezhañ hini an Alamaned hag ar servij-soudard n'eo ket boaziet abaoe pellzo e Bro-Saoz. Rak-se - nemet e teufe an Alamaned a-benn da gas da benn ur brezel prim er miz-mañ pe en nevez-hañv a zeu e ranker bezañ en gortoz eus ur brezel hir."

Endro din avat o doa kalz ar spi foll e vefe aet kuit an dalc'herion hep dale. Ha klevout a raen adarre ar brud e vefe tangwalladeg ha lazhadeg gant an Alamaned pa vefent o kilañ.

Deroù miz Gwengolo a voe gwrizias. Ober a raen va mad eus an amzer vray evit bale war varc'h-houarn. D'an eil eus ar miz-mañ - d'ar beure, a-hervez, e oa kouezhet ur c'harr-nij alaman etre Moustereel-war-Izol ha Gwipel - e oan aet betek Roazhon, bepred gant ar soñj da bourchas Gwalarn e "Ti-Breiz" hogen evel boaz em boa graet kazeg. N'em boa degaset a-benn ar fin nemet levrioù gallek "L'âme obscure" eus Daniel-Rops ha "La retraite sentimentale" eus Colette : a bep seurt a lennen e gwirionez. Antronoz, d'an tri, em boa graet un droiad betek Dol e ser pourmen hepmuiken. Dre Gemblizieg e oan tremenet ; foar a oa e kêr en devezh -se hag an holl o kemer ebat er c'hezeg-koad. E Dol em boa merzet un nebeut soudarded alaman e kêr : ar banniel kênel-werinat a oa o stlakañ a-us d'ar maerdi, daou daoweler alaman o sevel gward endro dezhañ ; un nebeut kirri alaman a oa arsavet war ar blasenn. A-hend-all, a-hed an hent n'em boa merzet roud ebet a zalc'hidigezh.

Dimerc'her 4 a viz Gwengolo 1940

48 derez ha mouch avel ebet. Dindan an heol e kredfe unan en em gav ebarzh ur forn. Da noz em eus klevet

ur brezegenn gant Hitler en alamaneg. N'em eus ket intentet kalz tra nemet e oa ar Saizon o vont da zamantiñ a-benn ar fin, e oa aet e habaskted da get abaoe tri miz n'emaint o vombezañ ar sivil e Bro-Alamagn, e oa o vont da gas anezho da get.

Farsal a rae ivez bep an amzer - pemp pe c'hwec'h gwech - ha prizet meurbet e oa e fentigelloù moarvat rak bep taol e veze an engroez o tic'hargadennañ.

An holl a gemer digarez er brezegenn-se evit diogeliñ e krogo hep dale an argadadeg vras a-enep da Vro-Saoz, d'an 8 a viz Gwengolo, eveljust.

Diriaou 5 a viz Gwengolo 1940

45 derez. Padout a ra ar wagnad wrez.

Chomet on er gêr hep ober netra. An ao. Guitton a zo bet galvet endro gant an Alamaned : gwall-ziougan a zo e kement-se, a lavar an dud. Fourgas ivez diouzh tu Roumania : drouklaouen eo broiz abaoe m'int bet rediet da zegemer termenou un emglev ha na blije ket dezho gant an Italianed hag an Alamaned. E Lunden e lavarer n'he deus ket Roumania asantet a galon da zivizoù "diktat" Wien. Ma sav bec'h avat e c'heller bezañ sur e aloubo Alamagn bro-Roumania a-benn diwall an tireoulvaou.

Digwener 6 a viz Gwengolo 1940

Ken touforek eo ebarzh va c'hambr ma kredfe unan bezañ en un ti-kouez. N'em eus graet nemet studiañ brezhoneg e-doug an deiz.

Enep-urzh a zo bet : ne vo ket a soudarded alaman e Sant-Jermen.

Ar skingomz saoz a gemennemañ an Alamaned o vont da ziswiriañ an arsav-brezel ha da aloubiñ Bro-C'hall a-bezh war zigarez n'eo ket miret divizoù an emglev gant ar C'hallaoued.

Disul 8 a viz Gwengolo 1940

C'hoarvezet eo ar vombezadeg talv-gwall e Lunden: pevar-c'hant den lazhet, 1.300 den gloazet, hervez skingomz c'hallek an Alamaned e Paris a vourr o reiñ munudoù e-leizh diwar-benn ar vombezadeg-se. Buhez kêr Lunden a zo dispennet holl : distrujet kalz greantioù, dilabour ar vicherourion, distrellet an annezourion, dizurzhiat ar c'hehenterezh, diaozet pellgomzerezh ha pellskriverezh, dizalbadet ar greantioù aezhenn-leskiñ h.a.h.a. Heugus a-benn ar fin.

Dilun 9 a viz Gwengolo 1940

Goude m'he deus ranket Roumania dizerc'hel darn eus he ziriegezh ez eus c'hoarvezet ur c'hemm gouarnerezh enni : ar "warded houarn" a zrouklazhe Calinesco bloaz zo o deus kemeret ar galloud ; ar roue ha n'en deus mui an holl vertuzioù a oa lakaet war e gont warlene - n'en deus graet netra evit ar bobl, n'en deus ket pledet gant ar gouerion - a zo bet dizornet ha ranket en deus reiñ e lec'h d'e vab. Setu ur vro ouzhpenn o vont e strishoc'h dalc'h an Alamaned.

Teñvalaet eo an amzer abaoe dec'h. Netra ne c'hoarvez daoust m'emañ an holl o c'hortoz dilestradeg an Alamaned e Bro-Saoz. Studiañ a ran brezhonag hogen ne dizhan ket pourchas levrion.

Diriaou 12 a viz Gwengolo 1940

Da noz hon eus klevet ur brezegenn gant Churchill. Prest eo ar Saozon da argas an Alamaned ma klaskont dilestrañ, emezañ. A-benn un nobeut devezhioù eta e tlefemp gouzout peseurt planedenn he devo Bro-Saoz. Amañ o kred an holl dud e krogo an argad meur a-benn ur sizhun hag e vo trec'het ha Friket an Alamaned ken e vo dizalc'het ar broioù a zo e dalc'h an Alamaned abarzh miz hanter. Eveljust, mar gallje Breizh bezañ dieub neuze zoken e vefe gwell an traoù evel-se.

En endervezh on ast da Roazhon goude bezañ

heskennet keuneud. Tremenet on evel boaz e "Ti-Breiz" hogen n'em eus kavet eno tamm "Gwalarn" ebet adarre. En em c'houlenn a ran pe da vare e teuy er-maez a-benn ar fin. Du-se e Roazhon, a-hend-all, n'em eus merzet netra arbennik nemet soudarded alaman en o livrez glas pe louet.

Diwener 13 a viz Gwengolo 1940

Ar glav ha n'hor boa kot gwelset abaoe pellzo a zo en em ziskouezet ; e-doug ar beure-mañ hag e deroù an endervezh ez eo kouezhet hep astal ebet ken em eus ranket gourzezañ ar valeadenn a folle din ober da dachenn-emgann Sant-Albin-an-Hiliberenn, un ugent kilometrad bennak ac'hann.

Gant Y. em eus bet keloù diwar-benn ar skolañ. Lakaet eo bet an digoradur d'an eil a viz Here. O vezañ avat maz eo dalc'het an hunvaoù gant al lu alaman e kouskimp e kêr "dans des familles sûres"! Bourrusoc'h e vo hor buhez eta eget warlene.

Ar c'hirri-nij alaman a chome disgwel

abaoe bombezidigezh Sant-Jakez a zo bet merzet adarre; bepred e pad al "Luftwaffe" da bilat kêr Lunden gant disoc'hoù liesseurt hervez stlennadoù an Alamaned pe ar Saozon. Padal, argadadeg an Alamaned e oad en gortoz anezhi - hervez Churchill e unan - n'eo ket loc'het c'hoazh.

O tistreiñ diouz ar vourc'h hon eus klevet e oa ar vrec'h zu oc'h ober he rouz e-touez an Alamaned e Sant-Malo. Rak-se e vefe berzet dont tre er gêr-se. En abeg da se ivez ez eus bet ken lies a drenioù o tremen war al linenn en devezhioù-mañ hag o skeiñ war-du Roazhon, sammet gant soudarded alaman hag o stalikerozh, marteze...

Disul 15 a viz Gwengolo 1940

Amzer divalav e-doug an deiz. Gedal a reer bepred argad an Alamaned a-enep da Vro-Saoz hogen hemañ n'eo ket boulc'het c'hoazh ; an holl a gred ez eo kiriek d'an dale-se bombezadegoù ar Saozon war lu-dastumadurioù ha bigi-dezougen an Alamaned. Dont a reer da grediñ zoken ne vo

mar-teze dilestradeg ebet, pezh a zo nec'hus rak, hep dilestradeg, n'o devo ar Saozon tro ebet da faezhañ an Alamanned ha neuze, penaos e vo sevenet an diougan ? A-dra-wir e kroger a-wechoù da arvariañ diwar-benn an diougan-se ha plegañ a reer da grediañ e pado ar brezel, mar-teze, betek ar bloaz a zeu ! "

D'ar seitek a viz Gwengolo hor boa degemeret ul lizher a-berzh va moereb Anna o kemenn deomp e oa klañvet an tad-kozh adarre, evel m'en doa graet er bloaz a-raok. Pouzsur e oan a-benn neuze e vefe marv va zad-kozh kent deomp diraez Gwaien. An tremenvan nevez-mañ o c'hoarvezout triwech'h miz bennak war-lerc'h hini va zad-kozh all a skoe awalc'h va spered dre ma kounen pebezh kemm a c'helle en em gavout etre daou rummad a dud : evit va zadou-kozh e oa Bro-C'hall ur vaon avat e oa bet graet Gallaoued, fals Gallaoued avat, hogen ne hag a glaske adkavout hengoun va gouenn o c'have dirazon evel enebourion. Moarvat e oa broudet o enebouriezh gant an estrenvan : en un taol e oa kouezhet en e boull ar bed ma oant boaz da vevañ ennañ ; ivez gant ar spont : doujañ a raent na ven aet da emezelañ en ur strollad dispac'herion tonket dezhañ c'hwitañ gant e vennad. Kement-se a zamveizen moarvat hogen ne zistane ket va c'hwervoni ha va droukrañ ouzh ar re a lakae hevelep priz d'am broadelezh adkavet ha am barne da addeskiñ va yezh pa oa re zivezhat evit gellout diskar ar voger am disranne diouzh va zad-kozh rak gant kerse e veizen ne c'halljen bilken komz outo er yezh a oa o hini ha va hini.

D'ar merc'her 18 he doa va mamm graet he soñj mont da Waien hag evel er bloaz a-raok he doa goulennet diganin hec'h ambroug. Aet e oan da gentañ eta betek Roazhon ha c'houlenn un aotre e burevioù ar 'Pontoù-ha-choaserioù' rake karg va mamm e oa skluz Sant-Jermen - va zad a oa eveshaer ar ganol - ha goude-se em boa graet un dro e Sant-Albin-an-Elvinieg, er "c'hKomandantur" evit arc'hiañ un "Ausweis" a rod notre da vont war an aod

(gennva difennet epad an dalc'hidigezh alaman) dre an tren. En amzer-se e oa distank tre an trenioù hag ur veaj poanüs e oa mont eus ur penn Breizh d'egile, ken start zoken ma soñje din e vije bet koulz din distreiñ da Waien war varc'h-houarn. E gwir, evit tizhout Gwaien dre an tren ne oa da da zibab nemet etre div euriauoueg ken diemsav an eil hag eben. Gant unan e loc'hed diouzh Sant-Jermen da 11 eur 30 ha diouzh Roazhon da 14 eur 38 hogen ned ae ket an tren-se pelloc'h eget an Orient e-lec'h e tegouezhe da zek eur noz! Eno e vije bet ret nozvezhiañ eta a-raok kaout un tren all o skeiñ war-du Kemper ha c'hoazh, alese e rankemp sevel gant un tren klotus a-benn tizhout Douarnenez ha Gwaien. Didennoc'h e oa an euriauoueg all hogen evelato e ranked lakaat daou zevzhez eus Sant-Jermen evit diraez Gwaien. Mont a raed kuit eta diouzh Sant-Jermen da 18 eur 50 d'abardaez ; antronz veure, e Roazhon, e pakemp tren 6 eur 52 a zegouezhe da Gemper e-kreiz an abardaez ; eno adarre, arat, e vije bet ret deomp gortoz ar 'c'hloterezh'.

Dilec'hiet hor boa eta diouzh Sant-Jermen da 18 eur 50 ; noziñ a rae pa oamp erruet da Roazhon a oa o veuziñ tamm ha tamm a-benn neuze en deñvalijenn : gant an c'heulfe ne oa gouloù ebet e neb lec'h ; morglav a rae ; baleet hor boa betek ar Winun war glask un ostaleri evit koaniañ hogen n'hor boa ket kavet. Dav e oa ivez klask bod evit an noz. En "Hôtel du relais" avat e oa bet respontet deomp e oa dalc'het an holl gambroù gant an ofisourion alaman ; e kêr he oa plus ebet el letioù ; mestr ar stal en doa aliet ac'hanomp eta da c'houlenn herberc'h e gwazva ar repuidi war leurenn ar porzh-houarn ; eno e oamp sur da vezaff lojet, emezañ.

Tra ma oamp o klask e oa tremenet ur c'harr-nij saoz a-us da gêr ; kentizh e oa staget un ugent bennak a luc'h-vannerioù alaman staliet - war a hañvale - e kreisteiz Roazhon, war-dro Sant-Jakez, da skubañ an oabl noz a bep tu. Hogen izel

ha stank e oa ar c'houmoul, teñval an noz ; an holl dud - Roazhoniz ha soudarded alaman - a oa chomet a-sav da zis- loagal ouzh ar c'harr-nij disgwel hogen netra ne oa bet merzet.

Gwazva ar repuidi a oa neuze ur rumm tiez -prenn a oa bet prim-savet war leurenn ar porzh-houarn. Eno e teue da novezhiañ ar re a ranke kemer an tren da veure. Ebarzh un hunva, war goll'hedoù plouz e c'helljomp gourvez hep diskuizhañ nemeur gant an todilhon a rae ar veajourion all endro deomp. War ar marc'had e oa kroget an difenn-enep-kirri-nij alaman da dennañ e-kreiz an noz ; nijerezed o doa fraoñvet epad ur pennad a-us d'hor pennoù. Ne oa ket padet pell an dourni hogen gant gras am boa gwelet ar mintin o sevel.

Loc'het e oamp d'an eur verket : 6 eur 58. Ret e oa kemm tren e Redon evel er bloaz a-raok. Ne errue tren Kemper nemet da nav eur ; amzer hor boe eta da zebriñ lein en "Hôtel des voyageurs" ; soudarded alaman a oa eno ivez. Soñj am boa e oa soudarded saoz en o lec'h er bloaz kent ha n'oant ket karet nemeur gant Redoniz d'ar c'houlz- se : an dud a damalle dezho en em zerc'hel evel m'o defe graet soudarded ul lu-derc'hel. Daoust ha prizout a raent muioc'h an Alamaned ? Ne oa ket kredapl hogen n'em boe ket tro d'ober ar goulenn-se outo.

Ar peurrest eus ar veaj betek Kemper am boa graet gant Alamaned hag ur Flandrezad eus Dunkark en doa dezrevellat deomp penaos e oa Kont on e vro. Goude ma oa bet freuzet Dunkark gant ar bombez alaman e oa bet flastret dindan re ar Saizon. Darvoud ebet e-kerzh hor beaj a-hend-all. Adal Rosporden hepken hor boa klevet brezhoneg gant daou gouer a oa pignet ebarzh hor c'hombod.

E Kemper hor boa kemmet tren evit tizhout Douarnenez. Goude bezañ gortozet e-pad ur frapad en ur c'hafedi dirak ar porzh-houarn - ur bagad soudarded alaman a oa tremenet

en ur ganañ e-keit ma oa tud eus ar vro o kroزال outo hanter e galleg, hanter e brezhoneg - e oamp pignet ebarzh ar c'harr-boutin a zlee kas ac'hanomp betek Gwaien.

Etre ar Pont ha Gwaien hor boa gouezet ar c'heloù gant ur vaouez kozh a anaveze va mamm : marvet e oa va zad-kozh d'ar sadorn a-raok endev ha graet e oa bet an obidoù d'al lun ; gant an darvoudoù hag an trubuilh ne oa ket bet tu da c'houzaviñ ac'hanomp. A-hervez e oa bet berr tre e gleñved ; nouennet e oa bet ur wech ouzhpenn ha tremenet e oa hep poan ebet, evel dre o gousk.

Daoust ma oa ar c'heloù-se da vezañ gortozet e voen doaniet gantañ, evit abegoù am eus displeget uhel- oc'hik ; ivez, an tremenvan-mañ a verke evidon diwezh va bugaleerezh ha fromet e oan bet o chom hep kavout va zad- kozh en ti a oa stag outañ koulz lavaret. Soñj am boa e oa yac'h-pesk daou viz a-raok.

Ne oa ket bet gwall vourrus eta an nebeut devezhioù am boa tremenet e Gwaien d'ar mare-se. Chomet e oamp eus ar yaou betek ar meurzh war-lerc'h, 24 a viz Gwen- golo. An amzer ne oa ket brav ; glav a rae ; ur wech bennak e oan aet betek Traczh-Kadeg ha distroet e oan dre Gêrvrec'h. Tro pe dro ez aen da vale war ar c'hae, va unan penn, hag ar soñj eus va zad-kozh a greske va damani.

Gant va moereb Rose en em gave e Gwaien d'ar mare-se e oan aet da weladenniñ ur goniterv d'am mamm, Ameli, a oa o vevañ er ru Doub e-lec'h e talc'he ur stal ; gwechall moarvat e oa bet karabasenn en ur presbital rak diwar-lerc'h ur person e oa deuet dezhi da hêrezh ur mell armellad levrioù liesseurt, ar pep brasañ anezho avat oberen- noù Bossuet ha Fénelon keinet e du ha na zleant ket bezañ lonnet pizh na stank ganti, kredapl awalc'h. O furchal mat el levraoueg-se em boa diskoachet evelato ur "Buhez ar Sent" am boa goulennet hag a oa bet profet din. Siwazh, kavout a ra

din ez eo bet kollet al levr-se.

A-hend-all e oa borrodet awalc'h va fenn gant klakennerezh ar marc'hed endro din. N'em boa ket da glemm moarvat diwar-benn va maeronez, c'hoar yaouañ va mamm, Rose, a oa komunourez pe, da vihanañ, dimezet d'ur c'homunour (d'ar c'houlz-se avat ne oa ket troet c'hoazh an Alamand a-enep d'ar Rusianed ; kentoc'h mignoned e oant zoken;) na kennebeut diouzh va c'henderv Laurent a oa bet gant meur a waienad all dindan tennoù ar Saizon e Mers-el-Kebir ha na oa ket re droet ganto, egiz ma soñjit awalc'h. Evit va contr Jean-Marie am boe tro da welout meur a wech neuze - o paouez mont war e leve e oa - hag a gonte din istorioù eus ar brezel bed kentañ, e oa heñvel awalc'h outañ e unan, diuntuek ha diseblant da welout : un temz-spered arvarour a oa dezhañ, a gredan. Gouest e oa avat d'en em c'houlen, da skouer, ha trec'h e vefe ar Saizon pe get. Evit ar brezhonieg n'en doa ket nemeur a garantez, egiz n'em eus merket ondev, hogen kennebeut all an enebiezh dall hag aheurtet a ziskoueze kaout va moereb Anna, lakaomp. Houmañ end-eañ, abaoe ma oa erru an Alamand er vro ha ma oa anv a emrenez, he devoa kemeret ouzh he yezh ur gasoni hag un dispriiz diski-ant koulz lavaret. Evit maeronezed va div c'hoar henañ, bourc'hizezed anezho, hag am boe tro da welout evit ar wech diwezhañ en hañv-se dres - unan a varvas danc'houde hag eben a zivroas da Vro-C'hall epad ar brezel - ne oa an emrenez nemet treisoni e-keñver Bro-C'hall. Mantret e oant bet o c'houzout e oant deuet da vezañ emrener ha sellout a raent a d'uez ouzhin egiz p'em biije tapet ar vosenn. A-c'horre laez an ti, a-wechoù, o dangleven o kuzukikat gant va mamm a-zivout ar paour kaezh "égare", egiz pa vije c'hoarvezet ganin koll ar feiz (ar feiz c'hall, na petra!), ar pezh am hegase hag a roe din fent war un dro : da nep mare hag e stumm ebet n'em boa emskiantet va emroadur war-du ar vroad-elouriezh vreizhat evel un drama ene (evel ma liver a-wechoù

kollidigezh ar feiz kristen pe an emdroidigezh da houmañ er c'hontrol (seurt dramaoù koustiañs avat o deus hañvalet din abes bezañ romantel ha diwirion awalc'h) ; ha rak-se, a lavaren, em boa fars awalc'h o verzout dremmoù glac'haret an div vaouez vat-se (1). A-wechoù all avat e vezen prest da gounnariñ pa c'hoarveze ganto kentañ e oa moarvat un nebeut krak-aotrouion ha krak-itronnez a-du gant an emrenez e Gwaien - n'oa ket bet diskuliet din o anvioù - hogen e chome ar "bon peuple", a-drugarez Doue, feal-ki da Vro-C'hall betek ar marv. Fae e oa ganin breutaat gant ar gallgarouezed -se hag o lezel a raen da gomz, heuged. Ar gwashañ zo avat eo e oa peg enno brekkleñved an diouganou hag e raent o seizh gwellañ evit e lodañ gant va mamm.

E chal ganin e oant evelato rak soñjet o doa profañ din - a-benn daskoriñ din va feiz c'hall kollet - ul levr uhelsperedet a oa e dalbenn "La caravane humaine", gant un noblañs - na petra ! - du Plessis de Grénédan, ma ne fazian ket. E-kerzh ar mizioù war-lerc'h em boa lennet - dam-lenet kentoc'h - al levr-se am boa kavet moreduz meurbet ha kalz re hir (2). Hogen ar gwel eus istor an hollved a oa diskouezet en oberenn n'en doa ket miret ouzhin an disterañ a grediñ e oant bet ganet evit seveniñ en darnig eus an hollved em boa krog enni an tammig kefridi a zerec ouzhin.

D'ar meurzh 24 a viz Gwengolo eta adon e Sant-Jormen. En devezhiou-se e kemere lec'h argadidigezh Dakar gant Gallacued De Gaulle. Da geñver an darvoud-se e wirion ur

- (1) Va mamm a wele dreist-holl stumm pleustrek an afer : bez e c'hellen gwastañ va buhez o vont da emrener. Hogen ne soñje ket eveljust - ma oa dañjerus bezañ Breizhad neuze - e oa ken dañjerus all - evit pevar bloaz atav - bezañ gall.
- (2) D'ar mare-se em boa savet un tamm notenn lennadur diwar al levr-se, e galleg. Taollet em boa evezh ouzh an darempred a oa, hervez ar skrivagner, etre an degouezhennoù hag an den-mour a ra ganto, ur gudenn gwall ziaes da ziskoulmañ, tud-veur zo oc'h heuliañ an darvoudoù evel Napoléon pe De Gaulle ha re all o krouiñ anezho evit darn, evel Lenin. Kavet em boa ivez e oa ar skrivagner ledan awalc'h a spered evit un noblañs.

wech ouzhpenn pegen diaes e oa neuze dianaout ar wirionez istorel : Gallaoued Vichy, e Paris, a roe da grediñ e oa bet bombezet Dakar goude ma oa bet nac'het gant ar gouarnour 'ultimatum' ar Saizon ; hervez ar Saizon o unan avat, gouarnour kêr an hini eo en devoa kroget da dennañ war ar vag-ergerzh a zegase breutaourion a-berzh Gallaoued D.G. Evit parrat ouzh un emgann etre Gallaoued en doa gourc'hemmet D.G. d'ar strollad-listri 'gall dieub' pellaat diouzh an aod.

Kemenn a raed ivez emgannoù etre Gallaoued ha Japaniz en 'Indez-Sina'. Eus an degouezhadenn-se e tezuastu-menn en em ledfe ar brezel moarvat en trevadenoù hag e vefe daleet aloubidigezh Vro-Saoz gant kement-se. Atav avat e oad en gortoz eus un dilestradeg ha beanoz e roe ar Saizon da c'houzout pet kobar-divourzhañ o devoa goueledet war aod Bro-C'hall en devezh kent.

Dimerc'her 25 a viz Gwengolo 1940

Netra arbennik. Drailhañ keuneud d'ar beure-mañ. En endervezh on aet gant va breur betek Kourgalez e-lec'h hon eus diaozet luc'hvanerioù ha keflusterioù tredan saoz, gant an dezo d'o degas du-mañ ur wech bennak. N'ouzon ket re avat peseurt implij a c'hellimp tennañ diouto.

Diriaou 26 a viz Gwengolo 1940

Lenn "Va amzer doull-bac'h" gant Pellico. Netra a-hend-all.

Du-mañ ez eus erruet hiziv ur skolaer eus hanternoz Bro-C'hall - e wreg avat a zo o chom e Mousterele-ar-Rivinoù - en deus degemennet deomp e vefe kaset da benn an argadadeg a-enep Bro-Saoz warc'hoazh pe goude warc'hoazh. En em c'houlenn a ran pelec'h an diaoul ez eo aet da ger-c'hat ar c'heloù-se. Pezh en dislavarfe eo pezh am eus lennet war an "O.E." : emañ an Alamanned hag an Italianed o c'hedal ur brezel hir.

Disadorn 28 a viz Gwengolo 1940

Dav eo bet din mont da Roazhon dindan ar glav evit feurmiñ ur gambr e ti an it. Legaud : 130 lur ar miz. E-keit m'edon du-se e tifoupas ur fetisenn a blac'h, livet he fas, vil d'ober droug hag hi o c'hlaourenniñ gant ar gounnar ouzh an Alamanned : nevez klevet he doa o doa ar Saizon bombezet an Oriant, ar porzh-houarn hag ar c'haeoù diskarg ; tud a oa bet lazhet e-touez ar boblañs. "Mais qu'est-ce que ça fait qu'on crève," emezi, "du moment qu'on le zigouille et qu'il n'en reste pas un !" Kaer em eus prederiañ ne welan ket peseurt mad a zo o tieubiñ kel-anoù. Ar vandrogenn a gendalc'has da gunujañ an Alamanned. Neuze e kontas o doa kavet ar Saizon un dro-bleg vat da virout ouzh an Alamanned zouarañ en o enezenn : ledañ war an aodoù ur gwiskad tireoul a c'hellfed tanflammañ pa garfed. Hi ivez a oa en gortoz da welout an Alamanned o tilestrañ. Moarvat d'ar seizh a viz Here bremañ, hervez diougan Don Bosco !

Disul 29 a viz Gwengolo 1940

Un emglev triferzhiek mennet da ziogetiñ an "Urzh Nevez" en Europa hag er Reter pellañ a zo bet sinet etre Bro-Alamagn, Bro-Japan ha Bro-Italia. Dre an emglev-se e c'hrrata an teir stad reiñ kenskor an eil d'eben ma vez taget unan anezho gant ur stad all. Seurt diviz azo eeunet a-enep d'ar Stadoù-Unanet : ar re-mañ a hañval bezañ bet fromet gant an emglev-se hogen kement-se ne harzo ket outo a sikour Bro-Saoz m'o deus diferet hem ober.

Evit pezh a zo eus an "Urzh Nevez" a fell d'an teir stad-se diazezañ - ma rank pep hini, hervezi, kaout an dachenn he deus ezhomm anezhi - n'eus da sichenn dezhi nemet arver an nerzh ha gwir an trec'hour. Seurt "Urzh Nevez" a zo kozh awalc'h e gwirionez.

Bremañ e chom da c'houzout hag-eñ an Urzh-se - nevez sañset - a vo kaset da wir un deiz bennak. Maz a ar

Stadoù-Unanet a-du gant Bro-Saoz ez eus chañs na zeuy seurt Urzh biken da wir.

Dilun 30 a viz Gwengolo 1940

Ar Saozon o deus bombezet an Oriant a nevez d'ar sadorn diwezhañ. Hervez skingomz Lunden e spurmanted ar flammoù 150 klm. tro-war-dro.

An Alamaned a zo o furchal e pep lec'h war ar maez a-benn dizoleiñ skingaserioù. C'hwillet o deus krec'h-traon er presbital hag er maerdi e-lec'h o deus diskoachet armoù bet lezet eno e deroù an dalc'hidigezh. Reuz o deus graet d'ar maer dre ma ne oant ket bet degaset kentizh da Roazhon. Furchadegoù all o deus graet er mereur-
bù e-tal du-mañ hag e ti Barthélémy ; edomp en gortoz d'o gwelout er gêr hogen n'int ket deuet.

Setu teir sizhun n'em eus ket gallet studiañ brezhoneg. Echu et em eus va holl levrioù ha n'eus ket tu da brenañ re nevez. A-hend-all n'em eus ket awalc'h a ar-c'hant evit koumanantiñ da "Feiz-ha-Breiz" ha "Dihunamb".

Dimerc'h 1^{añ} a viz Here 1940

Erru eo deiz ar c'hiniad. C. ha N. a zo distroet da Roazhon. Enoesiñ a ran amañ hag en ur stumm em eus hast da vont du-se : da vihanañ e vin dieupoc'h da studiañ ar brezhoneg. Amañ e vezan tamallet bewech ma krog-an en ul levr brezhoneg.

Dimerc'her 2 a viz Here 1940

Amzer d'rist, dic'houloù. Renet em eus an devezh o lenn ar romant gallek "Climats" gant Maurois, hep kalz a blijadur e gwirionez.

Pennad 3

Distroet e oamp eta da Roazhon evit ar bloaz-skol d'ar 4 a viz Here 1940. En dro-mañ avat ne oamp ket mui va breur ha me skolidi lojet evel ma oamp bet e-doug an tri bloaz a-raok. Merket em eus endev e oa dalc'het hunvaoù ar skolaj gant al lu alaman hag evel-se eta hor boa kavet bod e ti an ao. hag an it. Legaud, a oa o vevañ en un ti bihan, boulevard Gwerzin, nepell diouzh mezegva 'Pontchailoux'. O mab a oa bet kenskoliad din e Sant-Marzhin a oa o paouez dont tre er c'hloerdi bras a-benn studiañ e brederouriezh eno (ne oa ket set da veleg a-benn ar fin, war a glevis). Evel-se atav e oa bet tu d'hon ostiz-ion d'hol lojañ rak enk awalc'h e oa o zi a-hend-all.

A oad gant va zud e oa an ozhac'h hag ar vaouez (an ozhac'h en devoa graet ar brezel bed kentañ ha kollet en devoa ul lagad ennañ, a gav din). An ao. Legaud a oa d'an ampoent implijad e levrac'haeg kêr Roazhon. A-zivwar e vicher marteze en devoa tapet un tamm deskadurezh hag un den skiantek e hañvale bezañ a-hend-all, ha sioul kenañ ; a vent vras e oa, treut hag hir, kastiz e zremm, tarvoal e glopenn. E wreg a oa un tamm bihanoc'h egetañ met ken habnec'h hag eñ ; komz a rae gorrek gant ur vouezh flour bepred heñvel outi hec'h uman m'en em c'houlennet ha taeret he doa ur wech bennak en he buhez. Rakvarnioù he devoa avat e-keñver Bretoned goueled ar vro - an daou bried a oa genidik eus Felgerieg-meur e rannvro Roazhon - ha c'hoarvezet e oa ganti o estaolñ tro pe dro dirazon ha dirak he gwaz ; hemañ hag a ouie e oan genidik eus kornog ar vro a oa diaes e spered ouz he c'hlevout ha klask a-raok he difaziañ.

Bez et pe vez et, bourrus am boa kavet va buhez nevez. Moarvat e chomemp serret er skolaj etre eizh eur hanter beure hag eizh eur hanter noz hogen an nozvezhioù

a dremenep hon unan en hor c'hambredidrubuilh ha didrabas. Va breur, laouen ha sart gant e frankiz nevez a vourre o vont da c'haloupat betek ar fiñvskeudenndi-mañ-fiñvskeudenndi da welout n'ouzon ken pegement a filmoù. N'oa ket douget d'ober eveltañ - emelloù all am boa er gêr, va studioù hag ar brezhoneg ; en tu-hont da se ne gaven ket ebad distreiñ d'ar gêr d'ar red abarzh ma sonfe ar c'heulfe da unnek eur.

Deut e oamp mat a-hend-all d'an it. Legaud a oa ur vaouez karadek. Aliesik e c'hoarveze gant houmañ hor pediñ da zebriñ kistin krazet en he c'hegin pe da evañ ur banne 'grog' - gant rom, mar plij - evit kas kuit an anoued. N'oa ket entanet n'av gant seurt kouviadennoù rak ne blije ket din koll va amzer hogen santout a raen ne vefe ket brav a-berzh ur feurmer a-zoare nac'hañ d'erc'hel kompagnunezh d' un ostizez ken hegarat. Ha marvailh a save, diwar-benn ar brezel eveljust. An it. Legaud, evel meur a hini all, a grede mui pe vui en diouganou : va lakaet he doa zoken da lenn unan hir diziwezh gant an tad Joannès. Evel ma evezhien e oa evelato kalz a ziouganou hane oa ket **nemeur** ; a unvaniezh etrezo he doa lakaet an it. Legaud en he fenn reiñ he fiziañs hepken da ziougan santez Odila : ar re all, emezi, a oa bet ijinet gant an Alamaned o unan a-benn lakaat an dud da goll o feiz kaer e trec'h ar Saizon.

Rak, evel dres, - hag egziz an holl dud koulz lavaret,-e hete an ao. hag an it. Legaud trec'h ar Saizon. An ozhac'h zoken, ur wechad, en devoa degaset eus al levraoueg levr De Gaulle : "Vers l'armée de métier" e-lec'h e erbede ar jeneral - koronal en amzer-se, a gav din - savidigezh un nerzh-lu hobregonet. Follennataet em boa al levrenn dispac'hus-se hogen n'em boa ket kavet e oa gwall loskus evidomp Bretoned ar c'hudennoù a oa meret enni.

Me a denne va mad eus an divizoù-se evit degas kudenn an emrenerezh war an doubior rak ne gollon neuze tro ebet d'ober bruderezh evit Breizh. Va ostizion

ne oant ket enebet krenn ouzh an emrenerezh nemet, diouzh a lavaret, ne felle ket dezho e ve bet degaset gant an Alamaned (se a glevent er skingomz saoz eveljust). Evelato, dre vras, e oa lodek an ao. hag an it. Legaud er rakvarnioù a oa skignet neuze a-enep d'an emrenerion. Ur wech, da skouer, en devoa diskleriet va ostiz e oa renet an Emsav gant noblañsoù a felle dezho adsevel o brientoù ! Ar re-mañ a oa brudoù kozh e oa kiriek dezho moarvat bourc'hizion republikan, kristen pe get (rak paotred an "Ouest-Eclair" a zo bet kiriek dezho ivez hep mar) eus deroù ar c'hantved, d'ar mare ma voe savet ar strolloù politikel breizhat kentañ, an "U.R.B." pergen, gant de l'Estourbeillon. Pe neuze e tamalle an ao. Legaud da renerion an Emsav o c'hoant-enorioù hag o beligarouriezh. Seurt rebechoù o tent dreist-holl eus kelc'hiadurioù gall a-berzh-stad a oa boutin awalc'h d'ar c'houlz-se. Pa oa bet anv a lakaat skignlec'h Roazhon Breizh da vale endro en devoa asuret va ostiz e vefe lakaet d'ober bruderezh evit an emrenerion (padal ne voe ket gwall daer biskoazh Roazhon Breizh kaezh epad ar brezel). Evel ma weler, darbar am boa ma felle din gonit an dud-se d'an Emsav ha d' ar vroadelouriezh vreizhat.

E gwir, va ostizion, evel an holl, a oa prederiet gant disoc'h ar brezel dreist-holl. Evel an holl ivez e hetent faezhidigezh an Alamaned hag a-benn tizhout ar pal -se e oant prest hag int katoliked, dezho ur mab kloareg, da zegemer sikour ar Rusianed. "Nemet arabat e vo dezho degas o c'homunouriezh," a ouzhpenn an it. Legaud en ur huanadiñ. Ar vaouez kaezh, a soñj lin, a gemere Komunourion Rusia evit kurusted.

Epad ar c'hwec'h miz kentañ eus an dalc'hidigezh alaman e oa bet un nebeut dazweredoù alaman e-teuezh ar noblañs e Roazhon, anienel rik avat, a gredan, hag hep kenurzh ebet. Ur wech - e miz Here moarvat - e oa bet ur c'hadabuilh etre soudarded alaman ha tud eus ar vro. E-doug ur sizhun

e oa bet lakaet ar c'heulfe da nav eur ; d'an eur-se e tigenen prenestr va c'hambri : kirri-polis gall a dremene a-hed boulouard Gwerzin ; ma verze ar bolised unan bennak o tistreiñ d'ar gêr diwezhat e tiskennent kentizh diouzh o c'hirri ha redek a raent a-heligenañ war-lerc'h an den kaezh da gas anezhañ d'ar bidouf. E-kreiz miz Kerzu ivez e oa bet peget e kêr un nebeut skritelloù (n'em boa ket bet tro d'o gwelout) a oa bet doareet gant an Alamaned evel "séditieuses" ha "défaitistes" (implij seurt anvioù-gwan am boa kavet fentus awalc'h). Da heul kement-se e oa bet barnet ar studierion - ha ni en o zouez-da zistreiñ d'ar gêr a-raok eizh eur epad ur sizhun adarre. Hogen ar bruderezh enep-alaman-se ned ae ket gwall bell hag an dielloù am boa kavet e ti va ostizion a c'hoarveze eus un nebeut follennoù lies-tennet a oa talbennet evel henn : "Conseils aux occupés" e-lec'h e oa graet goap dreist-holl eus "correction" an Alamaned.

An it. Legaud padal hag hi a-du gant ar Saozon ne vourre ket evelato o kaout gweladennoù o c'hirri-nij. Meur a wech e-kerzh ar mizvezhioù-se e oa distroet ar re-mañ da vombezañ aerborzh Sant-Jakez epad an noz. Hon ostizion avat o devoa o c'hambri e-kichen hon hini ha dre an deñvalijenn e kleven ar vaouez kaezh o kunuc'hiñ bep taol ma strake an tarzhadennoù en diabell ; fellout a rae dezhi diskenn d'ar c'hav ; he gwaz neuze a ziskoueze dezhi n'oa goudor ebet da gavout eno o vezañ ma ne oa kav an ti nemet un tamm lab ha n'en defe harpet ouzh bombezenn ebet. Sioulaat a rae an it. Legaud a-benn ar fin hogen ne oa ket hep poan.

Evidon-me ne oan ket nec'het en amzer-se o vezañ ma n'oa bet bombezet kêr hec'h unan gwech ebet ; sellout a raen a-wechoù dre ar prenestr : tannoù an difenn enep-kirri-nij alaman a grape en oabl noz evel tiredoù-tan liesliv a roc da soñjal en un tan-arvest espar ; skleur al luc'hvannerioù a horjelle a-us da gêr evel tourioù

kann o kouezhañ d'an douar hag o sevel endro dibaouez.

Diskaret e veze kirri-nij saoz bep an amzer emichañs rak goude an aergadoù-se e veze peget e kêr skritelloù o tifenn groñs harpañ an nijourion saoz dindan boan a varv. Evit traoù dister e veze kinniget barn an dud d'ar marv e gwirionez. Ur wech e oamp aet da bourmen - evel ma raemp a-raok ar brezel - betek domani ar Prevalez dre hed ar Winun ; e toull ar vali hor boa merzet ul lik-etenn vras a gemenne e oa berzet krenn ouzh an dud dont tre "dindan boan a varv" adarre !

Ar pep brasañ eus hon amzer a dremenomp er skolaj eveljust. Hemañ, egiz ma lavaren, a oa dalc'het penn-da-benn gant an Alamaned ; soudarded a oa gwelet e pep lec'h, war ar porzh zoken e-lec'h e oa arsavet un toul-lad kirri-samm diwallet gant un taoweler. Eus unan anezho em eus dalc'het koun. Bez e oa anezhañ un den yaouank eus Köln, gwastellour dre e vicher, a oa bet lezanvet 'Popol' ganeomp, ur paotr koujorn, dopez zoken, jotek, livrin, lagadet glas, drev an tamm anezhañ ha prest da c'hoarzhin bepred. Sevel a raemp marvailh gantañ en alamaneg ; prestañ a rae deomp e dokarn ha kofadoù c'hoarzhin a raemp o sel-lout an eil ouzh egile, ken lu e hañvalemp bezañ.

Un dra vat a oa da vihanañ e dalc'hidigezh ar skolaj gant an Alamaned : tommet e oamp ganto ha tommet mat rak ar re-mañ, boazet ouzh ur vro yenoc'h eget Breizh a gave dezho moarvat n'o doa ket kuitaet o mammvro hag a rae un tan-ifern e fornez an tommereñ-kreiz ken e oamp poazhet mik er salioù-klas hag er predva.

Ma lakaer a-gostez avat bezañs an Alamaned ne oa ket kemmet kalz tra e buhez ar skolaj. Alies tre bepred da yaou pe da sul ez aen da enoeiñ dirak ur gevezadeg vell-droad pe vasket e tu pe du nemet, ewljust e vezen dieub da noz ha n'oa mui aotre ebet da c'houlenn evit mont d'ar fiiv-

skeudenni.

An hevelep kelennerion hag er bloaz a-raok am boa ivez, tost-da-vat, nemet e oa aet an tad Geschwind da gelenn e Redon, er skolaj Sant-Salver, e-lec'h n'oa ket chomet d'ar mare-se (rak distreiñ a reas di war-lorch) : damc'houde e kleviz e oa bet kaset d'ur skolaj all o vezañ ma oa re laosk e vuhezouriezh a-hervez (da lavarout eo e tlee prestañ levrioù un tammig a bep seurt d'e skolidi, a soñj din). An tad Raffleugeot avat a oa bepred e penn Sant-Marzhin. Dalc'hmat ivez e kemere kement a breder gant mad an eneoù en e skolaj, ha bep sul, a c'horre ar gador-brezeg, re bar d'ur Profed a Israhel, gant e vlev gwenn hag e vouezh taer, e tarane a-enep d'ar speredoù fall a nac'he sentiñ ouzh ar reoliadur hag a vage a-hend-all a bep seurt sioù fall. Evit keloù se ne oa ket gouestlet e sarmonioù atav da gen boutin testennoù rak c'hoarvezout a rae gant hor sarmoner bep ar mare kemer e gador-brezeg evit leurenn ur sal-emvod ha plediñ gant kudennoù uhel ar politikerezh. E brederiadennoù war e zivoud ne oant ket personel tre peurvuiñ, ret eo din anzav, rak an danvez anezho a veze kavet ebarzh ar c'hlaouennoù d'ar mare-se. Displegañ a rae, da skouer, penaos e oa bet bevez da Vro-C'hall kaout lamm er brezel rak, anez, a lavare an tad Raffleugeot, e vefe chomet da ginviañ en he fec'hed ; abaoe eta m'o devoa an Alamanned - gwalenn Doue en degouezh-mañ - roet ur roustad a feson d'ar C'hallaoued kaezh e oa bet dibikouzet da vat o daoulagad ha gelllet o devoa a-benn ar fin merzout gwri-zienn o diskar ha klask er relijion ar remed anezhañ : "La France enfin chrétienne" he doa komprenet ar gentel a oa bet roet dezho gant an Aotrou Doue ; war ar poent-se, dav eo din lavarout, n'oa ket a-du tre gant ar prezegenner rak soñjal a rae din e vije bet ret d'ar C'hallaoued bezañ kristen en a-raok evit reiñ hevelep ster d'an darvoudoù. E gwirionez e oa an tad Raffleugeot un harper gredus d'ar

gouarnerezh nevez diazezet e Bro-C'hall hag e dibenn an trimizvezh kentañ zoken, lusket moarvat gant an entan, en devoa difennet feuls kenañ ar "grand vieillard" a oa neuze e penn Bro-C'hall o tistagañ ar c'homzoù-mañ o devoa va lakact bezivet mik : "Pétain, deux syllabes bien françaises" !

Peogwir emañ ganti e c'hellan merkañ amañ e tefe betek ennon bep an amzer heklevioù eus ar breutadegoù a save neuze etre tadoù ha beleion ar skolaj. An darn-vuiñ eus ar re-mañ a oa a-du gant Pétain eveljust, nemet hini pe hini - e-touez ar re yaouank berrboell evel ma vez bepred ar re yaouank, egiz ma ouzoc'h - a glaske end-abaf digareziñ de Gaulle, en anv ar vrogarouriezh emichañs. Ar re-mañ avat ne oant ket kemeret evit tud sirius, evit huñvrecion roman- tel ne lavaran ket.

An tad Chappoteau a oa va c'helenner prederour- iezh hag eñ bras, treut ha difetis e zoare evel ma tere ouzh ur c'helenner prederouriezh, disliv, sec'h ha kastiz e zremm, moan hag hir e fri a harpe ur re lunedoù o gwerennoù kel- c'hiek ; kozh awalc'h e oa d'ar poent-se, souchet ha gwenn e vlev a guzhe peurliesañ dindan ur varetenn. Sirius da sabatoù e oa ; nepred ne c'hoarzh e ha n'oa ket evit mirout a soñjal e oa re drist evelato, zoken evit ur prederour. A-hend-all ne oa ket anezhañ ur prezegenner he- lavar evel hon tad. Rener ha berdrer e sarmonioù eo a brizen ar muiañ pa c'hoarveze gantañ sevel d'ar gador-brezeg : an hini en devoa distaget un drovezh da geñver gouel an Holl- sent diwar-benn anaon ar Purgator - keñveriet gantañ ouzh prizonidi vrezel - n'en devoa ket padet ouzhpenn dek munud pezh a oa ur rekord en ur stumm.

E gentelioù prederouriezh avat a veze aozet gant aked, bout m'o c'haven disacour ha divuhez, evit la- varout ar wirionez, dre ma ne oa enno elfenn personel ebet (en eneb d'ar pezh en em gave gant kentelioù an tad Geschwind

er bloaz kent). Dre vras e oa eus va c'helenner un den sioul, prederiek, lent zoken en ur stumm, a oa doujet gant e skolidi evelkent. Eus danvez e gentelioù n'em eus dalc'het tamm soñj arbennik ebet nemet eus un displegadenn en devoa graet ur wech diwar-benn kudennoù ar vroadelezh ; e dibenn an displegadenn-se en devoa damveneget degouezh Breizh, a vouezh izel, en e bart e unan, koulz lavaret, en ur anzav he doa Breizh, goude holl, perzhioù ur vroadelezh. N'ouzon ket hag unan bennak en doa taolet pled ouzh e gomzoù, nemedon va unan moarvat.

Da gelenner alamaneg em boa bet an ao. Lemarchand da gentañ penn, evit ur sizhun pe ziv (hemañ a oa ur beleg eus an eskopti, a gredan ; erru e oa war an oad dija). Un iskis a gelenner war an alamaneg e oa ar beleg-mañ avat : enep-alaman touet, a rene e amzer o trouk-prezeg diwar-benn an Alamaned, alouberion a viskoazh, oc'h asuriñ deomp n'o doa ar varbared-se tamm lennegezh ebet, n'o devoa zoken yezh ebet, ne oa an alamaneg nemet un trefocadaj ha na c'helled e doare ebet keñveriañ ouzh yezh seven ar C'hallaoued, ha me 'oar-me, n'en em c'houlennon a-benn ar fin petra e oan deuet da ober en e glas.

Hep dale avat en devoa an tad Hamon kemeret e lec'h. Hemañ a oa ur Breizhad eus ar Gweloù, brezhoneger a vihanik. N'ouzon ket penaos e oa c'hoarvezet gantañ mont da Eudist, moarvat er memes doare ha ma voe darbet da Jakez Riou ha Youenn Drezen mont da leaned. E gwirionez avat e oa an tad Hamon eus un tiegezh diwar ar maez ha ne ouie nemet brezhoneg pa oa bet kaset d'ar skol (evel Renan, a lavare, rak bourrañ a rae o vonegiñ ar galleger-mañ, Doue a oar perak) hag ouzhpennañ a rae e veze bet kastizet hag e tape flac'hadoù gant e vistri pa zegouezhe dezhañ rannañ ur ger en e yezh.

Bremañ avat e verkin ne oa ket deuet an tad Hamon dioutañ e unan da ziskuliañ din kement-se, diwar va

atiz ne lavaran ket rak lakaet em boa em penn ober eus va c'helenner ur broadelour breizhat.

Ar mennad-se a oa deuet din dre m'em boa merzet ne oa ket an tad Hamon ur brogarour gall tamm ebet. Kent dont endro da gelenner e Roazhon e oa bet o vevañ en Italia, en Alamagn, en Izelvroioù ha diouzh ar chomadennoù-se en devoa degaset un dro soñjal etrevroadel, damheñvel ouzh an hini a c'hell kaout ur c'hargiad eus an Iliz er Vatikan, diforc'h mat diouzh ar spered kloc'hdi a ren, da skouer, e kelc'hiadurioù ar gouarnamant gall e Paris ; war un dro en devoa desket nouspet yezh, seitek bennak, war a gleven a-wechoù ; se ne oa ket gwir moarvat rak d'ar mare m'en anavezis ne gomze ervat nemet italianeg hag alamaneg estreget ar brezhoneg hag ar galleg. War an dachenn-se adarre n'en devoa rakvarnebet a nep seurt ha bourrañ a rae o tiskleriañ e oa an italianeg kaerañ hag hesonañ yezh a zo er bed, pezh n'eo ket ur mennoz diseurt tamm ebet. D'an alamaneg en devoa desket ervat en Aostria hag en Alamagn ar c'hreisteiz - o vevañ ebarzh tiegezhioù alamanegerion - avat, e touge va c'helenner ar muiañ bri.

Rak, en eub d'an ab. Lemarchand, e oa an tad Hamon un alaman-garour gredus. E deroù e gentelgentañ en devoa graet deomp un tamm prezegenn a-benn hor broudañ da studi an alamaneg. E-touez traoù all en devoa displeget deomp kement-mañ : evel m'o doa ar C'halianed gwechall dilezet ar c'heltieg e vit deskiñ al latin ha gellout evel-se kemer perzh e buhez an impalaeriezh roman, emezañ, e tlee disken-nidi ar C'halianed - ni Bretoned, na piv 'ta, tadoù ! - bezañ ken fur hag o gourdadoù ha deskiñ ervat an alamaneg a-benn bezañ lodek e brientoù danvez kedodedourion ar 'Reich' meur. Marteze e jubennan un tammig amañ ar c'homzoù a zist-agas va c'helenner neuze hogen diwar-benn ar ster anezho ne oa e gwirionez douetañs bet da gaout.

Sebezet ha feuket un disterañ e oan bet gant ar brezegenn-mañ rak ne gaven ket brav goulenñ digant ur bobl drec'het - peogwir e kemere ac'hanomp evit Gallaoued - asantiñ da viken d'he drouziwezh ha d'he sklavelezh.

Padal, eveljust, ne oa ket eus va c'helenner ur c'hewelwerinelour tamm ebet. Lennet en doa "Mein Kampf" hogen ne brize ket nemeur an oberenn-mañ a gave mogedek meurbet. Nec'het e oa ivez gant tonkadur ar Yuzevion ; menegiñ a rae din ur wech komzoù un ofisour alaman a asure e oa ar Yuzevion ur wir walenn en e vro, hogen hep ober addispleg ebet, o chom dilavar da c'houde, egiz pa vije bet oc'h ober goulennoù dezhañ e unan. Damkaniezhoù diseurt ar genelwerinelourion alaman diwar-benn ar "Frañs katarat" hag ar "Frañs ariat" a veze displeget gantañ ivez a-wechoù ; harzoù an div Frañs-se a glote, war-bouez nebeut, diouzh e glevout, gant harzoù ar gennad dalc'het hag ar gennad dizalc'h, a oa tonket, hervezañ bopred, da zont da vezañ harzoù-stad ; stad an hanternoz, a ouenn vat, a vije bet staget mui pe vui, e stumm pe stumm, ouzh ar Reich, hag he defe bet perzh, tamm pe damm, e dreistwiriou hemañ ; eus eben, e kreisteiz al Liger, e vije bet graet ur gwarezva bennak, barnet da grak-vevañ diwar al labour-douar (ur raktres, evel ma weler, a glot awalc'h gant hini uhelgalvezourion Baris a hiziv a venn diorren hepmuiken hanternoz ha retor ar "Frañs"). E peseurt lodenn eus ar "Frañs" e vije bet renket Breizh gant an Alamaned n'oa ket bet gouest va c'helenner da lavarout din. N'en doa ket diskuliet din kennebeut e pelec'h en devoa diskoachet an titouroù kuzh-mañ : moarvat ebarzh embannadennoù ar genelwerinelourion alaman a veze lennet stank gantañ d'an ampoent.

Dre vras ha daoust ma c'hoarveze gant an tad Hamon selaou ar skingomz saoz... en alamaneg (eveljust!) en devoa evelato ar brasañ estlamm ouzh an Alamaned ha zoken ouzh hini pe hini eus ar genelwerinelourion, Goebbels

da skouer, a oa, war e veno, un den speredet dreist a oa drouklivet gant ar Saizon. E huñvre er mizvezhioù-se e oa mestroni un Alamagn d'ereat, a seurt gant an eil 'Reich', kevreat, mirour ha frankizour war un dro, gouest da vleniañ ha da unvaniñ en diwezh Europa. Gwashañ gwalleur a c'helle bezañ c'hoarvezet gant Europa e oa bet disoc'h brezel 1914-1918 en doa degaset faezhidigezh Alamagn ha trec'h ar gomnouriezh war un dro. A-wechoù avat en em c'houlennen, o selaou ouzh va c'helenner, hag-eñ ne estaole ket dirazon hiraezhioù meur a gargiad eus gwazvaou-kreiz an Iliz a wele spisoc'h eget kargidi ar gwazvaou lec'hel gwirvad ar framm o devoa da velestriñ.

Pezh a skoe va spered e-kerzh an divizoù-se ivez e oa neuz diuntuek ha diseblant an tad Hamon o tezev-vell rakweladurioù a vac'homerezh hag a didouriezh a zleje bezañ barnet en anv ar reizhded kristen ; komz a rae anezho avat hep reiñ tamm ebet e ali a-du pe a-enep, e-giz pa vije bet o vevañ war ur blanedenn all, er-maez eus an darvoudoù, hep gellout bezañ tizhet ganto ; seurt emzalc'h ne oa ket digendoare gant hini an tad Agombart am eus displeget en eil levrenn va eñvorennoù - hemañ ivez a chome digas da welout dirak aloubidigezh Vro-C'hall - hogen savboent an tad Hamon, a gav din, a oa disheñvel diouzh hini va c'helenner all rak kentoc'h istorel eget kevrennel e oa : dre m'en devoa ur perzh eeun ha digemmesk en hengoun istor-el an Iliz - pell amzer en devoa bevet e Roma - e oa douget an tad Hamon da c'houzañv an darvoudoù kempred evel un amzer na c'heller ket kemm, evel glav pe gazarc'h a zizac'h warnoc'h pa c'hortozit an nebeutañ ken e rankit klask prim-ha-prim ur goudor da lezel ar barrad da dremen.

Soñjet em eus a-wechoù e oa en hevelep emzoug un elfenn wregel a ziwan mearvat diouzh dic'halloud ur framm a nac'h ober gant an armoù hag a ra gant ar bed hep degemer anezhañ da vat. Ar wanded-se a ziskleir ivez emichañs politik-

erezh laosk ha direizh pennadurezhioù an Iliz e-keñver hor bro hag int prest da asantiñ d'an direizhded war zigarez ez eo diazezet. Ne vern penaos e oa seurt tro-spered estren a-grenn ouzhin ha se a ro da gompren perak ne voen tentet biskoazh da zont tre e framm an Iliz.

Lavaret em eus avat e felle din gonit an tad Hamon d'an Emsav. Evel ma oa kustum da gomz ouzhin en alamaneg war ar porzh-c'hoari - a-benn va boazañ ouzh ar yezh komzet : eus e berzh, sur awalc'h, e oa ur mennad mat - em boa diskleriet dezhañ en diwezh, aet faezh, e rafe din moarvat muioc'h a blijadur o komz ouzhin en hor yezh-ni a oa ar brezhoneg. Sabatuet e oa bet an tad Hamon gant va froudenn hogen n'en doa ket nac'het reiñ din va c'hoant ha diwar neuze e c'hoarveze gantañ rannañ ganin ger pe c'her en hor yezh. Evelato ne oa ket a-du gant an emrenezh : a belec'h ? Den er skolañ c-touez e genvreudeur ne vefe bet a-du gantañ. Nann, ne c'helle ket mont a-du gant ar vroadelourion ; moarvat e anzave e oa bet heskinet ar brezhoneg gant frañmasoned an trede Republik; hogen, a-drugarez Doue, edo Pétain, an "noble vieillard" e penn ar Stad c'hall hag ar "proviñsoù" a oa o vont da vezañ adsavet hag ar brezhoneg da vezañ "enoret" h.a. Seurt randonnennoù a lakae ac'hanon da hejañ va diskoaz, ken brouezet e oan. Neuze, evel ma anavez en albac'henn e venegen dezhañ skouer Elzasiz ; daeñ a rae ouzhin e c'helle ar re-mañ derc'hel d'o yezh dre m'en em harpent ouzh ur bloc'h a alamanegerion a gant milion a dud. Hervelep arguadur hag eñ poellek d'ar c'hentañ sell n'am c'hendrec'he ket nemeur, eveljust, hag a-benn ar fin, evit diskouez dezhañ e oa ar brezhoneg ur yezh diorroet e tegasen dezhañ levrioù brezhonek nevez pourchaset ganin, en o zouez "Geotenn ar Werc'hez" embannet gant "Skrid-ha-Skoudenn" ha moulet e liv evel ul levr a lorc'h. Va c'helenn a follennatae

al levrenn goustadik, o tamserriñ e zaoulagad glas bihan gant ar bam hag an didu, diskredik e neuz avat egiz pa vefe bet oc'h en em c'houlenn hag-eñ oa gwir a-benn ar fin e ve er bed ur molliac'h a seurt gant ul levr moulet e brezhoneg. Ar pezh en doa sabatuet ar muiañ va c'helenn avat e oa bet ul lizher bizskrivet kaset din gant Kerverziou war ur follenn o tougen e lizherennoù moulet talbenn "Emsavadur Breiz" nevez savet gant Roparz Hemon kent na vije diazezet "Framm keltiek Breizh". Ar wech-mañ avat e oa chomet an tad Hamon batet evel pa vefe bet degaset dirazañ ul leuc pempbroadek. Soñjit : ul lizher e brezhoneg, skoet gant ar skriverez war ar marc'had, pezh na c'hoarvez nemet gant tud sirius evel melestrourion ar stad pe genverzhourion vras, se oa un dra hogozik dreist d'e intent. Chom a rae eta da sellout ouzh al lizher gant ar memes aer sebezet, diduet ha diskredik war un dro. Anat e oa n'oa ket evit dezvarn hag a-zevri e oan pe neuze oc'h ober goap outañ. Evelato em boa tizhet anezhañ en dro-se : sur en e vije deust an tamm ganin ma vije bet em c'herz paperennoù brav SADED. Met, siwazh, SADED ne oa ket savet c'hoazh en amzer-se.

Evit peurgelenn va c'helenn em boa diskouezet dezhañ a-benn an diwezh un toullad niverennoù eus "Studi-hag-ober" (e deroù 1941) : ganto e felle din prouñ e oa ar brezhoneg gouest da gevezañ gant n'eus forzh peseurt yezh zoken war dachenn ar brederouriezh ; "Studi-hag-ober" eta a oa va armoù pounnar a-benn aloubiñ ar c'hreñvlec'h. Siwazh, va c'hanolioù o devoa tennet e-biou. N'em eus ket mui soñj peseurt pennad am boa lakaet an tad Hamon da lenn hogen ennañ hor boa kejet gant ar ger "fetus" a oa implijet evit treiñ ar ger latin "concretus". Gant damant em boa plaenast ar ger-mañ d'am c'helenn rak ne gomprens ket mat da gantañ ; ha setu hemañ avat o tic'hargadennañ p'en devoa klevet va diskleriadurioù, ma oan chomet mantret, evel ma soñjit awalc'h. Pa oa bet torret d'e varrad en devoa diskleriet an tad Hamon din

penaos "du-mañ" ne veze arveret ar ger "fétis" nemet o komz eus ar soubenn pe eus ar youd ha kavout ken izel ger e yezh uhel ar brederouriezh en doa seblantet dezhañ bezañ fentus kenañ. Evidon-me em boa desket ar ger-se hepken ebarzh skridoù Maodez Glanndour, gant e ster prederouriezhel da gentañ ha n'oa ket a-se evit lodañ ar fars en devoa va c'helenner : ar ger "fétis" evidon a chome e gwirionez "difétis" mourbet.

Ne zeus ket a-benn eta d'ober eus va c'helenner ur prederour brezhonek, pezh a zo un dreez moarvat. Evelato e vroudus anezhañ awalc'h evit ma komanantfe da "Arvor" (ar gelaouenn-mañ a oa an uhelañ pal a c'helle diraez a-keñver brezhoneg) hag evit maz afe ur wech pe ziv da heulhañ kentelioù brezhoneg Per ar Rouz e Skol-veur Roazhon hogen ne gredan ket nemeur e tennas kalz a frouezh diouzh ar c'hentelioù-se ; sur-mat en defe graet gwell an tad Hamon, a-benn deskiñ ervat e yezh, en em enskrivañ e skol "Ober". Met, petra 'fell deoc'h, ar skol-veur c'hall hepken a oa un dra bennak siriüs evit va c'helenner.

Ivez e tizhis reiñ dezhañ un tamm lorc'h eus e yezh (mez en doa, da skouer, pa evezhie ur wech dirazañ unan eus e skolidi en devoa miret bepred e bouezmouezh brezhonek): diwar neuze e ^{ouezas} ne oa ket ar brezhoneg un trefod-daj evelato. Neuze ez ae da gavout ar soudarded alaman er porzh hag embann a rae dezho gant jourdoul : "Wir sind Kelten!" Ar re-se a selle outañ digor o genoù war nav eur : ne hañvalent ket bezañ fromet tre gant ar c'heloù-se ; mallusoc'h e vije bet henn embann d'ar Vretoned, me 'soñj din.

E gwirionez e plije din awalc'h va c'helenner alamaneg, marteze dre ma oa etrezomp ur meni emgleverezh kuzh a ziwane diouzh hor bout genidik hon daou eus kornioù-bro chomet brezhonek war ar maez ; e devoud, gant e zaoulagad bihan glas, krak ha c'hoarzhidik - un den seder a oa anezhañ - gant e zoareoù madek ha damc'hoapaus war un dro e lakae ac'hanon

a-wechoù da soñjal em zad-kozh a-berzh va zad. Alies epad an ehanou-kentel e renen va amzer o pazeal gantañ penn-da-benn ar porzh-c'hoari ha ni bepred o vreaat a-zevri a-zivout poent pe boent. Bep an a zer e save kaoz diwar-benn micher ; ne ouien ket c'hoazh da vat peseurt studioù am befe boulc'het er bloaz war-lerc'h daoust ma soñjen e oa ar studioù klasel ar re a zereje ar muiañ ouzhin ha neuze, e ser komz, e c'houlennen ali va c'helenner. Hemañ avat a oa sorc'hennet gant ar vezekniazh ha va c'haulic'h rae start da vont da vedisin. "Ma ne vijen beleg," a ouzhpenn, "em befe heuliet an hent-se : n'eus ket er bed kaeroc'h micher eget hini armezeg..."

Ur wech e miz Meurzh 1941 e oamp aet da bourmen betek liorz Vorpaz a oa bet nevez digoret er bloavezhioù-se e gwalarn kêr. War an hent hor boa kejet gant skolidi gozh eus Sant Marzhin, genidik eus Landernev, brizh-Vreizhiz anezho a-hend-all, a gav din, a oa d'ar c'houlz-se o peurechuiñ o studioù war an apotikerezh e Skol-veur 'Lille'. Savet e oa marvailh adarre diwar-benn kudennoù micher ; diwar ar marvailh-se en doa kemeret va c'helenner digarez evit va broudañ a nevez da gregiñ gant studioù a vezekniezh. Rebarbiñ a raen avat. "N'on ket donezonet evit ar studioù-se na douget dezho kennebeut all," a zaelen. - "Dav eo deoc'h soñjal er 'vuhez pleustrek'," a oa eilgeriet din. "Ar studioù a lennegezh a blij din kalz muoc'h," a arguen neuze. "Hogen n'eo ket sur ho po ur plas ; hir amzer a yelo ganeoc'h da bakañ an "Agregation" ha war ar marc'had ne vlot ket dieub : e servij ar stad e vlot," a responte an tad Hamon. Tizhet e oan gant un arguzenn seurt se rak abaoe ma oan deuet da vezañ broadelour e sellen ouzh al labour evit Breizh evl va galvedigezh wirion nemeti ; va micher ne c'helle bezañ nemet un tu din da c'honit va bara ; meizañ a raen neuze avat ne vefe ket aes din seveniñ ervat ar c'halvedigezh-se ma ranken chom e servij ur stad oebour d'am bro. Hogen ken dedennet e oan

a-hend-all gant al lennegezh ma n'oan ket evit empennañ micher all ebet estreget hini kelenner. Aheurtreuzh an t'ad Hamon a goune din bepred e ranked soñjal da gentañ er 'vuhez pleustrek' - egiz va zud end-eeun - a gaven arabadus, na petra 'ta, ha ne reas en diwezh nemet kreñvaat ennon ar men-nad d'ober studioù klasel war-lerc'h va bachelouriezh.

Souezhet e oan evelato o welout e waske va c'helenner warnon kement evit va lakaat da zibab ur vicher ha n'am dedenne ket nemeur. E gwirionez, gant ken bras gred am alie m'en em c'houlennen a-wechoù hag-eñ n'en defe ket karet e unan heuliañ an hent a ziskoueze din. Moarvat e oa an tad Hamon seder bepred, laouen gant e stad end-angat : a-drugarez d'an Iliz en doa gelllet dastum deskadurezh, gont skiant-prenet hag anavezout ar bed, buhezañ zoken an Istor war un derez uheloc'h eget hini ar Stad c'hall (afer am boa ouzh ar Breizhad-vatikanat, ul labous kalz dibaotoc'h eget ar Breizhad-gall a zo o vordilhañ war zouar Breizh en XXvet kantved ; ha rak-se ivez emichañs em boa kement a zudi o studiañ anezhañ). Daoust da se avat ne gredan ket e oa bastet a-grenn gant e 'red-micher' ; bep ar mare e klemme ouzhin diwar-benn direizhded pennadurezhioù an Iliz ha ne oant ket gouest atav da ziverzout an dellid e-lec'h edo. Seurt klemmoù - estaolet bepred en ur stumm dibersonel - am diaeze un disterañ a-wechoù : boazet e oan bet da welout er beleg ur c'hevrinour gouestlet hepken da Zoue ha da silvidigezh an eneoù, distag a-grenn diouzh ar bed-mañ ; damwelout a raen avat em c'helenner ur c'hargiad bihan hag a hiraezhe d'un 'avañsamant' na zegouezhe ket buan awalc'h d'e c'hrad. Ma ! Se a ziskoueze e oa an tad Hamon enframmet mat en Iliz ; ha moarvat ne c'heller ket gouenn digant an holl veleion bezañ sent.

Daoust pegen ledan bennak e oa mennozhioù an tad Hamon war dachennoù zo, ne zeuis biskoazh a-benn, evel m'em eus merket, da ober anezhañ ur brogarour breizhat ; di-wriziennet da vat e oa bet, adal e vugaleerezh koulz lavaret.

Bez e oa anezhañ dameuc'h e gerc'hiadur pe c'hoazh un den-heklev. Evel an holl veleion er skolañ e spias e fin ar bloaz 1940 e trofe "Strollad Broadel Breizh" da vezañ "rannvroelour", pa gemeras Remont Delaporte ar penn anezhañ war-lerc'h 'Montoire' (tro am bo da gomz eus an degouezhad-mañ pelloc'h). Evelato, e fin ar bloaz-skol, e tegemere kalz aococ'h va mennozhioù met ne grede ket e oa tu d'o seveniñ(1). Pa gomzen eus savidigezh ur Stad vrezhon e c'houlenne ouzhin : "C'hwil ' gred ez eo se gallus ? " gant ur vousklenn ken digalon hag ur penn ken trist m'en defe dic'hoanaget an taerañ brogarour, nemedon va unan, eveljust.

Daoust ma ne lodas ket an tad Hamon va c'hendrec'hadurioù biskoazh ne zalc'his ket droukrañs outañ evit keloù se. Kenderc'hel a ris d'e bleustriñ mui pe vui er bloavezhioù war-lerc'h. Deuet e oa da vezañ aluzenner en "Hôtel-Dieu" a oa dalc'het gant ar "Wehrmacht" ; eno e plede end-eeun gant ar soudarded alaman. Adal kreiz ar bloaz 1941 avat e arvare diwar-benn trec'h an Alamaned. E miz Gwengolo 1943 e oan deuet d'e gavout en "Hôtel-Dieu" ; edo o selaou ar skingomz alaman d'an ampoent ; pa oa bet echu an abadenn en doa diskleriet din, fromet e zoare : koll eo an Alamaned ha koll da vat ; fromet e oa, am eus skrivet, rak evitañ e tlee Europa a-bezh bezañ aloubet gant ar Rusianed ha gonezet d'ar gomunouriezh.

Pa erruas an Amerikaned da Roazhon e kemeras d'indan e warez an devezhouezed implijet gant an Alamaned en "Hôtel-Dieu" hag o sachañ a reas a dre krabanoù ar vistri nevez. Kontet en doa an dra-se din. D'ar mare-se edo o studiañ a-zevri yezh an drec'hourion nevez, ar saozneg, ha selaou a raer pizh o skingomzerezh. Goude ar brezel avat ez eas a-ziwar wel din. Klevet em eus e oa distroet da Roma hag e oa deuet da vezañ levraroueger er Vatikan.

 (1) Anzav a rae e oa bet ur gwallleur evit Breizh bezañ staget ouzh Bro-C'hall. Lenn a rae mat brezhoneg ha diskleriañ a rae e kave kalz sklaeroc'h troidigezh M.G. eus ul lizher eus Sant Paol embannet neuze ebarzh Studi-hag-Ober eget ar doare gallek anavezet.

NOTEENN.

Un nebeut evezhiadennoù a stagin amañ a-benn klokaat ar poltred am eus treset er pennad kent. Kavout a ra din e oa an disfiz ouzh ar Republik gall lik a vroude dreist-holl an tad Hamon da erbediñ din studioù a vezekniezh e-lec'h studioù a lennegezh a zlee disoc'hañ d'e soñj d'an "Agrégation". Doujañ a rae moarvat na ven levezonet gant ur c'helc'hiadur a oa sellet neuze evel ur c'helc'hiadur lik. An hevelep disfiz ouzh ar Republik lik he doa rediet gwechall ar c'hloer da ober o servij-soudard evel an holl a zegase anezhañ kerkoulz all da zrouklivañ ar vicher a ofisour en arme c'hall (war ar poent-se ne oa ket diaes dezhañ va c'hendrec'hiñ) ; gouez dezhañ - va digarezet neb zo bet ofisour en arme c'hall - n'oa ket sotoc'h micher eget hini an ofisour a ren e amzer o c'hourc'hemenn war leoned mut (pezh a zo gwir evit ul lu a holl-enrollerezh met n'eo ket gwir evit ul lu politikel) ; ne vern penaos, eno c'hoazh edod sklav d'ur republik lik. Krediñ rafen awalc'h e tazwerede an tad Hamon diouzh eñvorennoù a ziwar deroù ar c'hantved, pa oa savet bec'h etre an Iliz hag an trede Republik c'hall.

Diaes e oa a-hend-all d'an tad Hamon en em zizober ivez diouzh ar c'hemplez a izelder en devoa paket er skol diwar an dismegañs a oa graet dezhañ en abeg d'e yezh. Awalc'h e oa bet da unan eus e skolidi lavarout dezhañ en devoa miret bepred e bouezmouezh brezhonek - se am eus merket - evit ma paouezfe a gomz brezhoneg ouzhin goude epad ur pennad.

Erfin, un diviz am boa bet e fin ar bloaz-skol gantañ - pa oa dija oc'h arvariañ diwar-benn trec'h an Alamanned - am levezonas pa voe anv evidon a ober va dibab dirak savidigezh ar 'Bezen', daou vloaz war-lorc'h (a oa bet rozet darn - a soñje din atav - a-benn dedennañ youl-vat an Alamanned ha kevezañ gant ar C'hallaoued a glaske ivez bezañ deuet mat d'an Alamanned.) E ser komz, ur wechad, em boa goulennet ouzh va c'helenner eta ha ne rafe ket gwell ar C'hallaoued, konkas e ticheañse d'an Alamanned bezañ trec'h : ne ouied morse - ober van da vihanañ da genlabourat ganto. Se oa evidon ur goulenñ difetis a-grenn. An tad Hamon avat en devoa eilgeriet din : "C'hwit gred e vo kemmet un dra bennak en abeg da se ? Ma fell d'an Alamanned dispenn ar Stad c'hall honn graint evel ma karint adal ma vint ar vistri." Seurt komzoù a oa komzoù fur. Anat eo ne c'hell ket bezañ a zarempredoù etre trec'hourion ha trec'hidi, etre mistri ha sklaved. Ar sklav ne c'hell ket divizout gant e vestr. Se a zo gwir, koulz evit Breizh bremañ hag evit Bro-C'hall neuze. Er "c'henlabour" ne c'hell ar sklav nemet koll muoc'h c'hoazh e zellid hep gonid ebet.

+++++

Pennad 4

E mizvezhoù diwezhañ 1940 e oa krog an dud d'en em voazañ un tammig ouzh dalc'hidigezh ar vro gant an Alamanned ; e kêr e weled e pep lec'h skritelloù ar re-mañ. Un tamm bruderezh a glaskent ober ; war vogerioù kêr e oa bet livet skeudenn ur morgazh a oa mennet da aroueziañ an impalaerelouriezh saoz oc'h ober e dalaroù. Hewel e oa bezañs an Alamanned e pep lec'h a-hend-all. D'ar c'hentañ a viz Du 1940 e oamp act betek bered ar Reter e-lec'h hor boa gwelet bezioù aberzhidi bombezadeg ar 17 a viz Mezheven ; anvioù tud eus Okitania hor boa lennet dreist-holl war ar c'hroazioù, eus Chambéry, Avignon, Nîmes. Tri-ugent bez alaman a oa bet toullet eno ivez ha tri zaowelour alaman a oa o sevel gward dirazo, e-harz ar banniel kenelwerinat a oa o stlakañ en avel. Ouzh troad ar monumant d'ar re varv alaman er brezel bed kentañ - gloazidi tremenet en ospitalioù kêr Roazhon, emichañs - e oa bet lezet ur gurunennad vleunioù a-berzh al "Légion française des combattants" nevez savet gant gouarnamant Vichi, a gredan.

Er skolañj ne emdroe ket buan ar speredoù. Daoust ma ne oa ket deuet a-benn an Alamanned da bilat ar Saozon epad kad Vro-Saoz ne greded ket nemour e trec'h ar re-mañ evelato. Er c'heñver-se e oa disheñvel krenn stumm-soñjal ar vourc'hizion diouzh hini tud ar werin. War va zro ne oa gaolour ebet d'an ampoent. An toulladig a gamaladed a oa a-du gant ar jeneral - Guégaud, de Chancer, Testain - a oa sellet evel romantelourion (se am eus merket dija). Ar re all a oa a-unvan evit anzav e oa an Alamanned tud evel ar re all ; hep bezañ a-du gant ar re-mañ e oant prest bepred da bismigat ar Saozon. Re all - bourc'hizion a hengoun dehouat emichañs - a dage ar Yuzevion gant ernez. Evidon-me ne gemeren ket perzh eveljust er rendaeloù-se a zerve hepken ouzh Gall-

aoaed. E gwirionez e sellenouzh Vichiiz evel brizh-C'hall-
aoaed berrboell ha nay, dezho tamm skiant ebet eus gwirvad
o bro, dinoaz awalc'h a-hend-all hogen c'hoarvezout a rae
ganin o harpañ a-wechoù a-enep d'ar C'haolourion a hañvale
din bezañ kalz dañjerusoc'h evit Breizh.

D'ar mare-se em boa un tammig peoc'h a-berzh
va c'henskolidi evit pezh a selle ouzh Breizh ; distanet e
oa evez darn ouzh an emrenerion ; ur paotr evel Guibourg
a seblante kompren gwelloc'h kudennoù an emrenerzh. Gwir
eo ivez e oa c'hwitet an arnod da sevel ur stad vrezhon e
miz Eost a-raok.

Un tamm aergelc'h breizhat dispis awalc'h a
rone evelato war va zro ; da skouer e oa deuet ar c'hiz
da zougen gwalinier breizhat en arc'hant gant enskrivadur-
riou e brezhoneg evel "Breiz atao" pe "Breiz bepred". Ar re
o douge avat ne gredent ket kalz an zav e oa emrener-
ion anezho.

Hini pe hini evelato a chome aheurtet krenn
a-enep d'an emrenerzh, dreist-holl Bourdin, ur gall roueel-
our hag a veze bepred o wallgomz diwar-benn ar vrogarourion
vreizhat. D'ar c'hentañ aviz Kerzu e oamp aet da bourmen
betek an Tuchennoù Gwenn, e Koad-ar-Bili. Klouar e oa an
amzer, un dudi, en devezh-se ha plijadur am boa bet o chom
da lenn epad ur pennad e brizh-heol ar gwez dizail. Neuze e
oa deuet Bourdin d'am c'havout. Boulc'het en doa ganin un
hir a dabut diwar-benn an emrenerzh adarre. Klasket en doa
dreist-holl dispenn brud-vat renerion an Emsav, hini Debeau-
vais da gentañ ; ouzh hemañ en doa ar muiañ kas. Tamallet
en doa dezhañ - evel ma oa boazet d'ober enebourion an Emsav -
bezañ bet gwerzhet d'an Alamaned. Hegaset hag heugset e oan
bet gant an tabut-se, seul vuioe'h ma n'oan ket evit respont
netra dalvoudus da gement a veze stegnet ouzhin, nemet dis-
lavarout ar pezh a veze lavaret : neb a gar a c'hell'
labezañ o nesañ ha falzañ warnañ evel ma plij dezhañ.

Disoc'h pennañ ar rigas e oa bet va broudañ a-enep d'ar
roueelerion ha d'ar gostezenn dehoù gall. Ebarzh va deiz-
levr en devezh-se em boa taget taer ar rouaned c'hall hag
o azeulerion e Breizh a lakaen kiriek da ziskar ar vro ;
tamall a raen d'ar gostezenn dehoù dre vras implijout ar
relijion evit o mennadoù politikel hag evel boaz e raen
anv eus ar Balp.

An holl C'hallaoued a oa war va zro ne oant
ket heñvel ouzh hemañ. Koun a zalc'han eus unan ha n'en doa
e gwirionez tamm mennoz politikel ebet hag a glasse padal
sevel ur gazetenn. An hini a gomzan anezhañ ne oa ket ur
Gall rik, un Okitanad ne lavaran ket ha Carret a oa e anv(1).
Ur paotr bihan dopez, du ha lufr e vlev, kramennet e liv,
a gaven doñjerus, evit an zav ar wirionez. Betek neuze eta
en devoa savet evit n'ouzon peseurt kelaouennoù un toullad
pennadoù en devoa didroc'het gant evezh ha peget end-deol
ebarzh ur mell kaer du a oa mennet da zerc'hel e oberennoù
klok, na petra 'ta (o roet en doa din da lenn hogen n'em
boa ket bet kalon d'henn ober) : ur gwir skrivagner a oa
anezhañ eta.

Diwar neuze avat e felle dezhañ kaout e ge-
laouenn-eñ e unan ha kavet en devoa endev an talbenn anezhi :
"Être de son temps" ("Bezañ diouzh an amzer, "elese neuze
diouzh amzer an Alamaned), ur gwir programm, evel ma welor.
Nemet, setu, ret e oa da gentañ kaout eotre ar reolour
alaman. Va den eta en doa sipet e spered da sevel ul lizher-
arc'hiñ e galleg (rak dic'houzvez a-grenn e oa eus yezh
kaer Goethe ha Schiller) ha goulennet en devoa diganin treiñ
anezhañ en alamaneg. Mantret e oan bet avat gant stumm ha
danvez ar skrid en devoa savet, ken klufan ha ken dismeg e
oa : ne oa anv ennañ nemet a doullgofañ Yuzevion ha Frañ-
masoned h.a. E berr gomzoù, flaer ar pilpouzerezh a oa
penn-da-benn gant al lizher-se. Rak ar pennadoù en devoa emban-
net Carret a-raok donedigezh an Alamaned a oa skrivet en ur
- - - - -
(1) Carret a varvas abrad tre e deroù ar bloaz 1844, dre wall-
zarvoud. Chomet e oa kousket o lezel dior ur fornez-c'haz ma oa
d'ur mare. Pa zistroas ar wash e oa bet mouget C.

stumm disheñvel krenn : neuze e veze gorreet ar Saozon d'al laezioù gantañ ha graet a bep seurt anvioù lous eus an Alamaned. Evit klozañ, ken rukunus em boa kavet al lizher-se m'em boa kavet gwell kas ar paotr da gavout an tad Hamon a oa kalz barrekoc'h egedon war an alamaneg, am boa diskleriet. N'ouzon ket ha graet en doa ar paotr diouzh va ali hogen sur eo ne oa ket distroet d'am zregasiñ(1).

Hemañ, da vihanañ, a c'helle fogasiñ da welout an traoù evel ma oant. Kalz tud c'hoazh avat, skiantek a-wechoù, egiz an ez-kabiten Delaunay, a oa douget da lakaat ar spierion saoz kiriek da gement tan-gwall c'hoarvezet en tiez pe en tachennoù dalc'het gant an Alamaned, da skouer, an hini a begas en ur mirva eoul-maen alaman e deroù miz Du 1940, e trowardroioù Roazhon. Ur wech all e oa lakaet war gont ur vombezadeg kaset da benn gant ar Saozon - un ambrougadeg kirri alaman a oa bet taget a-hervez - an dourni graet gant talmoù kurun.

E gwirionez, brozennoù a bep seurt a gondalc'has da redek e-doug mizvezhioù diwezhañ 1940. War-dro ar 15 a viz Here e lakaas darn en o spered o doa an Alamaned arnodet da vat dilestrañ e Bro-Saoz ; kentañ a raed e oa bet distaolet 400 pe 500 kelan a Alamaned war aodoù Breizh ha Bro-C'hall; ar re-mañ a oa eveljust kelanoù ar soudarded o doa klaskot divourzhañ e Bro-Saoz. E-kreiz ar miz-se ivez e kuzuliked e oa marv Goering. Munudoù resis a veze ouzhpennet : lazhet e oa bet Goering e Berck, gant ur vombezenn saoz, e-kerzh ur banvez, war e dro nouspet maouez a Vro-C'hall e oa oc'h ober al lez dezhañ! A-hervez e oa moulet ar romant-mañ war un trakt saoz. Biskoazh avat ne zeuas an trakt-se etre va daouarn.

(1) Stank e vez bepred e pep bro drec'het ar re a vez prest da geger beli an estren. E Cambrai em boa klevet ur vaouez, Dermv hec'h anv, o lavarout : "Petra ' ra deomp bezañ gall pe alaman, gant ma c'hellin gonit va zamm greun." Ur skolaer all eus hanternoz Bro-C'hall adarre a zisklorie e oa prest ivez da zistreiñ d'e vro, goude ma vije rediet da zeskñ alamaneg e-lec'h galleg d'ar vugale.

N'ouzon ket hag-eñ eo dre an hent-se e oa bet skignet ur brud all : ar Saozon a oa o vont da zivourzhañ gant harp kirri-nij ramzel ; ret e oa d'an dud en em skoachañ gant pourvezioù evit pevar devezh ; a-benn 90 devezh e vije echu ar brezel. Atav e oa dalc'het an dud gant hevelep goanag diskiant.

Dezrevelllet e veze ivez nouspet koñchenn diwar-benn ofisourion alaman o tiouganañ drouziwezh o bro pe oc'h en em dremen da Saozon pe c'haolourion hag o vont da gestal en tiegezhioù a-benn dizoleiñ dalc'hidi D.G. endeeun ; diwar-benn ofisourion saoz eus an "Intelligence Service" en em silet e renkoù al lu alaman hag aet da spierion. Un nozvezh ma tistroen d'ar gêr a-gevret gant kamaladed hor boa kejet war ar straed, izelloc'h eget an "Hôtel-Dieu", gant ur vandennad soudarded alaman mezv dall pe dost; ar re-mañ o doa toullet kaoz ganeomp ; unan anezho en doa kroget a-greiz-holl da gomz saozneg (egiz ur saoz, a lavare din unan eus va c'henseurtes ; me n'oa ket gouest da varn o vezañ ma n'em boa studiet nemet alamaneg d'ar mare-se); ha setu va c'hamaladed o tiskleriañ din goude m'hor boe tizhet en em zizober diouzh hor mezderion : "O! Hemañ a zo ur spier saoz, sur omp ! " ha n'oa tu ebet da zizarbenn o c'hredenn. Neb a glasse arvariañ a oa a-du gant an Alamaned. E gwirionez ne oa ket aes da unan mirout e skiant-vat.

+++++

P e n n a d 5

Daoust ma ne c'hoarvezas darvoud meur ebet e-doug mizioù ez eo ret menegiñ evelato argad an Italianed e Bro-C'hres a c'hwitas buan awalc'h. E-kreiz miz Du e rankas an Alamaned mont da sikour o c'hevredidi, evit brasañ mezhan an 'Duce'. Darn a gonte neuze o defe an Alamaned treuzet ar 'gennda dieub' evit diraez Italia met se ne c'hoarvezas ket.

A-hend-all e pade an emglev etre ar Rusianed hag an Alamaned; emzivizoù a oa etrezo hag an dra-se a lakae nec'het Turkiz a zouje na vije aet o bro da zavez ar marc'had a glaske skoulmañ an daou ramz. War un dro e lakae Alamagn Hungaria ha Roumania da emezelañ en emglev triferzhsek. Hogen, daoust ma oa bet addilennet Roosevelt e deroù miz Du 1940 ne oad ket evit rakwelout e teufe an Amerikaned tre er brezel hep dale ha Churchill a zegemenne ne vefe dilestradeg ebet abarzh 1944 : se a noten d'ar 6 a viz Du 1940.

Darvoudoù all avat a c'helle kaout ul levezon muioc'h war-eeun war donkadur Breizh. Diwar an 29 a viz Here e konted e oa Alamaned ha Gallaoed o klask en em doniañ en ur stumm bennak. Er penn-kentañ e oa dispis tre ar brudoù-se ken e teue an dud da grediñ un tammig n'eus forzh petra. Darn zoken, e-touez ar bobl, a oa prest da faltaziañ, evel m'en doa graet va zad-kozh argentaou, e oad o vont da stagañ Breizh ha Bro-C'hall ouzh Bro-Alamagn - na mui na maez - hag e vefe graet keodedourion alaman eus an holl Vretoned ; didalvez eo lavarout ne dennent ket kalz lorc'h diouzh seurt rakwel rak gwall ger e ranked paeañ neuze ar brient a vezañ eus gouenn ar vistri (1). Tamm ha tamm avat e oa bet roet munudoù resisoc'h, ma n'oant ket gwirion a-grenn atav. E-touez melloù ar faur-emglev peoc'h da vezañ sinet e kaved ar re-mañ : Savoie a vefe deroet da Italia kerkoulz ha Djibouti ; Tunizia a drofe d'ur genveliad ("condominium") ; Elzas a vefe daskoret da Vro-Alamagn ; divizoù arbennik a oa bet spisaet diwar-benn strollad-listri Bro-C'hall a zlee bezañ reolet gant an Alamaned. En eskemm e vefe dizalc'het darn eus tiriegezh ar Stad c'hall.

A-hervez e oa bet renet ar c'henbrezgoù-se gant Ribbentrop ha Laval ; Pétain ne oa ket a-du, war a lavared ; ur mavdiern gall, Baudoin e anv, en doa roet e

(1) Darn - evel va contr Henri k welis e 1942 - a vefe aet awalc'h da goodedourion alaman ma vefe bet roet dezho gwirioù le ket dezho krediñ dres. Ratozh an Alamaned a oa ober anozho sklaved ha notra ken: hounnezh a oa o c'hredenn.

zilez en abeg d'ar c'henbrezgoù-se, d'ar c'hentañ a viz Du 1940. Kement-se holl, egiñ ma ouzer, a zlee disoc'hañ da gejadenn vMontoire etre Pétain hag Hitler ha d'ur star-dadenn-dorn a bourchasas danvez ul luc'hskeudenn vrudet a voe ombannet stank war ar c'hazetennoù d'ar marc-se.

Evit kadarnaat ha gwiriekat an emglev di-c'hortoz burzhudus-mañ en devoa graet ar 'Führer' ur jestr meur : daskoret en devoa d'ar C'hallaoued relegenn an Dug a Reichstadt, mab Napoleon kentañ, ha meur a C'hall hengoun-gar en devoa skuilhat daeroù gant an anaoudegezh-vat hag an doneridigezh o soñjal en haelded Adolf Hitler. Seurt c'hoariva gant ur fetichenn - evel ma raen eus relegenn an Dug a Reichstadt - am boa kavet lu awalc'h.

D'ar mare-se ivez em boa notet e c'houlenne ar Pab digant ar gristenion pediñ evit ar peoc'h. Ar pezh en doa va damfeuket neuze e oa an diuntuegezh da welout ar Pab. Atav em eus kredet ne c'heller ket asantiñ da n'eus forzh peseurt peoc'h hag abafted ar Pab a nac'he kemer perzh en ur c'henstok ma anaveze an elfennoù anezhañ he devoa va strafuilhet un tamm bennak, daoust ma tamveizen enkadenn un den a c'hoari dre ret ur roll politikel hep kaout nerzh politikel ebet d'e zifenn.

+++++

P e n n a d 5

Peseurt darempredoù am boe gant an Emsav e-doug tri miz diwezhañ 1940 ? E gwirionez darempredoù distank tre dre n'arbenn ma tremenen ar pep brasañ eus va amzer er skolaj ha n'em boa ket bet tro c'hoazh da ober anaoudegezh gant emsaver ebet. Degouezhout a raen d'ar skolaj da eizh eur ; da eizh eur noz e kuitaen anozhañ ; hogen berr e oa va nozvezh da c'houde rak da ll eur e ranke an holl bezañ er gêr evit ar c'heulfe.

Dre genskrivañ eta em boa darempred gant an Emsav. Da skouer, em boa koumanantet da Sav ha da Walarn. Soñj am eus c'hoazh eus al levezeg am boa santet en abardaez m'em boa kavet a-benn ar fin un niverenn eus Gwlarn o tegouezhout ebarzh va c'hambr ; an niverenn 130 e oa, ma ne fazian ket ; gwall voan ha gwall zister e oa koulskoude ; ne oa ket kalz tra enni. Reiñ a raen avat d'al levrig-se un dalvoudegezh hud dre ma tegase din ur bezañs a oa hini an Emsav. Ar varzhoneg eus Roparz. Hemon a oa moulet en niverenn-se a-hend-all a ezgerie mat ar merzad-se (1).

Koumanantet em boa ivez da Sav - d'an 13 a viz Du em boa bet an niverenn gentañ - hogen ne roen ket d'ar gelaouenn-mañ a oa bet nevez savet a-rack ar brezel ar pouez a roen da Walarn bet diazezet pennek vloaz a-gont, a oa evidon neuze ur pennad hir tre a amzer.

A-hend-all, nebeut a levrioù brezhonek am boa gallet pourchas e-doug mizioù diwezhañ 1940, nemet "Geotenn ar Werc'hez" embannet gant "Skrid-ha-Skeudenn" am eus meneg-got a-ziarack hag am boa prenet d'an 11 a viz Here e levr di ar "Facultés", war ar c'haeoù, evit tregont lur.

An darvoud pouezusañ eus buhez an Emsav a skoas va spered war-dro kreiz miz Kerzu 1940 avat e voe kimiad Debeauvais hag Olier Mordrel. Ar c'heloù-se am boa gouezet o lenn an "Heure Bretonne" ha, koulz eo din lavarout, di-c'hortoz kaer e oa din. An darvoud-mañ eta ha na veizen ket mat an abeg nag ar ster resis anezhañ en doa roet nec'h ha tregas din ; ken mantret e oan bet gantañ zoken m'en em c'houlennen ha tu a vefe da saveteiñ Breizh a-benn ar fin. Damgompren a raen e oa ereet ar c'himiad-se ouzh politike-rezh nevez an Alamanned e-keñver Bro-C'hall ; se a oa grevus moarvat - hogen diskrediñ a raen e oa andonioù all dezhañ, peurgetket an dizunvaniezh ; kement-se avat a roe din da

(1) Talbenn ar varzhoneg a zo "Ar c'heloù mat" hag advoulet eo bet ebarzh dastumad 1943 embannet gant "Skridoù Breizh".

soñjal ne oa ket kreñv an Emsav peogwir e c'helle c'hoarvezout ennañ hevelep "dispac'hoù palez". Ne ouien netra diwar-benn Delaporte ; n'em boa ket klevet anv anezhañ a-ziajent. Betek neuze e oan en em staget ouzh O.M. ha Debeauvais, dreist-holl avat ouzh Debeauvais, daoust ma n'anavezen ket anezhañ koulz lavaret, dre m'em boa ranket e zifenn evit difenn va mennozioù. Evit e enebourion evel evidon e oa rener an Emsav hag an Emsav en ur stumm en em gemmeske gantañ. Seurt emzalc'h a oa difur marteze hogen natur tre ivez moarvat en degouezhennoù a oa o ren neuze hag a oa degouezhennoù dispac'hel ; hag a-hend-all, an hevelep tra en em gave gant ar C'hallaoued d'an ampoent : evit ar vrogarourion en em gemmeske ar "Resistañs" gant De Gaulle e unan.

Ar pezh a beurhegase ac'hanon ivez e oa an addisplegoù a oa graet d'an darvoud-se endro din. Beleion ar skolaj a oa bet laouen o klevout e oa aet kuit Debeauvais ha Mordrel. Ur wech e oa c'hoarvezet gant an tad Raffleugeot reiñ e ali diwar-benn ar c'himiad-se ha tro am boa bet neuze da selaou anezhañ. Merzet em boa avat e oa disammet e spered dre ma oa deuet ur c'hristen mat da gemer penn ar Strollad broadel ; kavout a ra din en devoa disfiz ouzh Debeauvais ha Mordrel dre ma ne oant ket douget meurbet d'ar relijion. D'ar c'houlz-se avat e soñje meur a hini er-maez eus an Emsav zoken e c'hellfe bezañ profet un tamm emrenerezh da Vreizh ha rak-se e tamantent da c'houzout piv a vefe e penn Breizh antronoz. Bezet pe vezet, seurt preder a-berzh beleion a oa natur awalc'h.

Diskleriadurioù all a veze roet d'an darvoud avat ha gant ar re-se eo e vezen displijet ar muiañ. An tad Hamon - ne oa en do-mañ adarre nemet heklev e gelc'hia-dur - a asure e paouezfe ar strollad broadel a vezañ broadelour evit dont da vezañ ... rannvroelour. Ar ger "rannvroelour" avat ne c'hellen ket gouzañv hag a blante imor annon

bep taol. Ar rannvroelouriezh ne oa evidon nemet treisoni e-keñver Breizh.

Un dastumenn c'hwerv awalc'h am boa tennet evelato diouzh disparti Debeauvais hag Olier Mordrel : o c'himiad a ziskoueze ne oant ket sikouret gant an Alamaned ar mañ n'o doa ket klasket dere'hel anezho ; e gwirionez e oa aesoc'h ha gonidusoc'h evit an Alamaned obten kenlabour ar C'hallaoued eget hini an Emsav.

Bezef pe vezef, sklaer e oa din diwar ar c'houlz-se . ne vefe ket ebat adsevel at Stad vrezhon, dindan dalc'hidigezh an Alamaned pe get. Ha n'oa ket un dudi evidon kennebeut rankout ober ar gwiriadur-se, en deizioù-se dreist-holl m'en em c'houlennen gant peseurt micher e c'hellen servijout Breizh ar gwellañ ha seveniñ ar surañ va micher a Emsaver.

+++++

P e n n a d 6

E Sant-Jermen edon d'ar c'hentañ a viz Genver 1941. En devezh-se em boa klevet abadennoù bruderezh ar skingomz c'hall e Lunden. Klask a raed diskouez e vefe heñvel stad Vro-C'hall hag Europa en amzer-da-zont dindan yev an Alamaned ouzh hini Iwerzhon dindan ar gouarnerezh saoz gwechall gozh. Ne gaven ket avat e oa kendrec'hus seurt ar-guerezh ; d'an ampoent ne oa ket mennet an Alamaned da gas war-raok ur politikerezh unyezhañ er broioù dalc'het ganto evel m'o doa graet ar Saozon hag ar C'hallaoued en Iwerzhon hag e Breizh. Soñjal a rae din zoken e oa dizampart kounañ degouezh Iwerzhon rak diskouez a rae e oa bet eus ar Saozon er c'hantvedoù kent mac'homerion eus ar gwashañ : penaos eta

bezañ divezh awalc'h goude-se evit en em dremen da ebetel ar vertuz ha kenteliañ ar re all ?

Ar C'haolourion, a-hend-all, a gondalc'he da vroudañ ar boblañs hag en devezh-se end-esun o devoa goulennet mirout "eurvezh ar goanag" dre chom er gêr e-lec'h mont da bourmen. Un doare e oa, end-anat, da gemer gwerczverk ar boblañs ha seurt doareoù a zo bet implijet a-c'houdevezh gant Aljeriz e-kerzh o stourm dieubiñ.

En devezhioù-se e oa tremenet va eotr Herri or gêr. Deuet e oa da gerc'hat bousd rak, du-se, e-tal Paris, e Pierrefitte, e oa an naonegezh o ren ; du-mañ avat, war ar maez, e kavemp bitailh fonnus gant ar gouerion o devoa darempred gant va zad a-hed ar ganol hag ar rioleñ. Va eotr a oa chomet er gêr daou zevezh gant e vab, Henri e anv ivez, a oa ur c'hrennard d'an ampoent. Eveljust e oa savet kaoz diwar-benn ar brezel e-keit ma oa va eotr er gêr. En degouezh-mañ em boa merzet tro-soñjal hiniennel va eotr (muioc'h hiniennel eget e oa hini va zad) : dre ma ne grede ket e ve gouest an Alamaned da aotren dezhañ frankizioù koododour par d'ar re en devoa bet digant ar C'hallaoued eo e nac'he da gentañ beli an Alamaned, emezañ ; ar c'hudennoù a yezh hag a vroadelezh, a sevenadur pe a stuzegerzh vroadel n'o devoa evitañ ster ebet. Gwir eo e oa eus va eotr ur sokialour etrevroadelour a-raok ar brezel.

E gwirionez ne raen en devezhioù-se nemet sellocou ar skingomz. Heuliañ a rae gwel-se emdroadur ar politikerezh e Bro-C'hall. E devoud e oa neuze div Vro-C'hall : hini Paris hag hini Vichi ; pe c'hoazh hini ar gennva dalc'het hag hini ar gennva 'dizalc'h'. E Breizh avat ne glevet mat nemet skingomzerezh Paris (war un dro gant hini ar Saozon) hag hennezh , e deroù ar miz Genver-hont, a oa savet kreñn a-enep da Vichi dre ma nac'he Pétain, a-hervez, seveniñ ar pezh a oa anvet ar "Révolution Nationale". Kelaouennoù Paris a oa kon

arloupet all a-enep da Vichi a oa, war o meno, kalz re wak evit pezh a selle ouzh ar c'henlabour gant an Alamaned. E skignlec'h Paris avat e raed goap dreist-holl ouzh ar re a felle dezho adsevel ar roueelezh e Bro-C'hall ; enebiañ a raent eta en o galleg "action" ouzh "réaction". Klevet em boa zoken ur gaozeadenn a-enep d'an danvez roue gall ha da vMaurras ; dizarbenn a raed ar c'hoari gerioù a rae Maurras gant ar ger 'Révolution' ("kelc'hdroadur") evit diskleriañ e tlee ar c'helc'h distreiñ d'e orin, da lavarout eo d'ar roueelezh, goude bezañ ruilhet warnañ e unan. An tabutoù -se etre Gallaoed a oa pell tre diouzh va freder e gwirio-
nez.

E Roazhon edon d'ar seizh a viz Genver. O teg-
ouezhout em boa kavet un niverenn nevez eus Gwalarn. Neuze
e oa adkroget ar vuhez skol evel a-gent nemet em boa ranket
distreiñ war varc'h-houarn antronoz rak disoñjet em boa darn
eus va levrioù. Graet em boa va mad eus an droiad-se evit
goulenñ digant va zad kas arc'hant da Reparz. Hemon a-bonn
prenañ "Gorsedd-digor" ha mirout din "Arvor" ; lakaet em boa
chomlec'h Sant-Jermen gant ar spi moarvat o dije bet va zud
c'hoant da lenn ar gelaouenn hag e vefent bet degaset evel-se
da gemer mennozioù brogar : hetiañ a raen gonit va zud d'an
Emsav d'ar poent-se, va zad dreist-holl, hogen n'oa ket
gwall akuit atav va doareoù ; divizet em boa da skouer n'em
befe mui skrivet nemet e brezhoneg d'am zud, pezh a oa ur
mennad mat eveljust hogen na oa ket prizet nemeur gant va
mamm dreist-holl hag a dape droug-penn o klask digejañ va
lizhiri !

Deuet e oan endro da Roazhon en devezh-se a-hend-
all, gant poan a-walc'h rak skorn a rae ha riellot e oa an
hent ; ha dre un taol-dichañs ouzhpenn e oa bet toullot rod-
adrenv va marc'h-houarn e-kreiz an hent ken em boa ranket
ober eizh kilometrad bennak war va zroad, ar pezh na voe ket
un dat tamm ebet gant ar yenijenn a oa o ren neuze.

E-doug pemzektez kentañ miz Genver ne oa c'hoar-
vezet netra. Kenderc'hel a raen da vreutaat diwar-benn an
Emsav hag an emrenerezh gant va c'hamaladed ; roudalet em
boa adarre gant de la Villéon ha de Saint-Simon e-kerzh ur
valesadeg e Koad-ar-Bili ; ar re-mañ ne oant ket a-du gant an
emrenerezh. Darn avat, evel Hubert, hag int oc'h harpañ
Vichi, a lenne an "Heure Bretonne" gant plijadur hogen evit
un abeg amoet : dre ma veze embannet enni a-wechoù pennadoù
a-enep d'ar Saizon (albac'henn ar paotr-se e oa ar gasoni
ouzh ar Saizon). Evidon-me ne oa kement-se nemet pennadoù
diouzh ar mare ha na gaven ket ampart rak diaesaat a raent
va labour bruderezh er gêr.

D'ar pemzek a viz Genver e oa douc Prefed
an 'Il-ha-Gwinun', Ripert, da ober un droiad vrudañ e Sant-
Marzhin. Bodet e oa bet ar skolidi vras er predva kozh, e-
kichen porzh ar re vras ; ganeomp edo an tad Raffleu eot hag
hemañ, da gentañ, en devoa displeget e-pad dek munud bennak
penaos ha pegoulz e oa bet savet skolañ Sant Marzhin ; kavet
em boa e brezegenn teuk hag amparfal awalc'h. D'e dro en devoa
konzet ar Prefed e-doug ugent munud bennak, hep diskouez
muic'h a entan nag a helavarded, o vesteodiñ a-wechoù,
stouet e benn gantañ e-giz p'en defe bet mezh. Deuet e oa,
emezañ, war urzh Pétain e unan ; hemañ a gonte war ar yaouankiz
evit adsevel Bro-C'hall ; an holl a ranke en em vodañ endro
da bPétain rak dezhañ e oa dleourez Bro-C'hall eus ar frankiz
a chome dezhi (ar soñj-se an boa kavet iskis : diste e oa ar
frankiz a chome e gwirionez da Vro-C'hall) ; a-drugarez da
bPétain ivez ne oa ket stad Vro-C'hall par da hini Bolonia
d'an ampoent. En ur ger, prezeger ar reuzeudigezh e oa bet
ar Prefed : dav e oa gwelout an traoù evel ma oant, degemer
an dismegañs ha gouzout e vefe kalet an amzer-da-zont. E
Paris a-hend-all, a ouzhpennas Ripert, e oa krisoc'h c'hoazh
emgav ar C'hallaoued hag int o tizeriañ gant an naon. Da ge-

ment a vizer ne oa nemet ul louzou : fiziout er sturier Pétain n'oa nemetañ a gement a ve gouest da leviañ al lestr Frañs betek ar porzh. Evit echuiñ a rae ar Prefed ur galv d'ar "Vretoned yaouank" a-benn harpañ rener ar Stad da seven- iñ e labour diaes ; hag oc'h ober damveneg eus ar sal e- lec'h edomp (un 'is-douar' kozh) en devoa garmet ar Prefed : "Evel hor gourdaoù e teuimp un deiz er-maez eus ar "c'hata- komboù" ha ni trec'h!" Al lavarenn diwezhañ-mañ am boa kavet souezhus awalc'h o vezañ ma soñje din betek neuze ne oamp ket evelato diskennidi ar Romaned.

Nebeut a heklev o devoa kavet komzoù pinouz ar c'haezh Prefed ; endro din e rae hini pe hini addisplegoù eoapaus dezho. Bezet pe vezet, kent deomp loc'hañ, e oa bet darnouet deomp pep a luc'hskeudenn eus "Rener ar Stad", deomp da virout ha da gehelañ end-deol ar fetichenn-mañ.

E-lec'h-all e rae Ripert Ripert prezegennoù seurt se, pezh a ziskouez e oa anezhañ ur c'hargiad mat ha koustiañsus. D'an 23 a viz Genver en doa distaget e dammig sarmon dirak izili kuzul an departamant. En dro-mañ en devoa damveneg an Emsav : arabat e oa, emezañ, distrujañ unded Vro-C'hall, anezhi un oberenn a vil vloaz hag a oa sakr, na petra 'ta, en abeg da se.

Dav e oa da gargidi Vichi labourat e gwirionez rak o beli a oa taget a bep tu. D'an ampoent edod o sevel e Paris ar c'hentañ strollad a-du gant ar c'henlabour a oa bet anvet da gentañ "Centre de rassemblement national" a-rack dont da vezañ ar "Rassemblement national populaire". Renet e oa gant Déat (a oa bet ezel eus ar S.F.I.O. a-ziagent ma na fazian ket) ha kavout a reas izili dreist-holl e-touez dalc'hidi ur sokialouriezh enep-komunour. Stourm a rae a-benn kas da wir ar "Révolution nationale" embannet gant Vichi hogen gwalleget gentañ, a-hervez, hag enframmañ Bro-C'hall da vat en'Europa nevez'. Seurt mennadoù ne glotent ket penn-

da-benn gant re ar gouarnamant gall e Vichi a oa o klask e hent d'an ampoent-se end-eeun : Flandin, ezel eus gouarna- mant Vichi en doa rost e zilez e deroù miz C'hwevrer ha kemeret e oa bet e lec'h gant Darlan a oa mennet a-hervez da gas ar c'henlabour war-raok). E miz Genver avat e kuzu- liked e oa Pétain a-du gant ar Saozon tre guzh, e c'hortoze un dro da adkregiñ gant ar brezel a-enep d'an Alamaned. Darn a soñje marre e vefe aloubet ar gennva dieub gant al lu alaman ; strollad listri ar C'hallaoued a vefe aet da harpañ ar Saozon ; ar vartoloded a ranke bezañ galvadeget ; an tirlu a vije advodet hag an holl soudarded dezouget da Afrika an Hanternoz. Neuze e vefe bet tu da flastrañ an It- alianed gant lu gall Afrika an hanternoz a glaske Weygand adurzhiañ d'ar mare-se. Kalz a vesk a oa eta e politikerezh ar C'hallaoued d'ar mare-se.

Darn a grede start er brudoù-se a vrezel. E-kreiz miz Genver end-eeun, ur c'hamalad din, Delourmel e anv, lezanvet Dede, diwar atiz e gerent a anaveze, a gredan, reizhour ur Skol-veur (notet em eus anv Lachelier ; n'ouzon ket ha reizhour e oa en Aljer pe e-lec'h-all) en doa graet e soñj tremen al linenn-harz. Bezet pe vezet, ar paotr en devoa kemeret tren hanternoz pergont-eizh e Roazhon ; ur blenier arbennik a zlee heñchañ anezhañ betek ar gennva dieub. Siwazh dezhañ, harzet e voe ar paour kaezh paotr ma oa o klask treuziñ al linenn. N'ouzon ket petra a c'hoar- vezas gentañ goude (1).

Daou baotr all, Emery ha Barbier o anvioù, a oa bet darbet dezho heuliañ ar memes hent ; betek Maroko e felle dezho mont hag int lusket bepred gant ar memes spont : bez e tlee ar wazed etre 18 ha 45 bloaz bezañ dastumet ha dezouget da Vro-Alamagn. Ar gasoni ouzh an Alamaned a greske bepred a-hend-all, er broioù tramor koulz hag en Europa

(1) Dizaliet e oa bet gant an tad Hamon a grade neuze c'hoazh e trec'h an Alamaned.

dalc'het : er miz-se end-eeun en devoa Roosevelt distaget ur brezegenn daer tre a-eneb d'an Alamaned. Diouzh un tu all e kleven an tad Hamon oc'h asuriñ e krogje an Alamaned gant un argadadeg vras e miz C'hwevrer ; eus pelec'h e teue ar c'heleier-se avat n'oan ket evit divunout.

Padal ne oa ket nemeur anv eus ar brezel e-doug hor c'hentelioù, - nemet eus ar brezel kentañ, eveljust gant hor c'helenner istor Delaunay (e goñchennoù avat ne blijent ket din rak ne dennent nemet da vagañ ar fouge gall e-touez ar skolidi) ; e-pad ar c'hentelioù prederouriezh ken-nebeut ne veze kont nepred eus Breizh ; darn eus ar re-se a gaven droch, evel an hini a oa bet graet diwar-benn kudennoù an 'trevadennerezh' (hervez ur pennad eus hon dornlevr buhezouriezh, savet gant Baudin hag embannet gant Beauchesne) hag he devoa da destenn (e galleg) : "de l'amour que doivent porter les peuples des colonies aux peuples qui leur ont apporté la culture!" Europiz an amzer-se n'o devoa kemplezh ebet atav ! Pa lavaran "Europiz" e tlefen skrivañ "bourc'hizion europat" an XIXvet hag an XXvet kantved rak o lenn al linennadoù-mañ e empennen degouezh va zud ha na oant ket lodek kennebeut er sevenadur aozet gant ar vourc'hizion-se end-eeun. Hag heuget e vezen ivez pa gejen e kêr gant ar brizonidi vorian bac'het d'ar c'houlz-se en ur c'hamp lous war hent an Oriant, truilhek ha reuzeudik : int ivez a oa bet dezouget hag implijet gant ar C'hallaoued evit difenn ar Sevenadur gall hag ar galleg, evel ar Vretoned o unan.

+++++

P e n n a d 7

E miz Genver 1941 eo e kejis da vat gant an Emsav. Daoust ma raen bruderezh bepred er skolaj n'em boa kavet hini ebet da rannañ a-grenn va mennoziou. Lakaet em

boa an tad Hamon da goumanantiñ da Arvor e deroù ar bloaz hogen hemañ, a-hend-all, hervez a lavare din, a nac'he peurzeskiñ ar yezh a-raok ma vije savet ar Stad vrezhon : un den e oa ha na blije ket dezhañ koll e amzer (1). Darn all a oa dedennet gant . ar c'hilistourm en em ziskoueze e bruderezh ar vroadelourion d'an ampoent : da skouer, ar pennad "Paris découronné" a oa bet moulet d'an ampoent war an "Heure bretonne" a oa bet kavet mat gant meur a hini ha na oant ket broadelourion vrezhon a-hend-all ; kintus hepken em boa kavet ar pennad-se e gwirionez. Divizoù am beze bepred gant an tad Plomet, peurvuiañ diwar-benn kudennoù hollek pe gravez ; pa groge da brezeg diwar-benn Breizh avat ne gaven poell ebet en e gomzoù. Er-maez eus Kalloc'h ha Pedenn ar Gedour n'anaveze an tad Plomet netra a-zevri diwar-benn Breizh hag ar brezhoneg ; ober a rae eus Breizh ur rannvro ha fellout a rae dezhañ pediñ evit Bro-C'hall koulz hag evit Breizh ; seurt brizh-trivlierezh politikel-relijiel ne hañvale ket din bezañ skiantek tre hag a begase ac'hanon a-grenn. Daoust m'em boa evitañ un tamm mignoniezh hag istim gwirion, seurt brizh-kredennoù eus e berzh a vire ouzhin a reiñ pouez d'e vennoziou a-zivout kudennoù all, sperelezh ha relijion peurgetket.

Ar rannvroelourion o doa kroget d'en em ziskouez d'ar mare-se. Kaset o doa d'ar Marichal Pétain un arc'hadenn uvel a-du gant ar brezhoneg hag a oa an diskan anezhañ, na petra 'ta, "ar brezhoneg arskol". Graet e oa eus an arc'hadenn-se ur "placet" a liv mat awalc'h doare ar skrid a oa bet savet neuze, e-lec'h e asured nouspet gwech n'oad tamm ebet e soñj gwallañ an disterañ an "unité indissoluble de la nation française". Rukunus em boa kavet ar "placet"-se, eveljust.

E devezhioù kentañ miz GENVER em boa koumanan-

(1) Kamaladed vat am boa er skolaj - evel Coignard bepred - a ziougane e vefe Breizh dieub a-benn miz Mezheven. Poan am boa da grediñ kement-se.

tet da "Sterenn" ha "Galv" hag hir e kaven an amzer o c'horthoz anezho da zegouezhout rak dale a oa ganto o tont a-zindan ar wask. N'em boa degemeret niverenn gentañ "Sterenn" a endalc'he "Iuram" gant Maodez Glanndour nemet d'an 30 a viz Genver.

D'an 20 a viz Genver e oan aet betek ar c'helc'h keltiek, st. ar Prad-war-laez (1), e-tal boulovard ar Frankiz evit en em enkrivañ war roll skolidi ar c'hentelioù brezhonek a veze roet eno hogen kavet em boa an nor brennet. D'an 25 eta e oan distroet di hag ar wech-se em boa gelllet dont tre. Abaoe un nebeut bloavezhioù a-raok ar brezel e oa digor ar c'helc'h keltiek (savet e oa bet gant Eujen Régnier e 1936, ma ne fazian ket ha renet e oa d'an ampoent gant an ao. Cariou, ur c'hervenad, a ouie un tamm brezhoneg, a gredan, hag a oa neuze kargiad e mererezh ar postoù). Sez ar c'helc'h a c'hoarveze neuze evel hiziv eus daou bezh, unan bras awalc'h a servije da sal-goroll peurliesañ (kentelioù a veze graet eno ivez d'an deraouerion war ar yezh) hag ur sal vihanoc'h e-lec'h en em vode ar re a ouie brezhoneg hag ouzhpenn daou lab ma klenked enno dilhadou ha dafar a bep seurt.

En devezh ma oan erruet e oa un tregont bennek a dud yaouank oc'h heuliañ ur gentel vrezhoneg er sal vras ; graet e oa ar gentel-se gant un duard hirvoan, blev du gloanek dezhañ, un dremm strizh ha liv kreñv (Joly a oa e anv, a gav din, ha d'an ampoent e tlee bezañ kargiad er Strollad broadel) (2).

Ne oan ket chomet eno avat ; aet e oan d'ar sal vihan e-lec'h em boa kavet un toulladig a dud a vrezhonege kenetrezo. Anaoudegezh a ris neuze gant L.M., nevez deuet da studier war al lennegezhioù klasel e Roazhon ; e studioù

(1) Rue du Pré-Perché. N'anavezan ket ster **resis** ar ger.
 (2) N'ouzon ket pegeit a amzer e chomas ar paotr-se er strollad na petra a c'hoarvezas gantañ. War-lerc'h ar brezel avat e voe barnet d'ar galeot buhez-pad. E wreg an hini eo a sammas anezhañ ar muiañ e-doug ar prosez a-hervez (implijet e oa e S.B.B. koulskoude.)

etre avat en devoa graet e Kemper er skolaj Sant Erwan ; ur c'hernevad eus kreisteiz Kernev e oa, genidik eus Konk. Bez e oa anezhañ ur paotr start ha koujorn, daoulagad du krak en e benn, bepred o vutuniñ daoust d'ar strishadurioù. Daou vloaz koshoc'h egedon e oa ha soudardet e oa bet endev el lu gall e-pad ar brezel. Desket en doa ar yezh el levrioù evelton hogen komz a rae anezhi gwelloc'h egedon d'ar **marc-se**. Dizoloet em boa e oa koumanantet da Walarn evelton ha se en doa ereet ac'hanomp diouzhtu.

Pa oan o tont tre er sal edod o lenn ur sorbienn fentus tennet eus SAV hag evit komz fraezh n'intenten ket kaer an hanter eus ar gerioù. Gouest e oan neuze da lenn ha da skrivañ met ret e voe din gortoz miz pe zaou a-raok gellout kemer perzh en un diviz bennak.

D'ar c'hentañ a viz c'hwevrer e oan distroet d'ar c'helc'h keltiek. En dro-mañ em boa graet anaoudegozh gant ur studier all, danvez apotiker d'ar marc-se, J.M., a oa o lenn "Rimadelloù ar gloud" troet gant Yann Ezel pa oan degouezhet. Hemañ a oa ur brezhonger a vihanik eus Plougastell-Daoulas a gomze ar yezh didenn kaer ha dezhañ, ouzhpenn, pouezmouezh ganus e gorn-bro. Evelton e oa koumanantet d'an holl gelaouennoù a zeue er-maez d'ar c'houlz-se, Gwalarn, Sterenn, Dihunamb ha zoken d'ar Vuhez Kristen embannet gant Kabusined Rosko. War ar marc'had e anaveze Marc'harid Gourlaouen hag heuliet en doa ganti Skol dre lizher OBER. Evelton ivez en doa lennet "An Aotrou Bimbochet e Breizh" ha "Geotenn ar Werc'hez". Ur broadelour taer a oa anezhañ, unan a c'hellen en em glevout gantañ.

D'ar seizh a viz C'hwevrer eo em boa kejet gant Abeozen evit ar wech kentañ. Un darvoud e oa bet evidon ar gejadenn-se eveljust : Abeozen, na petra 'ta, a oa ur "skrivagner brudet" ha kalz a zoujañs am boa evitañ a-dra-sur petra bennak ma n'em boa lennet skridebet dioutañ. D'ar mare ma tegouezhis gant Abeozen evit an dro gentañ en

devoa an neuz a viras a-c'houdevezh betek e varv, war-
bouez nebeut : gwenn ha rouez e vlev, dizolo e dal, rouf-
ennet e zremm ; evidon-me - n'em boa ket tizhet triwec'h
vloaz c'hoazh - e oa anezhañ un den war an oad endev, graet
gantañ ar brezel bed kentañ. A-hend-all e oa mentet bihan ha
treut (Saunders Lewis, pa gejis gantañ e 1947, er c'heñver
-se am lakae da soñjal ennañ). E zoareoù a oa feuls ha prim:
a-wechoù e paoueze trumm a brezeg ; aspleidiñ a rae ouzh an
daol hag adkregiñ a rae a-daol da gomz en ur sellout a-benn
ouzhoc'h. Bepred e seblante taeret d'ar c'houlz-hont ha
gant an dra-se e oan bet souezhet. E vouezh avat hag hi
mouk ha raouliet un disterañ am boa kavet plijus.

En devezh-se e oan en em gavet adarre gant
L.M. ha J.M. Tud all a oa ganeomp ivez eveljust hag
Abeozen en devoa graet ar gentel diwar-benn lennegezh vrezh-
onek ar grennamzer ha Skol ar varzhed ; glaouskridoù eus
e gentel a oa bet darnaouet deomp e fin an eurvezh (1).

War-dro ar mare-se ivez em boa kroget da
bleustriñ sezioù ar Strollad broadel. D'an 8 a viz C'hwe-
vrer e oan aet betek renerezh-kreiz ar Strollad. Eno e
feurme ar vroadelourion ur solieradur kentañ en un ostel
kozh dirapar awalc'h. Peurvuiañ e tizhed anezhañ dre ar
straed Boderi, e penn ur porzh ; ur porzh all serret gant
ur gael en em astenne en diaraog, betek ar c'hae. Ar savad-
ur-se, a voe distrujet e-kerzh bombezadegoù 1944, a oa lec'h-
iet iskis awalc'h, diouzh a gounan hiziv, a veskell e-keñver
ar c'hae. Ne chom netra dioutañ hiziv : tiadurioù all nevez,
enno peurvuiañ stalioù kenwerzh, a zo bet savet en e lec'h
ha war c'horread ar porzh diaraok.

Bezet pe vezet, ne oan ket deuet tre ennañ en

(1) O miret em eus betek hiziv koulz ha glaouskridoù all
eas ar c'hentelioù a voe graet gant Abeozen er mizioù-se
diwar-benn yezh Barzhaz Breizh hag a zo bet embannet
abaoe gant PREDER.

devezh-se rak prennet e oa an nor.

D'ar 14 a viz C'hwevrer e oan distroet da gen-
tel Abeozen er c'helc'h keltiek ; eno em boa adkavet bepred
an hevelep skolidi hag ouzhpenn ur studier nevez (n'em eus
ket mui soñj eus e anv) ha n'en doa ket degemeret Gwalarn
daoust m'en doa koumanatet, war a lavare ; edo o vont da
gas ul lizher klemm da Gerverziou a oa neuze sekretour
Gwalarn hag "Ensavadur Breizh". En devezh-se ivez e oa degou-
ezhet ganin levrenn gentañ ar "Prederiadennoù diwar-benn ar
yezhoc'h hag ar brezhoneg" gant Meven Mordiern ha stad awalc'h
a oa ennon gant va frenaenn nevez, a c'hellit krediñ. Disk-
ouezet em boa va skouerenn da J.M. Va c'henseurt en devoa
lennet an oberenn-se penn-da-benn hag a roas kalz meuleu-
di dezhi : kalonekaat a rae kement hini a stourme evit ar
yezh vroadel, emezañ.

Abeozen en devoa graet un eil kentel diwar-
benn al lennegezh vrezhonek. Degaset en doa gantañ ivez
avat ur pakad skouerennoù eus "Ur Breizhad oc'h adkavout
Breizh" ha na oa ket diviet d'an ampoent eveljust ha lennet
hor boa a-gevret ar pennad gouestlet d'ar gelennadurezh
divyezhek.

E fin ar gentel e oa savet marvailh diwar-
benn ar sez nevez a rankemp diskoachañ evit ar c'hentelioù
da heul rak kerik e oa ar feurm a oa lakaet deomp gant
Kariou, rener ar c'helc'h, evit ar sal vihan a breste deomp.
Keloù a oa da vezañ kaset deomp kentizh ha ma vije dizoloet
ur chomlec'h nevez evit ar gentel war-lerc'h.

Kenderc'hel a ris evelato da bleustriñ ar
c'helc'h keltiek dre ma kejen eno aHes gant meur a vroadel-
our. D'ar pemzek e oan tremenet eno ha toullet em boa kaoz
diwar-bann rannyezhoù gant L.M. a oa o tichañsañ tremener c'helc'h.
Darn eus ar re a groge gant studi ar yezh d'ar mare-se hag
int brezhonegerion a vihanik lies a wech ne gomprenent ket
pegen pouezus e oa unvaniñ ar yezh (en amzer-se e oa kreñvoc'h

an teodyezhoù eget bremañ ha kalz a berzh a daoled d'ar pezh a oa anvet ar 'yezh vev' hag a ziwalla mat da zistagañ egiz "du-mañ" (da lavarout eo evel ma raed en o c'horn-bro); hag an dra-se, dre ma n'en em santen mui stag ouzh teodyezhoù ebet - ne glaskis biskoazh 'prechi' egiz va zud - a hegase ac'hanon awalc'h.

Tremenet em boa ehanoù an Ened - etre an 20 hag ar 24 a viz c'hwevrer - e Sant-Jermen, hep nemeur a blijadur rak va zud a oa bepred ken aheurtet a-enep d'an EMSav hag a ziougane din e vefen lakaet en araok gant renerion an Emsav hag e vefen paket en o lec'h tra ma chomfent-int sioul mat er goudor !

Graet em boa va mad eus an ÷vezhioù-se evel-ato evit respont - e brezhoneg - da Gerverziou en devoa goulennet diganin un nebeut sizhunioù kent bezañ kenskriver "Ensavadur Breiz" e Roazhon ; L. a oa bet lakaet e penn ar rannvro ha dindan e urzhioù edon ! (1). Neuze eta em boa diskleriet e asantendad gemer ar garg-se (leun a c'hred e oan) met, evel m'em eus merket endev, biskoazh ne voe goulennet diganin ober an disterañ labour ha gant kement-se e voen disouezhet eveljust. Forzh penaos e oan gwall yaouank d'ar mare-se peogwir n'em boa ket zoken triwec'h vloaz pa oa bet goulennet diganin mont da genskriver "Ensavadur Breiz".

Pa oan distroet da Roazhon, un nebeut devezhioù war-lerc'h, d'an 28, em boa bet un diviz hir awalc'h diwar-benn politikerezh breizhat gant L.M. Kejet em boa gant va c'henseurt e straed ar "Prad-war-laez". Paotred ar c'helc'h a oa neuze o pleustriñ war ur pezh-c'hoari bennak e galleg a oa mennet a-Hervez da daolennañ buhez ar vartoloded war an aod e Breizh. E gwirionez e oan bet displeijet awalc'h o selaou outo rak an doare-lennegezh rannvroel-se a hañvale
 (1) Daou lizher am boa bet neuze gant Kerverziou ; an hini kentañ a oa e galleg met o daou skoet gant ar skriverez !

din bezañ diwirion ha doñjerus awalc'h : gouzout a ouien ervat pegen kalet e oa gwechall buhez ar vartoloded ha dihetus e kaven-me a-grenn he defe servijet ar vuhez-se hepken da bourchas d'ur brizh-skrivagner danvez ur pezh-c'hoari "livus" bennak, mat da ziduiñ un nebeut bourc'hizion ; seurt si e gwirionez a zo hini al lennegezh rannvroel 'vreizhat' fardet e Breizh - hag embannet e Paris - abaoe ur c'hantved.

War-lerc'h an abadenn e oan pignet a-gevret gant L.M. betek e chomlec'h a neuze, e "Roc'h-Konkaven", e straed Sant-Mikael. "Roc'h-Konkaven" a oa - hag a zo atav - un ostaleri-ti-debriñ e gorre-kêr, etre leurgêr Santez-Anna ha leurgêr al Lisoù. Ar c'harter-se a zo kozh awalc'h evel hini al Lisoù e unan.

D'ar c'houll-se e oa L.M. e penn kevrenn ar studierion vroadelour e Roazhon hag e soñj edo plediñ gant ar gelaouenn a oa bet nevez savet en Naoned hag a oa anvet "Ar Studier brezon". Siwazh, an div niverenn gentañ a oa bet kempennet gant tud ha n'en doa ket L.M. kalz a fiziañs enno hag a oa o vont d'ober sotonioù ; se a gave kasaus rak an deroù eo a zo a bouez evit pep oberenn. Ur skouerenn eus niverenn 2. an tammig kelaouenn-se a zo chomet ganin (hini miz Meurzh 1941 : sañset e tlee dont er-maez bep pemzekte hogen steuziañ a reas buan tre). E gwir, gwall zister e oa an niverenn-se aczet gant studierion war ar vezekniezh eus an Naoned. Da gentañ ne oa nemet galleg enni ; a-hend-all e oa moulet warni ivez pennadoù divourrus savet a-ratozh evit klotañ gant mennozioù ar Alamanned (unan, da skouer, diwar-benn lec'h ar Yuzevion er medisinerzh) a oa neuze ar vistri ; an hini en doa skrivet ar pennad a oa gonezet moarvat d'ar mennad fagat. D'ar mare-se ne daolen ket kalz perzh ouzh kement-se dre ma veze embannet ar mennozioù-se e pep lec'h hag e pep amzer hag ivez peogwir e felle din bezañ brogarour, da gentañ:ur wech ma vije savet ar Stad e vefe gwelet petra a vefe

graet anezhi, a soñje din neuze met faziak e oa sur-mat hevelep emzalc'h.

Ar peb all eus an niverenn a oa ken dister all : ne oa anezhañ nemet pennadoù gallek à venne bezañ skañv (ur varzhoneg droch e galleg, da skouer), unan all diwar-benn an arz emgefre pe un diskouezadeg livadurioù en Naoned.

L.M. a felle dezhañ pakañ krog e stur ar gelaouenn hag a c'houlennas diganin e harpañ dre bourchas dezhañ ur pennad e brezhoneg (1) ; da c'hortoz e kinnigas din darnacuiñ anezhi er skolañ hag o toull-dor Sant-Visant (2). Dija e oa bet skignet evit metra e-touez ar studierion ; hervez L.M. e oa bet degemeret mat gant an darn-vuiañ eus ar re-se.

Aozet en doa a-hend-all ur vodadeg evit ar studierion a-benn ar yaou war-lerc'h hogen nec'het e oa oc'h en em c'houlenn ha dont a rafe tud rak an "H.B." he doa merket fall an eur war he niverenn diwezhañ.

Goulennet em boa ouzh va c'hamalad neuze perak e oa bet kemmet trumm renerezh ar Strollad daou viz a-gent. Respontet en doa L.M. o tagañ O.M. dreist-holl : tamall a raed dezhañ, emezañ, faziou a gadoniezh koulz hag a vererezh ; ivez, n'oa ket doareet e dro-spered diouzh ar garg a rener ur Strollad (ne ran amañ eveljust nemet adlav-rout ar pezh a oa lavaret din neuze ; ne venegan ket eta ur varnadenn bersonel). Kavout a ra din avat e rebeched ouzh O.M. dreist-holl faziou a vererezh ; a-hérvez en doa roet plasoù er Strollad da dud ha n'oa mennoz broadel start

(1) Ar pennad-se a savis damc'houde hag a voe moulet en niverenn war-lerc'h ar "Studier brezhon", gant n'ouzon pet mank. Ar wech kentañ e voe din embann ur skrid e brezhoneg.
(2) Setu pezh a ris un nebeut mizvezhioù goude.

hag a arveve diwar ar Strollad e-lec'h e harpañ.

Seurt sioù a oa da rakwelout. Bepre e teu d'un (1) emsav a seblant bezañ trec'h izili hep nemeur a feiz ha neuze e oa er Strollad tud a glaske ober politikerezh egiz ar C'hallaoued hep brogarouriezh ebet (2). Poent e oa ober un tamm skarzha dezho ha setu al labour en doa boulc'het R. Delaporte d'an ampoent, emezañ.

E kevrennoù all eus an Emsav e oa kemendall a zroukvesk. Er skingomzerezh, da skouer, e oa gopret tud ha n'oa kennebeut mennoz politikel breizhat ebet. Brizh-Vreizhiz a oa en em silet eno evel e-lec'h-all, a-benn tennañ korvo diouzh an Emsav. Betek neuze e oa bet ar skingomz etre daouarn ar rannvroelourion hag ar c'henaouion ; an abadennoù n'oa doa spered broadel ebet. Moarvat e oa arabat mont re vuan, en doa anzavet L.M. ; un abadenn evel an hini a oa bet skignet nebeut amzer a-raok diwar-benn Jakez Riou a oa mat ; ret e oa diskouez d'ar Vretoned petra oa buhez vroadel Breizh kent prezeg a-zivout politikerezh ha frankiz vroadel. Met evelato e ranke ar re a briente seurt abadennoù bezañ broadelourion penn-kil-ha-troad.

Distroet e oa neuze L.M. da gudenn ar bruderezh da ober d'ar studierion. Deuet e oa R. Delaporte da gomz outo d'ar yaou a-raok hag ur merzad mat tre en doa roet dezho. Delaporte en doa gouestlet e brezegenn da zizarbenn an tamall a veze graet bepred d'ar Strollad : bezañ paet gant an Alamaned. "Ma vijemp gopret gant an Alamaned," emezañ, "n'hor befe ket ranket krennañ da beder pajennad ment an "Heure Bretonne". E gwirionez ne oa ket aes stourm evit Breizh en amzer-se.

A-greiz marvailhat e oamp degouezhet da "Roc'h-

(1) N'eus nemet soñjal e niver izili ar strollad kommuñ e Rusia war-lerc'h trec'h ar Volcheviked.
(2) Ar gwall dech-se a gaved er Strollad a zo kadarnaet gant ar pezh a lenner war niverennoù kentañ ar gelaouenn "GALV".

Konkaven. Ar sal gentañ a oa dalc'het gant Alamanned oc'h evañ ; en em dennet hor boa d'un adsal adreñv hag urzhiadet hor boa pep a vanne. L.M. en doa roet din un dek a niverennoù eus ar "Studier brezon" da lodennañ e Sant-Marzhin. O kenderc'hel gant e ziviz e ouzhpennas e vefe start saveteiñ Breizh ; ret e oa rakwelout pemp bloavezhad a vruderezh abarzh gellout distrujañ ar rakvarnioù a oa maget gant hon enebourion a-enep deomp e-touez ar bobl. Evelato e kavo dezhañ e oa war-dro 30% eus ar boblañs a oa, diwar neuze, a-du gant Breizh ; hogen ne oa ket frammet hag a-se ne oa ket gouest da stourm.

Evel meur a hini e oa L.M. douget da fall-galoniñ o soñjal e stuz ar boblañs d'ar marc-se e Breizh. Evit diskouez pegen displeg e oa hiniennoù eus ar boblañs -se a-hervez e venege komzoù un ofisour alaman a rae ur 'bobl sklaved' eus ar Vretoned en abeg da niver ar flatradennoù a zegouezhe en e "gKommandantur". R. Delaporte en doa klasket difenne genvroiz met en e greiz, a lavare L.M., en defe tuet awalc'h dezhañ evit abegoù all moarvat rak na rae ar Vretoned forzh ebet eus ar frankiz a oa kinniget dezho gant an Emsav. E gwirionez e oa diziazev kunujenn an ofisour alaman : kemendall a flatradennoù a voe da goulz distro ar veli c'hall e Breizh ; hag e Bro-Alamagn drec'het e 1918 koulz hag e 1945 e oa kemendall ivez a flatradennoù. Da geñver pep kemm gouarnerezh dispac'hel e c'hoarvez traoù seurt-se e pep bro. Savboent R. Delaporte a-hend-all a oa trivhiadel kentoc'h, a gav din : ne c'heller ket muioc'h tamall d'ar Vretoned chom hep bezañ broadelourion en XXvet kantved eget d'ar C'hallaoued chom hep bezañ bet Republikaned en XVIIIvet kantved. Dispac'hel eo an Emsav e Breizh : da lavarout eo e tenn da sevel e Breizh un emgav politikel ha n'en deus ere war-eeun ebet gant an tremened tostañ.

Anv a oa bet a bep seurt traoù a-c'houdevezh : heuliañ a rae kentelioù keltieg er Skol-veur met n'en doa

ket kalz amzer da bleustriñ war ar yezh. Studi an istor he defe plijet dezhañ muioc'h en ur stumm.

Eus an diaesterioù o devoa darn eus ar vroad-elourion nevez deuet d'an Emsav e oa bet kont ivez. Kerent unan a oa aet betek deviñ e levrioù brezhonek evit mirout outañ a zeskiñ ar yezh. E dud-eñ ne oant ket ken kriz : bez e c'helle silañ bommoù brezhonek en el lizhiri a gase dezho hep dazwered heverk ebet eus o ferzh.

A-rack mont kuit em boa gouezet gentañ e vefe graet kentelioù Abeozen diwar neuze e ti Jord ar Me, 1 st. Etraon.

Antronoz eta, d'an 28, e oan deuet d'ar chomlec'h -mañ da eizh eur hanter diouzh an noz. D'ar marc-se en doa feurmet Jord ar Me ur ranndi e pevare solieradur ur savadur a oa lec'hiet a-us d'ar stal-voued-meur Valton, ma ne fazian ket, pe dres e-kichen (o paouez distreiñ d'ar vro e oa). Ar chomlec'h nevez-mañ a oa aes awalc'h din rak tostik e oa da skolaj Sant-Marzhin : n'em boa nemet daou-c'hant metrad bennak da ober evit tizhout anezhañ. En nozvezh-se eta e oan pignet dre un diri dic'houlou, o toullbabañ, betek ar pevare solieradur ; an it. Me hec'h unan a oa deuet da zigeriñ an nor. Graet em boa neuze anaoudegezh gant an tizegezh ha boemet e oan bet o tizoleiñ e komzed brezhoneg ouzh ar vugale er gêr. Tiegezhioù brezhonek a c'helle bezañ e Roazhon eta !

Dre zic'hañs n'edo ket Abeozen ganeomp dres en taol-se : aet e oa da Vrest, da welout Roparz Hemon, a gredan. E skolidi vat a oa deuet, re nevez en o zouez, peurgotket an dimezell Douaren, ur wenedourez eus an Alre, hag he nizez ; hag ivez ur paotr eus Bro-Dregar, a gredan, un duard, Boutros e anv, brezhoneger a vihanik, dizek awalc'h a-hend-all ha n'em boe ket tro da adwelout nemeur a-c'houdevezh.

Peogwir n'edo ket hor c'helenner ganeomp hor

boa komzet diwar e benn, na petra 'ta (laouen e oan o vezañ disacouzanet a-zivout ar skrivagner brudet!). Gouezet em boa e oa Fañch Elies e wir anv hag e oa o vevañ e Sant-Brieg e-lec'h e oa kelenner el Lise. Evit plediñ gant ar skingomz vrezhonek e teue bep sizhun da Roazhon.

Daoust da ezvezañs hor c'helenner hir boa bet awalc'h a goustiañs evit labourat hon unan. Lennet hor boa a-gevret ar pennad "Studi hol lennegezh" eus "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh". Marvailhat hor boa graet un tam-mig goude-se. Abeozen, gouez da unan, a lavare e tenne un tamm creadur ar brezhoneg da hini al latin ; n'ouzon ket ha reizh tre ez eo ar mennoz-se hogen natur awalc'h e oa hevelep ali a-berzh Abeozen a oa ul latinegour, evel ma ouezer.

+++++

Pennad 8

Setu penaos eta e c'hoarvezas va darempredoù kentañ gant an Emsav. Ret eo lavarout a-hend-all ne oa ket degouezhet kalz darvoudoù nevez e-doug tri miz kentañ ar bloaz. Notet em boa hepken prezegennoù distaget gant Hitler d'an eil a viz c'hwevrer ha d'ar 14 a viz Meurzh. En hini gontañ e tiogele Hitler e renfe ar peoc'h adarre a-benn fin ar bloaz moarvat ; forzh penaos, biken ne zeufe Bro-Saoz a-benn da gas anezhañ kuit diouzh ar c'hevandir. Pismiget em boa ton c'hwezhet ha brabañserezh Hitler a hañvale bezañ paotr ar c'hoariva evel Napoleon ha Mussolini, daou greis-teizad. Disfiz am boa bepred ouzh unrennerion greiz Europa. Evito da vezañ peuzvat ha tost ankounac'haet e pade bepred diouganou zo. Ur vacuez he doa urusinet e vefe sinet ar peoc'h d'an 21 a viz Genver 1942. Perak an deiziad-se? Diaes eo gouzout.

Kurioù paotred an "Intelligence Service" a veze brudet ivez : pourmen a raent e Roazhon - incogniti, eveljust - ; c'hwi a rente servij dezho ha damc'houde e resevec'h ur gartenn weladenn eus o ferzh... gant ur bilhed mil lur. Seurt garedon a ziskoueze ervat e veze gopret bepred ar vertuz.

Ar spont a groge da goazhañ ivez. Koulskoude, hon ostizez du-mañ he devoa aon bepred rak an aezhennoù-mougañ. Den ne rakwele neuze ar bombezadegoù kriz a oa o vont da zrastañ kêr Roazhon.

Kenderchel a raen da bourchas levrioù ha kelaouennoù brezhonek. E kreiz miz Meurzh em boa degemeret SAV, d'ar 14, ha prenet em boa "Ar baganiz" a-ziaroak. En devezh-se ivez e oan distroet da di ar Mee. Graet hor boa ur skrivadenn diwar levr Roparz Hemon bepred "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh". War-lerc'h ar gentel hor boa divizet a-zivout kembraeg hag iwerzhoneg ha darnaouet e oa bet deomp follennoù skriverezet eus ar gentel.

Keloù am boa bet ivez en nozvezh-se a-zivout ar 'placet' a-du gant ar yezh kinniget da bPétain. Hemañ, hervez Abeozen, en doa respontet da gKergariou, a oa deuet d'e gaout gant ar "Placet" : "Mais pourquoi tenez-vous donc tant à votre patois ?"

Ar rannvroelourion vreizhat - anezho, evit an darn-vuiañ, bourc'hizion a-du gant Vichi - a glaske e deroù ar bloaz 1941 diazezañ o luskad e Breizh. D'an ugentvet a viz Meurzh e oa deuet er-maez niverenn gentañ ar gel-aouenn bemdeziek "La Bretagne". Kounnaret e oan bet gant an darvoud-se avat dre ma tistruje al labour am boa klasket kas da benn er skolañ abaoe mizvezhioù : diskleriañ a raen d' am c'hamaladed a felle din gonit d'am mennozioù ne c'helled ket bezañ gall ha Breizhad war un dro ; hag en un taol en em ziskoueze tud a lavare e oant brogarourion vreizhat hag a ziogele ar c'hontrol. Gant c'hwervoni e veizen n'oa ket

gwashoc'h eget un trede nerzh - kenlabourerion gant an enebour - evit diskar un emsav.

Evit ar bobl, a skriven, n'eus diforc'h ebet etre ar Stad hag ar vroadelezh ; paouez a ober anv eus ar Stad a dalvez eta dinac'hañ ar vroadelezh ; an dud a zibab a'v etre ur vro hag ur vro all, ur yezh hag ur yezh all ; ne'pred avat ne chomont war vordo, en entremar.

Ar brezel en doa adkroget d'ober e reuz en Europa e deroù miz Ebrel : An Alamaned a oa deuet tre e Yougoslavia. An holl endro din er skola'j asoñje e vefent trec'h hep dale ; diveulet e oa zoken stourm al lu yougoslavat peogwir e oa dic'hoanag hag en e ser e oa tamallet fals-enor an ofisourion gant hini pe hini troet a-drumm da enep-milourion (Gallaoued a spered - unan a gave din zoken e oa ur brogarour gall - koulskoude ha se am souezhe eveljust). Evidon-me ne gomprenen ket mat peseurt abegoù kadoniel a oa da intrudu an Alamaned ; ne welen ennañ nemet un arnod da astenn pelloc'h harzoù o impalaeriezh. O digareziou eta - evit gwareziñ pobloù Yougoslavia e tiskarent ar Stad yougoslavat, a arguent - a gaven eta pilpouz hag amzere ; n'o doa da ober, a soñje din, nemet anzav e tennent o mad eus o nerzh evit ober pezh a garent, hep ober van da zerc'hel kont eus ur vuhezouriezh hag ur mennoz foran ha na raent van ebet anezho a-hend-all.

Abarzh dibenn miz Ebrel e oa bet distrujet al lu yougoslavat. Ar C'hresianed taget war un dro, daoust dezho bezañ harzet taer ouzh al lu'ez alaman ha bezañ dalc'het penn pell amzer a-raok ouzh an armeoù italiat, a oa bet faezhet ken buan all gant kirri hobregonet ar "Wehrmacht" ; Enez Kreta a oa bet aloubet neuze gant an harzlammerion alaman. Adarre avat e oan bet souezhet gant emzalc'h an Alamaned d'ar mare-se. Diskouezet o doa ar vrasañ doujañs evit an emgannerion c'hresian galonek ha kaset o doa d'ar gêr, a gredan, ar

brizonidi, gant gourc'hemennoù ar "Führer" : ar brezel a droe d'ur gevezadeg vell-droad renet gant ar "c'hoari tek", ar "fair play", evel ma lavar Kembreiz war-lerc'h ar Saizon.

En ur stumm all e kemere an Alamaned damant ouzh ar C'hallaoued ; e gwir, "aotrounez kelennerion" an trede Reich a oa leun a azaouez evit ar sevenadur gall ; en eneb o devoa an dispriz brasañ ouzh Poloniz ha Serbiz, lakaomp. Hevelep rakvarnioù a ziskleir ivez perak ne oant ket tomm tre evit harpañ an Emsav, daoust ma klaskent arverañ ar gourdrouz anezhañ evit gwaskañ war gouarnamant Vichi (1).

Bezef pe vezef, hael e c'helle an Alamaned bezañ d'an ampoent rak mistri e oant war Europa a-bezh. Ar -V-ou abaf o doa kroget ar C'haolourion da livañ war ar mogerioù neuze a oa c'hoarzhus ; ken chin all avat e oa ar respont a-gefridi a oa roet dezho - e lizherennoù-moul - gant ar vrudourion alaman a ouzhpenn lu'anoù seurt-mañ e-kichen ur -V- kurunennet a lore (!) : "Les Allemands sont vainqueurs sur tous les fronts." Ar c'homzoù-mañ a oa tonket dezho dont da vezañ goapaus er bloavezhioù war-lerc'h.

Er mizioù a Veurzh hag a Ebrel 1941 en boa deraouet da zaremprediñ bodadegoù ar Strollad broadel. D'ar 6 a viz Meurzh e oan aet eta da sez kevredad Roazhon hag Il-ha-Gwinun ar Strollad. Ar sez-se en em gave 4 st. Toulouse, en trede solieradur hag a c'hoarveze eus tri fezh enk awalc'h. Eno e veze dalc'het peurvuiañ bodadennoù ar Strollad e Roazhon. Eno ivez em boa kavet L.M., o vutuniñ evel boaz : eñ an hini eo a zlee ober ar brezegenn. Graet em boa ivez anaoudegezh gant Paul Gaignet ha Marcel Planiol. Hemañ a oa neuze e penn rannvro an "Il-ha-Gwinun" a-berzh ar Strollad

(1) Kement-se hep mennout d'an Emsav e unan. O prederiañ e tleje ar renerion bezañ komprenet e ranke an Emsav chom kuzh ken na vije sklaeraet an emgav politikel etrevroadel. Hogen ar wirionez eo ne grede den e trec'h ar Saizon ha den ken-nebut ne c'helle hetif anezhañ evit abegoù am eus displeget e-lec'h-all.

Broadel d'ar mare-se. Ma ne fazian ket e oa anezhañ ur bourc'hiz roazhonat, kelenner, gwiraour hag istorour war un dro, a anaveze mat lezennoù kozh an dugelezh (e zanvez an hini e oa ha savet en doa levrioù diwar o fenn, a gredan). D'ar c'houlz m'en anavezis e oa anezhañ un den war an oad endev, dezhañ mourroù hir, giz deroù ar c'hantved, bepred gwisket ha kabellek e du, ul lañsenn a baotr a valee souchet hag a gomze gant ur vouezh raouliet hag hanter mouget.

Ne c'houzañve ket nemeur beli an Delaported er Strollad - tud yaouank a oa anezho, na petra 'ta - ha Klask a reas mui pe vui o distroadañ, a gav din. Ne oa ket brezhoneger kennebeut ha ne rae forzh ebet eus ar yezh. Bezet pe vezet, c'hwitañ a reas. Kuitaat a reas ar Strollad ha ne voe ket mui kel anezhañ da c'houde.

E deroù miz Ebrel e oan distroet d'ur vodadeg all, 4 st. Toulouse. Tro Paul Gaignet e oa d'ober ur brezegenn ha deuet e oan da selaou anezhañ. Paul Gaignet, evel Planiol, a oa ur Roazhonad, bet skoliad e Sant-Marzhin evel-don, o stourm evit an Emsav abaoe 1934-35, ma ne fazian ket, kenlabouret en doa gant Debeauvais, a oa ivez ur Roazhonad, egiz ma ouzer. Un den yaouank c'hoazh, dedennus, a oa anezhañ, ur melegan lagadet glas, bihan avat, m'em eus koun mat, gwisket kran ha kempenn, dezhañ doare ur bourc'hiz desavet mat. Gignet en doa eta ur brezegenn diwar-benn an houarn hag ar glaou e Breizh. Seurt danvez ne oa ket entanus meurbet hag evit seveniñ va dlead broadelour a rank plediñ gant kement kudenn a denn d'ar vro em boa selaouet prezegenn Paul Gaignet e gwirionez.

N'em boe ket tro nemeur da adwelout Paul Gaignet a-c'houdevezh. Evel nouspet re all, gallegerion re lezirek da zeskiñ ar yezh vroadel, en em dennas diouzh an Emsav nebeut amzer da c'houde. Fae a rae war ar brezhoneg, a gav din.

War-lerc'h Paul Gaignet en doa prezeget Yann Goulet.

Hemañ avat ne oa ket ur seurt gant e ziaraoger : ken feuls e oa e zoare ha ma oa seven hini egile ; taer e oa e enebrez, kreñv ha kalet e dresoù, askornek e zramm, balc'h e zaoulagad ; sirius ha stennet e oa bepred ; evel-se, da vihanañ, em eus e anavezet d'ar mare-se. Ul livour a oa anezhañ ha war-dro ar c'houlz-se en devoa lakaet taolenoù e gwel er c'helc'h keltiek a-gevret gant Langleiz.

An tamm prezegenn en devoa-eñ graet deomp a voe disheñvel krenn ivez diouzh hini Paul Gaignet. Diwar neuze e plede Y.G. gant ar "Bezen breizhat" (evel ma verken ebarzh va deizlevr); ne voe ket anv gantañ eus glaou nag houarn, eus Padraig Mac Piarais ha seurt testenn a oa dudius-oc'h evelato. Yann Goulet eta en devoa erbedet deomp uhel-skouer ar brogarour iwerzhonat : Breizhiz, egiz Iwerzhoniz, a zlee bezañ prest da reiñ o buhez evit ar vro. Hoarvat e c'hellfe seurt dodenn seblantout bezañ lennegel kentoc'h en hon amzer a hiziv ; er grez-hont avat, en aergelc'h hag e plegennoù ar brezel, e oa ton ar wirionez ganto.

Un nebeut tud yaouank a oa en em gavet ganin hag a oa o komz brezhoneg. War-lerc'h ar vodadeg em boa gallet eskemm un nebeut komzoù gant Yann Goulet (1). Marvailhet em boa ivez gant J.M. Bet en doa, emezañ, Roparz Hemon da gelenner e Brest hag ober a reas din ar poltred anezhañ. Tud yaouank all a oa o vrezhonegañ war va zro hogen n'em boa ket bet tro da doullañ kaoz ganto. Goude bezañ chomet da arvestiñ ouzh al levrioù brezhonek a oa diskouezet war un daol - n'em boa ket arc'hant evit prenañ avat - e oan distroet d'ar skolañ.

War-dro diwezh miz Ebrel e oan deuet da Sant-Jermen evit ehanou Pask. D'ar mare-se, d'an 22 a viz Ebrel, e oa bet bombezet kêr Vrest gant ar Saozon. Tizhet e oa bet lojeiz Roparz Hemon hag eñ e unan a oa bet glozet en degouezh

(1) Evel ma ouezer e voe Yann Goulet barnet d'ar marv war-lerc'h ar brezel, en e ezvezañs. Bevañ a ra en harlu abaoe.

-se. Ouzhpenn-se e oa bet distrujet un toullad mat a levrion
brezhonek ha dreist-holl amprouennoù ar geriadur brezhonek-
gallek (1) ha dornskridoù a bep seurt. Roparz Hemon en doa
ranket adskrivañ e labour diwar notennoù a oa bet pourchas-
et dezhañ gant Vallee.

Meur a annezher eus Brest a oa bet lazhet e-
doug ar vombezadeg avat ha gwall nec'het e oa ar saozkar-
ourion gant dizamant o mignoned. Hogen, hep dale, o devoa
kavet ur respont d'ar gwall-gevrin-mañ : penaos e c'helle
mignoned lazhañ o mignoned. Brestiz ne oant ket bet lazhet
gant ar c'hirri-nij saoz, hogen gant ar re-alaman a oa erruet
evit teurel o bombezenoù kerkent ha ma oa aet kuit ar Saizon,
sammañ ar re-mañ gant an torfed-se hag o lakaat da vezañ
kasaet gant ar boblañs. Rak makiavelouriezh an Alamaned
a oa dreistfaltazi (2).

N'em boa ket graet kalz tra e Sant-Jermen
e-pad an ehanou-se. Ur wech e oan aet da gouronkañ er ganol;
n'em boa ket graet ur wech all : yen-skorn e oa an dour ;
n'en doa ket ouzhpenn trizek derez. Un droiad am boa graet
ivez gant va zad betek lenn ar Boulez.

Va zad a groge da vozañ ouzh an Emsav. Evela-
to e oa aet skuizh va mamm gant al lizhiri brezhonek a skriven dezhi
ha na dizhe ket intent ervat hag henn diskleriañ a reas din. Kroaziañ
a ris eta war va mennad da zeskñ dezhi lenn ar yezh. Hogen
va zad a oa krog da lenn an "Heure Bretonne" - koulz hag
an ao. Thouminot, ar miliner, hon amezeg. Pezh a glaske va
zad avat e oa keloù diwar-benn "gwallskouerioù" prefedti
Roazhon. Taget garv e oa melestrerezh ar Prefed Ripert hag
evel ma ne oa ket karet beli Vichi gant an dud e lennet
gant dudi ar skridoù emsavus a veze embannet war gelaouenn
ar vroadelourion.

(1) Lenn war an divoud-se lizher Meven Mordiern embannet war
niverenn gentañ "Ar Vro", p.8. Pask 1959.
(2) Ne fell ket din lavarout ne vefe ket bet gouest tamm
ebet ar genelwerinelourion alaman da gas da benn hevelep
taolioù hogen en degouezh-se ne oa ket gwirheñvel tamm ebet
hag a-hend-all e tiskouezas awalc'h ar Saoz-Amerikaned ne raent
forzh ebet eus poblañs Breizh a flastrent dindan o bombez.

Klask a rin bremañ reiñ un nebeut pajennoù eus va deizlevr,
evel m'henn skriven neuze. Adal miz Ebrel e oa savet an
deizlevr-se e brezhoneg penn-da-benn. Kregiñ a ran war-lerc'h
ma voen deuet endro da Roazhon d'ar 25 a viz Ebrel (1).

Diriaou 25 a viz Ebrel 1941

Distroet omp hiziv da Roazhon. Ar vuhez a grog
endro evel a-gent.

Digwener 26 a viz Ebrel 1941

'Beilhadeg' betek dek eur nemet kard. Setu reol-
iadur nevez ar Prefed : n'ouzon ket penaos e c'hellin mont
da gentañoù Abeozen ha da vodadegoù ar Strollad.

Disul 27 a viz Ebrel 1941

O welout S. omp bet hiziv. Houmañ he deus disk-
leriet deomp e oa bet bombezet Brest e gwirionez gant an Al-
amaned : noz a oa anezhi e-pad, ar vombezadeg koulskoude.
War a lavar an dud e Brest e oa aet kuit ar gwir nijerezh
saoz abaoe teir eur dija paz eo erruet ar c'hirri-nij alaman
da vombezañ kêr. Den ebet ne oar mat perak met n'eus forzh:
Ar Saizon a zo sent holl gwitibunan hag an Alamaned ne c'hel-
lont bezañ nemet roñfled. Kement-se hervez ur studierez eus
Brest a zo o chom e Roazhon, a asur ez eo Gallez a-rack bezañ
Breizhadez, da lavarout eo ez eo Gallez ha netra ken. Ar
c'heloù-se he doa gouezet gant ur mezeg eus Brest end-seun.
Ivez, sañset, e vefe bet harzet hiniennoù e Brest gant an Al-
amaned evit bezañ skignet ar brud-se.

Aet omp da bourmen evel boaz betek an T.A.
e-lec'h em eus enoet o sellout ouzh genaouerien a skoe taolioù
troad en ur vell. Gwelloc'h e vefen bet er gêr o labourat
war ar yezh evelkent, pe o studiañ istor Breizh.

Mantrus e kavan e ve kemend-all a Vretoned ned
eo Breizh evito nemet ur paour kaezh rannvro ; e-lec'h karantez-
vro n'o deus nemet fouge o vezañ gall ; ha neuze, n'eo ket
gouest an holl dud da brederiañ : re ziaes e vefe dezho
(1) Peogwir edon o komz eus ar genelwerinelourion alaman war
ar bajenn a-rack eo ret din notañ amañ levezon o folitikerezh
war Vichi: 55 mezeg yuzev a oa bet kaset kuit eus Penn-ar-Bed e 1941.

moarvat. Da grediñ eo e rankimp saveteiñ Breizh en desped dezhi marteze. Kousket eo : ret e vo he dihuniñ dre an nerzh ma n'eus tu all ebet d'ober e-giz-all.

Dilun 28 a viz Ebrel 1941

Barbet (1) a zo deuet endro d'ar gêr. N'eo ket kalz treutoc'h eget a-ziagent. N'ouzon ket penaos en deus gallet distreiñ diouzh ar c'hampoù prizonidi.

D'abardaez em eus bet tro da welout C. e-pad un nebeut munutennoù. Da c'houde on pignet da ranndi ar Strollad 4 st. Toulouse. Kavet em eus Delaporte eno : edo o komz gant n'ouzon piv diwar-benn Yann Goulet, hini Sant-Malo. Kaset em eus ganin buhez Padraig Mac Piarais daoust ma n'em boa ket awalc'h e arc'hant evit paeañ.

Dimec'her 30 a viz Ebrel 1941

Aet on da gavout C. adarre evit amprestañ arc'hant diganti. Neuze em eus gallet peurbaeañ va dle e sez ar Strollad 4 st. Toulouse. Du-se e toullis kaoz gant ur vaouez a-zivout levrioù brezhonek embannet nevez zo : Nevenoe-Oe, gant Jakez Ricu, da skouer.

Diriaou lañ a viz Mae 1941

E bodadeg ar studierion vrezhon on bet gant Orio. War-lerc'h an eur on degouezhet eveljust en arbenn a lezennoù nevez embannet gant Prefed ar Skolaj ha na ro aotre da guitaat ar studi nemet da nav eur nemet kard. Bez e c'hellis evelato klevout prezegenn L.M. diwar-benn "L'éducation du peuple breton", e galleg siwazh. L.M. n'eo ket evit skrivañ nag ar re all evit intent ar brezhoneg lennegel, peogwir n'ouzon ket ar yezh tamm ebet pe neuze peogwir ne gomprenont nemet un trefodaj. Daoust deomp hon unan e rankomp ober gant yezh an estren. Padal, da betra e talvezo deomp bezañ dishual ma chomomp sklaved da yezh an estren, pe kentoc'h an enebour ?

(1) Isarboellour e oa bet er skolaj p'edon en eil ha kentañ klas. Ur paotr treut ha kastiz a oa anezhañ a-raok ar brezel endev.

Anavezout a raen endev prezegenn L.M. ; diskouezet en doa din div wech endev ar skrid anezhi hag un nebeut alioù ha menegoù am boa roet dezhañ. Mouszh ur brogarour a oa gant L.M. pa oa o tistagañ e brezegenn. M'en em gavfe e Breizh muic'h a vrogarourion a seurt gantañ e vefe adsavet hor bro abarzh pell.

Un tregont bennak a studierion e oamp er vodadeg-se (div blac'h yaouank en o zouez) ha stlakañ a reas an holl kalonek an dacuarn pa voe fin d'ar brezegenn. Kent loc'hañ e eskemmis un nebeut gerioù gant L.M. ha J.M. ha prenañ a ris al levrig "A toi, militant breton" (1)

D'ar beure, evit gouel Pétain (2), e oamp bet war leurgêr ar maerdi hag e liorzh Morpaz. En endervezh em eus gwelot ur film droch awalc'h "Blaireau" e dalbenn.

Digwener 2 a viz Mae 1941

O kemer da zigarez e oan morglañv em eus gallet dont er-maez da seizh eur ha kard. Kejet em eus da gentañ gant Launay (3) a c'houlennas ouzhin p'en devoe gouezet ez aen d'ur gentel vrezhonek hag-eñ e oan a-du bepred gant ar "vBreiz atao-ed". Goude-se e oan degouezhet gant Boutros a ambrougas ac'hanon betek ti ar Mee. Hogen eno e kmiadjomp : n'en doa ket amzer da vont, emezañ. Pignat a rankis va unan penn. Ar Mee a gavis eveljust met ne verzis liv ebet eus an ao. Elies. N'en doa ket gallet ober e gentel en devezh-se.

Disul 4 a viz Mae 1941

O welout ur gevezadeg v'basket' er "Cheminsots" omp bet. Enocet em eus evel boaz. D'abardaez ez eo deraouet ar retred.

- (1) Al levrig-se a oa embannet gant ar Strollad broadel. E-tro 60 pajennad a oa ennañ. Ar spered anezhañ, diouzh an eus koun, a oa taer awalc'h, awenet gant spered emaberzh sizhun Fask tamm pe damm. Un alberz eus istor Breizh hag an Emsav a gaved ennañ.
- (2) Gouel al Labour a oa bet lidet neuze evit ar wech kentañ e Bro-C'hall.
- (3) Ar c'henskoliad-mañ a oa bet kaset kuit e fin ar bloaz skol a-rack, kent na zegouezhas an Alamaned.

D'ar 4 a viz Mae e oa kroget ar retred diwezh studioù e Sant-Marzhin. Seurt retred, aozet evit skolidi ar c'hlas prederouriezh a oa hengounel hag a veze dalc'het bep bloaz d'an hevelep mare en un ti perc'hennet pe feurmet gant ar skolaj e Plougastell-Roazhon, war ribl ar Winun, tregont kilometrad bennak diouzh kêr Roazhon, en ur c'horn-bro livus, dreist-holl da goulz an nevez-hañv : ar Stêr Winun a rahe zrezuz eno e-harz runioù brugek ha koadek a wisk ul livrez flamm e drou an nevez-amzer.

En abeg d'ar brezel avat n'hor boa ket gellet digêriañ ha chomet e oamp eta e diabarzh ar skolaj. Graet e veze an emvodoù hag ar prezegenoù ebarzh ur rannsavadur a oa lec'hiet a-stok ouzh sal-c'hoariva ar skolaj.

Pal ar c'helennadurioù a veze roet deomp a oa lakaat an dud yaouank da zibab da vat ur stad-vuhez - da lavarout eo chom "er bed" pe neuze heuliañ ur c'halvedigezh relijiel. Eveljust, evit ar pep brasañ eus ar skolidi ne oa kudenn ebet: ar vuhez relijiel n'he doa ster ebet evito. Hini pe hini a zibabe d'ar mare-se avat hag a yac neuze da gloareg pe da zanvez lean en ur skolaj nevezidi. Evel ma c'hoarvez alies awalc'h, un darn eus izili breuriezh Sant Yann-Eudes a oa tutaet e skolaioù an Eudisted end-eeun.

Un danevell hir awalc'h em boa savet e galle diwar an devezhioù-se (unan all e brezhoneg, kalz berroc'h). Ar pep muiañ eus an danevell-se avat - e galleg - a yac da bismigat ha da vurutellañ emzalc'h an tad a roe deomp ar c'helennadurioù. D'ar mare-se e oa politikelaet a-grenn va spered endev hag eveljust em boa taolet perzh da gentañ ouzh mennozioù politikel an tad Georges a rene ar retred-se. N'ouzon ket ha bez e oa eus hemañ un Eudist ; doare ur misio-ner en devoa avat gant ur mell barv du a veze bepred o flou-rañ. O vevañ er C'hanada e oa bet, a gav din, hogen bez e oa anezhañ, dreist pep tra, ur rouelour gall a-du krenn gant Vichi, hep tamm spered breizhat eveljust, lakaet ne vije ket

bet ur gall anezhañ, hep muiken. A spered e oa gall atav hag ober a raen anezhañ ur "français fanatique". Ne guzhe ket e vennozioù tamm ebet ; bepred e veze o komz eus danvez -rous Bro-C'hall, eus rouelouriezh c'hall, eus "Action française" "puisqu'on a le droit maintenant de se dire 'action française'..." egiz ma lavare a-wechoù. Graet en doa e studioù ebarzh ar memes skolaj ha Pétain ha rak-se, moarvat, e vage evit ar "Grand Vieillard" un doujañs deol a gaver-me berrboell. Ar pezh am hegase ar muiañ avat e oa ar boaz en devoa da erbediñ deomp ar "rannvroelouriezh"- giz Maurras, eveljust - (gouzout a rae e komze ouzh Bretoned bet darbet dozho kouezhañ etre daouarn ar vesaerion fall un nebeut mizioù kent) ; neuze e veze deomp Barrès, ar "Petite Patrie" ha me 'oar-me. Rak, eveljust, n'houle ket klevout anv eus emrenezhez evit Breizh. Ivez e c'hoarveze gentañ ober anv eus "orin keltiek" (1) Bro-C'hall, komz eus "anarchie celtique" ar C'hallaoued, pezh am lakae da hejañ va diskoaz hag a reas din, a-c'houdevezh, evit darn, kemer kas ouzh ar c'hozh Kelted kozh.

Gant se, aes eo kompren, n'helle ket an tad Georges kaout kalz levezon warnon ; re galet e oa ar stourm a ranken kas da benn a-enep d'an holl endro din evit profañ an disterañ 'kretadurezh' war nep tachenn d'ar re a oa evidon eneberion, war dachenn ar relijion koulz ha war an tachennoù arall.

Dav eo din ouzhpennañ e oan bet fouket gant meur a stumm eus tro-spered hor c'helennour. Lavarout a rae, da skouer, ne oa anezhañ nemet benveg ar c'hras etre daouarn Doue ha dres e tamallen dezhañ bezañ diseblant evel ur benveg ouzh tonkadur ar re a oa fiziet ennañ hag en devoa levezon warno evelato. E gwir e verzen en e brezegenoù - ha se a gaven ken dihetus all - boaz ar vicher ; e jourdoul hag e vevder, e zoug d'ober fent zoken, ne hañvalent ket din bezañ natur tre, mekanek ne lavaran ket. E gwirionez e oan war

ziwall dre m'edon en ur framm - an Iliz c'hall - a zifenne ur gravez a oa va hini hogen a chome estren ouzhin a-hend-all evel framm end-eeun.

Gouzout a reer en deus tamallet Meven Mor-diern d' an Iliz bezañ tutaet nouspet Breizhad en hor bro evit ezhommoù liesseurt hec'h obererezh. E gwir, lezennelour ha gwiraelour e oa meur a wech savboent an Tad Georges en e brezegenoù, diazezet war un doare gwir berc'hennañ ha defe bet an Iliz end-eeun war ar re a zo badezet, damheñvel ouzh an hini he defe ne vern peseurt stad war he sujidi. Diogeliñ a rae, da skouer, e oa d'an Iliz dibab ar re a zlee servijout Doue hag e rouantelezh war an douar. Seurt keal eus ar c'halvedigezh hag eñ ergorat rik ne glote ket nemeur gant va meizadur anezhi:houmañ n'e c'helle bezañ, a soñjen, nemet hiniennel ha kevrinel war un dro. Ne fell ket din lavarout ne oa ket tu da gompren tamm ebet savboent an tad Georges (moarvat e voe dibabet Youenn Drezen ha Jakez Riou da vont d'ober o studioù en ur gouent e Spagn gant leaned en em harpe war hevelep sturienn) hogen seurt pleustrezezh, a gredan, a c'houlaka ez eo enframmet ar gristenion en ur c'helc'hiadur kristen rik hag unvan e stuz kevredigezhel a-hend-all. An degouezh-mañ end-eeun n'en em gave ket ganin, avat. Va zad, da gentañ, ne oa ket kristen nemeur. Hogen, dreist-holl, diwar ar mare ma oan deuet da vezañ broadelour breizhat e teue an Iliz da vezañ evidon, evel m'em eus merket, ur c'horf estren, dre ma oa gall e Breizh. Moarvat e kaver, daoust da se, beleion broadelourion e Breizh. Peurvuiañ avatez eo deuet ar re-mañ d'an Emsav goude tizhet ganto ar velegiezh. Ha peurvuiañ ivez ne c'hellont kas da benn obererezh digor ebet, dreist-holl war dachenn ar politikerezh. N'eus nemet soñjal en diaesterioù a bep seurt o deus sammet Yann-Vari Perrot a-hed e vuhez dre m'en deus klasket seveniñ ul labour bennak evit Breizh, ha kement-se daoust pegen strizh bennak e oa an dachenn dibabet gantañ. Moarvat e vo

daelet ouzhin en deus kement emsaver zo da dalañ ouzh skouilhoù seurt-mañ, o vezañ ma rankomp holl gonit hor bara en ur framm estren, enebour zoken, peogwir ez eo ur c'halz ac'hanomp kargidi eus ar Stad c'hall, er gelennadurezh pergen. Ne c'heller ket avat peurgenveriañ an Iliz ouzh n'eus forzh peseurt stad evit daou abeg : da gentañ, an hini a emouestl enni a ra bepred a youl vat en hor broioù hag en hon amzer ; neb a fell dezhañ avat bezañ kelenner e Breizh, en deiz a hiziv, a rank servijout ar Stad c'hall; d'an eil, ouzhpenn an elfenn lezennel - na c'hell ket kaout kement a wered en degouezh-mañ o vezañ maz eo a-youl-vat izili an Iliz ha ma n'he deus houmañ norzh-rediañ ebet ken - ez eus un elfenn sakr en emouestladur ar beleg, da skouer, dre ma ned eo ket an Iliz e sell neb en deus ar Feiz, ur gevredigezh denel rik diazezet war ur gevrat etre perzhkemeredion kevatal o gwirioù a-benn ar fin - hervez Rousseau, disakraer ar stad - hogen ivez ur gevredigezh a wir doueel, stumm gwelus a rouantelezh Doue, leuriadez e veli hag e zreistboudelvezh. Evel-se da vihanañ e komprenen an traoù ha rak-se ivez ne felle din da briz ebet emouestlañ en ur c'horf e-lec'h em befe en em santet liammet a goustiañs e-keñver ar re o defe bet perzh warnon.

Sklaer e oa din d'ar mare-se a-hend-all - ma varnen diouzh lañs ar c'hoantegezh am luske da stourm evit Breizh - e oan graet da gentañ evit an ober politikel (rak skrivañ e brezhoneg, difenn ar yezh a oa evidon evel just un ober politikel : kement levr embannet e brezhoneg a zo ivez un ober politikel drezañ e unan en hon amzer dreist-holl) hag en em c'houlenn a c'heller penaos e oan nec'het gant rakwel ur gefridi hag un tonkadur all am befe gallet dibab. Klask a rin eta diskleriañ eus pelec'h e tiwane an nec'hamant a oa o tiaezañ va spered. Meizet em boa Breizh betek neuze evel ar gwirvoud

ne metañ e talvez ar boan gouestlañ va buhez dezhañ. Moarvar ez eus bet kantadoù ha miliadoù a dud a zo tremenet en Emsav ha n'int ket chomet ennañ, marteze dre ma ne oa framm start ebet d'o darc'heñ hogen emichañs ivez dre ma ne oant ket evit reiñ netra anezho o unan da uhelvennad ebet. Ganin-me avat ne oa ket hevelep kont ha pezh a glasken dres, hep gouzout mat din marteze, e oa un uhelvennad da ouestlañ va buhez a-bezh dezhañ (1).

An aters a save d'am spered e oa eta peseurt talvoudegezh wirion en devoa an ober an boa dibabet. Hor c'harantezvro-ni Brezhoned an ugentvet kantved a zo disheñvel diouzh hini broiz arall. An darn-vuiañ eus brogarourion ar c'henelioù all - ha stadañ a raen an ~~dr-se~~ gant desped e ser Bro-C'hall - a oa lusket gant un nerzh a ziavaez dezho : evit ar C'hallaoued d'ar mare-se e oa ar Riez c'hall hec'h unan, hini Vichi pe hini ar "C'hallaoued dieub", hag a oa o frammañ anezho ; ivez, ouzhpenn-se, gant ur mennoz foran, un emskiant bobl, hag a oa ken diabegadus hag an natur hec'h unan. Heñvel e oa engav ar gomunourion a oa ambilhet gant ur framm liesdereziek etrevroadel ha broadel hag a oa harpet ivez gant ur renkad kenurzhiat hag emouez outi hec'h unan. Da skorañ va c'hredenn e talvoudegezh ar stourm a ziuzen-me, avat, ne oa na framm na kumuniezh emskiantek a bouez ebet. Va unan penn e oan. An talvoud a felle din en em ouestlañ dezhañ, Breizh - hogen petra oa Breizh zoken, da betra e c'helle servijout a-benn ar fin ? - a oa rakvannet en un dazont diasur ha na zeufe biken da wir marteze.

Fellout a rae din skoazellañ tud va fobl e Breizh evel Breizhiz met ne oa tu ebet da dizhout ar pal-se hep tremen dre ur Stad vroadel a zistaolent d'an ampoent ha ne oan ket sur o defe degemeret biken. Daoust eta ha ne oan ket o vont

(1) En holl emsaviou e kaver genaouec'hion a wast o buhez hep gouzout re perak, dre verboelllegezh rik, evit sentiñ ouzh o bondoug tagañ pe o neuroz. Seurt emzalc'h n'eo ket denel eveljust.

d'en em reiñ d'an avel ?

Hogen donoc'h ha lemmoc'h e oa c'hoazh ar skiant am boa eus 'teuskadurezh' va 'uhelvennad' pa geñverien hemañ ouzh an hini a oa kinniget din gant an Iliz. O kemer ur garg en Iliz e kejen gant ur Framm hag ur gumuniezh unanet ha sur e oan da servijout ar gumuniezh o servijout ar Framm: ne oa ket va aberzh ha va emro war var da chom aner a-grenn eta ha ne oa ket tonket din :

Gwastañ dudi

Ur vuhez verr evit netra, pe washoc'h
Eget netra ?

Hogen lakaomp zoken e vije e Breizh ur Framm ha n'oa ket anezhañ c'hoazh, daoust hag hemañ en defe roet da gement aberzh am befe-me graet evitañ ar ster leun a oa goulennet gant va meiz (1) ? Kentoc'h avat e ranken anzav ne oa nep framm dioutañ e unan netra estreget ur c'heal pe un tasmant. Poellañ a raen eta an emouestladur d'ur framm evel ur meri idolouriezh peogwir n'en deus hemañ bezoud ebet dioutañ e unan. Amañ eo dres e sav kudenn sakrelezh ha doueagezh ar Stad. Gwechall e empened beli ar roue evel ur perzh doueek o teverañ diouzh Doue e unan. Rousseau a zeuas neuze da zinevetaat ar Stad (en ur stumma vihanañ). Hogen en un doare iskis awalc'h, en hor c'hantved-ni, ez eo deuet endro houmañ da arc'hiñ dreistwiroù ha brientoù an douealezh hep ober avat dave ebet da Zoue en dro-mañ.

Moarvat e c'heller lavarout ez eo krouet an den gant ar gevredigezh (hag a-hend-all, hep framm an Iliz hec'h unan ne vefe kristen ebet eveljust) hogen koment-se ne lavar ket ez eo an hinienn evit keloù se e dalc'h ar gevredigezh. Houmañ n'eo ket ur finvezh evit an den, un tu ne lavaran ket. Ne c'hell ket ar gevredigezh eta, ar Framm

(1) Klevet em eus emsaverion o doa bet trubuilhoù a bep seurt da c'houzañ evit Breizh oc'h en em c'houlenñ perak o c'houcant bet berrboellwalch evit en em lakaat war var da c'houzañ an trubuilhoù-se. Ar respont a gavent eo o doa kement a blijadur o stourm evit Breizh m'o defe gouzañvet muioc'h c'hoazh o tilezel ar stourm hag an dañjerioù anezhañ.

mar karit, enderc'hel den da emouestl ebet. Sed pezh a ra koulskoude, mui pe vui, an holl Stadoù, dreist-holl avat ar re fagat, kenelwerinat pe gomunour hag e gwirionez e c'houlenn ar Stadoù-se digant an hinienn un emouestlerez leun ha klok.

An emouestlerez-se d'ur Stad pe d'ur Framm eo na gompren ket mat d'ar mare-se dres. Nevez lennet em boa en amzer-se buhez Padraig MacPiarais ; e bodadegoù ar Strollad broadel edon o paouez klevout meulbrezegennoù diwar e benn. C'hoazh e c'hellen meizañ mennad ar brogarour iwarzhonat peogwir e oa lec'hiet en ur venoziadeg kristen a zaspren. Hogen d'ar c'houlz-se ivez em boa lennet "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh" ha taolet em boa evezh ouzh un arroudenn an boa kavet ebarzh ar pennad "Ar Stad hag ar Vroadelezh". En arroudenn-se - blaz an arvarouriezh ganti un disterañ marteze - e skrive Roparz Hemon :

"An den, avat, a roe gwechall e vuhez evit 'an tron hag an aoter', ha n'en dije ket kavet izel awalc'h hor mennad-ni, reiñ hor buhez evit ur yezh ? P'int bet skuizh o vervel evit o roue hag o feiz, lavaret eo bet dezho mervel evit o mammvro; pa vint skuizh o vervel evit o mammvro, lavaret e vo dezho mervel evit un dra all. Da bep meurlarjez e teu ar Stad gant ur gwiskamant nevez."

Hag e gwirionez, d'ar c'houlz-se, e-doug ar brezel, e roe miliadoù ha miliadoù a dud o buhez a youl vat d'o uhelvennad (1) komunourion koulz ha kenelwerinourion, Alamaned koulz ha Galloued pe Amerikaned. Hag an emaberzh-se eo, evel ma verken bremaik, na veizen ket mat o vezañ ma oa graet evit pezh a hañvale din bezañ un tasmant dic'halloud ha n'oa ket evit diwall diouzh ar marv hag an netraidigezh e servijerion.

Eveljust e c'heller reiñ d'an diskiantegezh -se un diskleriadur a lakay anezhi da hañvalout poellek pe

(1) E n'eus forzh peseurt bro e kaver hovelep tro-spered. Divezhatoc'h e voe skoet va spered gant degouezh an nijerion- emlazherion e Bro-Japan - "kamikazeed" - en em daole war listri an enebour gant o nijerez evit o distrujañ. Kv. nevez zo degouezh ar voñzed emzeverion er Viet nam.

zamboellek, da vihanañ. An darn-vuiañ eus ar re a asant da gemer ur riskl er politikerezh - an hini dispac'hel eveljust; egile n'eus ket anezhañ - n'en em ouestlont d'ar Framm a aotre dezho kas da benn ar politikerezh-se nemet war-bouez en em rakvannañ ennañ hag en em genunaniñ gantañ koulz lavaret ; ar Framm a ro dezho neuze perzh en e holl-c'halloud, e holl-ouiziegezh hag e zifaziusted ; a-benn ar fin en em azeulont a-dreuz dezhañ.

Se a c'heller kompren en ur bed en deus kollet pep feiz e Doue rak e seurt bed ez eo ar Stad ar gwirvoud fetis nemetañ a ro tu d'an den d'en em seveniñ. Moarvat en em aberzh gwizion ar Stad d'ur paour kaezh Doue ha na c'hell ket o salviñ hogen a hañval dezho end-eeun bezañ an hini nemetañ a gement a ve en o dalc'h.

Hevelep tro-spered, hep mar ebet, a c'hell bezañ hini kargidi an Iliz hec'h unan (a-wechoù, egiz m' em eus notet, e kemeren va c'hellenner alamaneg evit ur c'hargiad bihan); faltaziañ a c'heller mat tre zoken degouezh ar c'hloer-se a gendalc'h, hep Feiz, da servijout an Iliz, krouerez a sevenadur, evel ma c'heller servijout n'eus forzh peseurt Stad. Dre vras evelato ez eus un diforc'h bras etre emgav ar re a zo e gwazoniezh an Iliz hag ar re a zo e gwazoniezh ar Stadoù all, dre ma ra an Iliz dave bepred da Zoue. **Neb** en em ouestl dezhi eta (an dra-se am eus merket un nebeut pajennadoù uheloc'h) en em ouestl da gantañ da Zoue, bout m'en deus gant an Iliz an darempredoù boutin a c'hell kaout ur c'hargiad gant n'eus forzh peseurt Framm. Ez dangorek eta e vuhez ar beleg pe al lean e zarempredoù gant an Iliz war ur bazenn diforc'h a-grenn diouzh hini servijerion ar Stadoù all.

Rak Doue, da neb a gred ennañ (1), n'eo ket ur c'heal nag un tasmant, ur Boud gwirion ne lavaran ket, ur Boud a zleomp dezhañ hervez ar poell, kement a zo ac'hanomp

(1) Kemer a ran ar feiz e Doue evel m'emañ, evel un devoud. Evit Feuerbach ha predourion all ned eo Doue nemet ar rakvanadur a reomp eus douegezh ar Stad, war ur bazenn dangorat rik. Evit an hini en deus ar Feiz n'en deus ar goulakadur-se ster ebet.

evel boud kevredigezhel end-eeun (rak ar*gevredigezh, m' he deus hor graet e meur a geñver, n'he deus ket en em grouet hec'h unan : darn eus ar bed ned eo ken) (1) hag a c'hell ivez hor salviañ hag hor mirout. Emro hag emouestl eta n'o deus ster ebet nemet e-keñver Doue.

Diouzh ar sellboent am eus nevez displeget e tlejen bezañ heuliet an hent a oa diskouezet din. Ne voen ket tentet d'henn ober koulskoude, e nep doare, evit abegoù ha luskennoù liesseurt. Hini pe hini anezho am eus meneget endev. Eus unan all avat e rankan ober anv: n'oan ket evit degemer lezenn an dizemez. Den a lennegezh e oan diwar neuze, sammet gant e faltazi, hag empennañ a raen e c'helled tizhout dre an dimeziñ un unaniezh hag ur wenvidigezh klok, pe dost. Anzav a rankan e oa gwall esunik hevelop keal : rouez tre a wech e kej an eil gant eben div bersonelozh kar-nes ctrezo hag en degouezh-se zoken n'int ket sur da vezañ evurus rak trubuilhoù dic'hortoz a c'hell o zizhout hag int o unan n'int ket disi kennebeut. Evel-se ez eo tonket da neb en deus naon a garantez hag a gendalc'h da glask anezhi da chom marnaoniet da viken ; ne gavo ket pezh a glasko o vezañ maz eo trabedel raktra e c'hoant, an survad klok e hiraezh dezhañ (2). Ma ne welje en dimeziñ nemet un tu da vougañ tan ar c'hadaliezh e c'hellje eveljust selaou ali fur sant Paol hag c'urediñ "a-benn chom hep deviañ". Neb a c'hortoz avat diouzh ar brêdelezh mui eget an dour da lazhañ tan an orged ne ray peurluviañ nemet tremen eus an tan d'ar billig ha n'eo ket kalz koñfortusoc'h !

(1) Sur eo e kemer ar Stad hiziv ar roll a oa deroet da Zoue gwechall. Diogeliñ a ra yec'hañ ha surentez e pep keñver ; al leve a gemer lec'h ar baradoz h.a.
(2) Ur seurt meizadur eus ar garantez hag an dimeziñ a zo sevenadurel hag arnevez awalc'h peogwir n'eo diwanet nemet e-kerzh ar grennamzer. Kv. ali Sant Paol a venegan a-hend-all. E gwirionez ez eo ar Gelted - gant romantoù an daol-grenn - kiriek dezhañ evit darn.

Spiswel awalc'h e tlejen bezañ bet en amzer -hont zoken evit kompren e oa dic'hallus ar wenvidigezh a huñvreen ha n'em bije graet nemet dilezel un touellwel. Hogen daoust ma tamveizen ne oa danvez ebet d'an aberzh a c'helljen bezañ degemeret ne oan ket evelato evit asantiñ dezhañ anez asantiñ ivez d'un digenvez klok ha n'oa ket, a gave din , gouzañvus nemeur. In un amva speredel a gemer evit darn lec'h an tiegezh hag a bourchas ur c'helc'hiadur brezel ha triviadel aglot gant hon temz-spered hag hon natur e c'hell an dizemez bezañ resevet aesc'h ; ret eo ouzhpennañ a-hend-all ez eo liesseurt awalc'h an ezhommoù war an dachenn-se. Din-me avat e vije bet pounneroc'h seurt sammeget da neb o vezañ ma n'em bije bet damant ebet da c'hortoz evit va mennoziou digant ar re a vefe bet war va zro.

Rak-se ivez ne soñjis; a-zevri biskoazh kumdr hevelep riski. Dre ma oan kristen avat e santen va lantegezh evel ul laoskentez ha va c'hiladenn evel un dinac'h eus va Feiz end-eeun : graet e oa bet din un daeadenn ha n'oan ket bet evit respont dezhi. Rak anat e oa din em befe gelllet kemer ur savboent kevrinel rik, krediñ, da skouer, n'oa ket ezhomm ac'hanon en Emsav, e c'helle da dilez ha va aberzh talvezout da Vreizh goude ma n'em bije-me va unan oberiet war-eeun eviti (1). Moarvat ne vefe ket bet fur ar savboent -se rak evelato e rank pep hini dibab e hent diwar arouz- iou ergorek o terc'hel kont eus e berzhioù, e varregezhioù hag e emgav. Pezh a fell din merkañ avat eo en em santen neuze dieub a-grenn, em rezid klok, da zivizout va unan va zonkadur hag e oa ar merzad-se unan diskonfortus awalc'h.

Diuzet em eus eta chom "er bed". Kemont-se ne lavar ket em eus diskoulmet evit keloù se ar c'hudennou a
(1) Daou Vreizhad a anavez an istor an emsav a zilezas an Emsav end-eeun evit heuliañ ur c'halvedigezh kravezel hep darempred ebet gant Breizh : Ronan Kermene ha Jakez Kerrien.

enkreze ac'hanon neuze. Moarvat, o tibab hent an obererezh politikel on chomet, en ur stumm, a gredan, feal ouzh ur c'halvedigezh speredel ambefe gallet kaout, lakaomp. Ur c'halvedigezh speredel ne c'hell ket bezañ speredel rik anez menel emgar hag hiniennel (ha, sur-mat, evit hini pe hini e c'hell al leanelezh, diouzh ma chomfe distag diouzh pep mennad a abostelerezh ha kreizennet hepken endro d'ar silvidigezh personel, bezañ ur goudor da wareziñ unan diouzh dañjerioù "ar bed", ur stumm eta da gillañ dirak diaesterioù ar vuhez). Rak hep youl da grouiñ ur gevredigezh a glotfe gant mennad Doue war ar grouadelezh hag a rofe tu da bep hini tizhout e zellid hag e frankiz a vab Doue n'he defe ar Feiz tamm gwirionded ebet. Gwechall avat e c'helle unan, e diabarzh hag e framm an Iliz, stourm a-benn diazezañ ur gevredigezh kristen : an Iliz a zalc'he d'ur mare darn eus ar c'hargoù a zo bet deroet d'ar Stad abaoe : kelennerezh, kenyec'hederezh, kedskor e pep stumm. Hiziv avat ez eo aet da get evit un tamm mat roll kevredigezhel an Iliz. Evel m'emañ, dic'houest abaoe kantvedoù da heuliañ emdroadur ar gevredigezh, dre maz eo chomet stag epad ar c'heit-se ouzh gouarnerezhioù ha na oant kristen nemet dre anv, kollet ganti peurvuiañ harp ur Stad a zo deuet estren outi hep paouez evit-se a reoliñ anezhi, enket da emgav ul led-emsav e-keñver ur sevenadur amgristen a dermen evelkent ha muioc'h-mui he zalvoudoù hag he sturiennoù betek he lakaat d'ankouaat a-wechoù ar skiant eus he c'hefridi-hi, ne d'hell mui an Iliz, evel framm, aotren d'ur c'bristen adkrouiñ ur stuzegezh a glotfe gant anien ur sevenadur speredel. Rak-se ez eo degaset ivez neb a venn adsevel ur sevenadur seurt-se da glask er-maez eus an Iliz hag e pep frankiz an hent a gaso d'ar pal-se.

Ha se a zo mat rak un diforc'h a vo atav da ober etre ar Stad a zle chom kalvezel goude ma ve renet gant kristenion hag an Iliz he deus da gentañ ur gefridi speredel. Seurt Stad moarvat hag hi kalvezel a zleo doujañ an talvoudoù

speredel a zo bet degemeret a-hed kantvedoù a hengoun kristen en hor broioù hep ma ve dav evit se ober dave war-eeun hag end furlmel da gelennadurezh an aviel. Ar Stad n'eo ket unan gant ar bobl : ur benveg hag ur goudor e gwazoniezh ar bobl ez eo da gentañ. Se a c'houlaka e c'hell bezañ er vro frammoù prevez o tegemer gwarez ar stad hep en em gemmeskañ ganti a-grenn (1).

Evel-se eta e c'hell bezañ ur politikerezh kristen dishual (2). Ne gav ket din avat daoust da se e c'hellfed ober eus seurt politikerezh ur peurvad a zlefe krouiñ er bed-mañ ur rouantelezh Doue, evel ma ra hiziv an Deilharcourion a ra van da grediñ ez echuo ar bed gant baradoz an douar endro hag a zo prest da reiñ d'an "araokaat" ha d'ar sevenadur modern pouez ha ster un diskuliadur nevez.

An dud-mañ, war a hañval, a ankounac'ha forc'hellegezh ar sevenadur arnevez. Diouzh o c'hlevout e vefe intret hemañ penn-da-benn gant talvoudoù kristen. Ha da skouer o roont mennadoù mat ar sokialouriezh varksist. Gwall nay e kavan hevelep meizpoent : ar varksourion n'o deus mennad mat ebet (an diabarzhelzh, an dangoradegedezh a zo merk-anaout ar gristeniezh) ; war dachenn ar Skiant en em lakaont ; ivez, en o fleusterezh politikel ne zalc'hont kont ebet a zivezouriezh donel ; war ar poent-se n'o deus kenlec'h ebet gant ar gristeniezh kennebeut. Erfin, dibenn an istor e unan hag ar gev-arzhelezh klok a reno neuze a c'hell devoudañ distrujidigezh an den koulz hag ar sevenidigezh anezhañ. N'eo ket sur tamm ebet e c'hell ar gristeniezh - dre n'ouzon peseurt burzhud - c'haezhañ un ene en ur reizhiad kalvezel a vo bet aezet diouzh ur savboent kalvezel hepken.

(1) Lenn war an divoud-se ar pennad diwar-benn an 'aotrouniezhou speredel' embannet war niverenn 12 EUSA, Kerzu 1967.
 (2) Anzav a rankan n'on ket bet fromet kalz biskoazh gant kalc'h-lizhiri ar Babed a zeu atav re zivezhat evit toullañ un hent gwir nevez ; soñjal a ran pergen e "Pacem in terris" koulz hag e "Populorum progressio" ha na reont nemet gwirrickat talvoudoù a zo bet krouet er-maez eus an Iliz.

Seul amsteriekoc'h ez eo an Istor evit ur c'hristen ma ne gavo en aviel kelennadurezh resis ebet d' e heñchañ war dachenn ar politikerezh. N'eus kemennadurezh politikel ebet en aviel. Anv a zo ennañ hepken eus darempredoù pep den gant Doue hag eus e silvidigezh personel : den ne c'hell salviañ unan all en e lec'h ; e rezid pep hini hag e sikour Doue emañ e silvidigezh hag an Iliz hec'h unan, evel Framm, ne c'hell eveljust salviañ den ebet. N'eus mar ebet eta e ve tu da gavout en aviel diazez ur veligasacouriezh hag un enep-stadelouriezh bennak.

E gwirionez e kaver en aviel un enebadur etre ar bed hag ur rouantelezh Doue ha n'eo ket eus ar bed-mañ end-eeun seurt beñchend-all, en deus an droukspered da vrenin; **beli hemañ**, sur, n'eo ket klok ; meskañ an **dreog** gant ar gwinnizh ne dizh ken ; an eostavat ne vo ket graet er "bed-mañ."

Padal, pezh a zo barnet gant ar C'hrist, a gav din, ez eo, kentoc'h eget ar politikerezh e unan, ar sioù fall a zeu d'ar politiker diwar embregerezh ar galloud en ur bed en em laka er-maez eus an aviel (ha se, evel dres, a c'hell c'hoarvezout en ur sevenadur kristen - sañset - kerkoulz hag en ur sevenadur all). Arouezius eo er c'heñver-se pennad an droukholadur er gouelec'h : eno e weler pennaos ez eo tentadur ar politiker, an hini en deus perzh er galloud hag en em gevheleba ouzh ar Framm, en em zoueelaat ha goulenn azeulerezh digant e sujidi. An doueeladur-se a c'hoarveze en impalaeriezh roman e-lec'h e raed Doueed eus an impalaered ha dre ma nac'hent kehelañ ar Stad leuriadet gant an impalaered-doueed-se eo e voe heskinet ar gristenion. Hogen an hevelep doueeladur a zo c'hoarvezet en holl Stadoù a-hed an Istor. Kompren a c'heller ned eo mui ar politikerezh, diwar neuze, nemet youl c'halloud ha klask perc'hennañ ar bed hag an dud. "Hogen da betra e servijo d'an den gonit an hollved a-bezh ma teu da goll e ene."

Ne gav ket din a-hend-all e c'heller jubenniñ respont ar C'hrist d'ar Farizianed diwar-benn an diner da baeañ d'ar Romaned pe al lavarenn diwar-benn tonkadur an hini a ra gant ar c'hleze hag a vo distrujet ivez gant ar c'hleze evel barnadennoù hollek a-zivout kudennoù ar politikerezh hag ar brezel ; ar respont kentañ n'eo nemet un eilgeriadenn graet war ar prim d'ur goulenn pilpouz. Nañ-hañ a rae ar C'hrist kemer perzh e politikerezh e amzer, se zo anat, hogen da seurt nac'h eo aes kavout abegoù : peseurt bri, da skouer, a c'helled dougen da Herodez ha d'e rouantelezh koulz ha d'ar Stadoù bihan all e Palestina a oa e dalc'h ar Romaned ha "gwarezet" ganto ; stad ar yuzevion hec'h unan a oa reutaet ha divuhezek-aet en ur furlmelouriezh hag ul lezennelouriezh krin ha diuven ; ne oa tu ebet d'he c'hempenn ; evit Stad ar Romaned, lavaret em'eus e oa diazezet war azeulidigezh ar galloud ha keheli-digezh ur veliezh a lakae ar sujidi e renk an traoù ; neb na oa ket roman ne oa ket un den.

Un nevezinti bolitikel a zo endalc'het en aviel koulskoude hag houmañ a zo diazezidigezh an Iliz evel ar gevredigezh skouerel. Nevezinti an aviel ez eo bezañ roet ur vent hag un diazez speredel d'ar gevredigezh. An ereoù a stage a-ziagent an hinienn ouzh ar gevredigezh a oa ereoù a redierezh hag a berc'henniezh. Daoust maz eo dreistpadet an ereoù-se er stadoù a zo ganet en Europa en amzervezh kristen diwar hengoun an impalaeriezh roman (1) hag en Iliz hec'h unan zoken ez eus chonet e kenskiant ar sevenadur diwanet diouzh an aviel ar mennoz ez eo an den diaub hag atebek en diwez dirak Doue hepken ; an den n'en deus mestr nemet Doue ; ha dre se ne c'hell kaout gant ar Stad nemet darempredoù a govrat hag a genasant.

(1) N'ouzon ket perak he deus graet kement berzh e Bro-C'hall ar sotoñ embannet gant Bossuet diwar-benn an impalaeriezh roman, kavell ar gristeniezh !

Ar pal diwezhañ eta evit ur politiker kristen eo dres lakaat an dud da gemer skiant eus o rezid ha da zegemer ar Stad evel un tu da ziorren o atebegzh dirak Doue end-eeun. Diazezet eo eta pep politikerezh kristen war an doujañs a zleer kaout evit mab-den.

Ret eo anzav avat ez eus un dislavar etre ar pal da dizhout a zo diazezañ ur Stad a zamanto da zellid mab-den hag an hent a gas dezhañ hag a dremen a-wechoù dre ar brezel a zo, dres, ur stumm bennak a redierezh hag a waskerezh. Amañ e keomp gant kudenn ar brezel evit diraez ur pal politikel pa n'eus hent all ebet o vont dezhañ; evit komz ez resisoc'h hon eus afer en degoue-h-mañ ouzh kudenn ar brezel-dispac'h a a zo damveneget, a gav din, ebarzh kelc'hlizher ar Pab : "Populorum progressio" hag a daler outi dreist-holl en Amerika ar Su. Gouzout a rear e soñj harperion Castro er rannved-se n'eus tu ebet da ziazezañ ur gevredigezh sokialour - sellet evel ar gevredigezh denel nemeti - hep ober gant an armoù. War ar poent-se avat n'eo ket ali paotred Castro gant ar gomunourion reizhkredennek stag ouzh Iliz Voskov a asur ez eo ar c'hempennerezh awal'h da ec'honit an amkan-se.

Ensellout a rin da gentañ ar poelloù a c'heller reiñ d'ur seurt brezel.

Pa vez anv a zidamall anezhañ e talc'her kont peurvuiañ eus an derez a isdiorreadur maz eo dalc'het ar bobl ennañ. Klevet e vefe evel-se eta o defe pobloù pe, kentoc'h, gwerinoù Su-Amerika ar gwir d'en em sevel dre m'emaint en un emgav seurt-se. E ser Breizh ez eo bet displeget an hevelep savboent gant ur beleg eus an Emsav deuet d'ober ur brezegenn e Roazhon diwar-benn "Populorum progressio" end-seun : displegañ a rae ar prezeger e c'helle ar brezel e Breizh bezañ digarezet ma tizhe reiñ un diskoulm da gudenn an enkadenn a gas ar vro da get dre an divroerezh dreist-holl.

Evidon-me em eus kavet atav gwañ savboent ar c'helc'h-lizher pabel, evel m'eo dezrevelllet gant meur a hini da vihanañ. Hañval eo ganin e tenn awal'h ar savboent-se da hini an

armezhelourion. Penaos prouiñ, da skouer, ne vefe ket tu da ziorren broioù Su Amerika dre hentenoù ar gevalaoueriezh nevezet ? Kemendall a c'heller lavarout diwar-benn Breizh ; an divroerezh hag an diboblidigezh a zo un doare da ziskoulmañ kudenn Vreizh ; ar poanioù a c'houzañv ar Vretoned diwar ar walenn-se n'int ket da geñveriañ evelato ouzh ar re o deus diwasket da vare ar brezel bed kentañ : piv en defe lavaret d'ar c'houlz-se o devoa ar Vretoned ar gwir d'en em sevel ? Hag-a-hend-all, tu a zo bepred da ziskoulmañ kudenn armerzhel Vreizh e diabarzh ar Stad c'hall.

Evel-se n'eo ket poanioù ha diaz zamantoù ur bobl, an isdiorreadur dre vras, a aotre d'ar bobl-se aozañ ur brezel dieubiñ ; kentoc'h, a gav din, di-ster ha diboellded ar poanioù-se diouzh maz int heuliad ur stad a zismegañs hag a zisplesdoni. An den n'en emgann ket - ha se am eus lavaret alies - evit ur reizhiad armerzhel, da lavarout eo a-benn kaout un tamm amann war e vara hepken - nemet touellet e vefe, pezh a zegouezh dreist-holl betek henn er reizhiad kevalour - , evit un uhelval buhezel ha speredel ne lavaran ket.

Mennad hag amkanioù un emsav politikel , koulz ha re ar brezel pe ar Stad hec'h unan ne c'hellont bezañ eta nemet speredel. En dibenn holl ne c'heller ket empennañ adsavidigezh Vreizh hep reiñ d'hor bro ur roll mesiazel koulz lavaret. Unan a c'hello reiñ da Vreizh, da skouer, ar c'halvedigezh a roe ur barzh kembraek D. Gwenallt Jones d'e vro-eñ :

Duw a'th wnaeth yn forwyn Iddo,
Galwodd di yn dyst,
Ac argraffodd Ei gyfamod
Ar dy byrth a'th byst...

Seurt sellboent, moarvat, a seblanto bezañ tidel ha kevrinel war un dro dre ma n'eo ket anat e nep doare he defe Breizh ur roll hag ur gefridi en Istor : n'eo ket sur zoken e c'hellimp hec'h adsevel. Padal na gredan ket e c'hell-

femp dioueriñ hevelep sellboent, ma fell deomp, da vihanañ, reiñ d'hon ober ur vent a yelo en tu-hont da hini an armerzh hag ar gevredoniezh hag a vo enni ivez muioc'h a zerc'h eget er re-mañ, o vezañ ma vo tu bepred, evel m'hon eus merket meur a wech endev, da ziskoulmañ kudenn Vreizh dre un enframadur klok er Stad c'hall.

Bremañ e ensellin ouzh doareoù ar brezel dispac'h e unan.

N'eus mar ebet - ha se ' zo anat awalc'h - ez eus er brezel-dispac'h, da lavarout eo er stad war ziazezañ - evel er stad diazezet - un elfenn a redierezh ; me ' fell din lavarout dre se n'eo ket ar brezel-dispac'h un darvoudenn "emdarzhel" evel maz eo un emsavadeg kouerion, lakaomp. A-raok barn distresadurioù ur seurt redierezh e ve da marteze reiñ ur ster d'ar redierezh dre vras er gevredigezh.

Me ' gred emañ ar ster-se en ergoreladur an talvoudoù en emskiant izili ar bobl. Ma nac'h ar rannvroelourion (ha tud all e Breizh a ra broadelourion anezho o unan) ober brezel evit Breizh ne reont nemet evit un abeg a zo hemañ : ne soñjont ket da vat ez eo Breizh o bro ; rak an hevelep tud a gavo natur kenañ bezañ galvadeget ha kaset d' ar brezel gant ar Stad c'hall. Evit ar re-se eta - kaer o devo arguiñ - ez eo Bro-C'hall an talvoud politikel gwirion nemetañ.

(1)

Evel-se ivez ez eo ster ar brezel - diouzh m' en deus unan - ergorelaat an talvoud. An dud n'en em stagont ouzh un talvoud nemet diouzh m'o devo en em roet dezhañ a-grenn

(2).

Bremañ avat n'emañ ket skiant an talvoudoù gant

(1) Ma vijent peoc'helourion wirion ne asantfent ket da vezañ kaset d'al lu gall.

(2) An dizemez h.a. er mlijion, evit ar veleion pe al leaned a zo un tu da ergorelaat ar Feiz. Ne c'hell ket an talvoudoù bezañ ergorelaet hep tremen dre hent an aberzh.

an holl. An darn-vuiañ eus an dud n'o deus ket pe a goll buan skiant an talvoudoù hag ar fram a zo an hini nemetañ a c'hell he reiñ pe he daskoriñ dezho. An eilgerierezh a vez skoulmet eta etre an engroez hag ar renerion, etre ar vrientinion hag ar werin (1) a zo damheñvel eta ouzh an hini a sav etre ar c'helenner hag ar skoliad. Arabat eo ankounac'haat bonster ar ger "aotrou" en hor yezh hag a lavar 'kelenner'. Petra bennak ma tle an holl en ur vro kaout gwirioù keodedel kevatal n'eur ket daoust da se evit dougen kement bri da bep hini er gevredigezh ha, pergen, d'an distrujerion dalvoudoù pe d'ar wallegerion anezho.

An eilgerierezh am eus meneget etre renerion ha renidi hag eñ tonket da steuziañ war hir dermen dre ma kresko er vro niver ar geodedourion emskiantek hag oberiant, a gaver hiziv en holl vroioù gwitibunan ha peurgetket er broioù komunour e-lec'h e c'hoari ar Strollad ar roll eus kelenner hag heñcher ar boblañs. E ser an degouezh-mañ a-hend-all e verzer mat penaos e empleg an eilgerierezh an asant d'ar veli ; an asant-se avat, en deroù holl, ne vez roet nemet d'an nerzh a ambroug ar veli ; an nerzh eta - ne gomzan ket amañ eus an nerzh dall met eus an hini a ya a-unan gant ar spered - a zo un elfenn dizoueradus eus arveradur ar veli. Bugelal eo evel-se dazwered ar re a vez oc'h embann bepred: "Pep hini a zo lib!"

Moarvat e rank ar veli derc'hel kont eus al luskadoù hag ar strolloù gwaskañ evel m'emaint en ur vro a chom liesrenkadek da c'hortoz, evit abegoù pleustrek ha bredoniell, mar karer. Hogen, adarre, ne c'hell ket reiñ kement a bouez d'an holl luskadoù : anat eo e ranko ober un diforc'h etre harperion ar bourdelioù hag ar bistroioù - pep hini a zo lib da vont di, 'ketal - pe, c'hoazh, etre paotred ul "language freedom movement" bennak a garfe derc'hel en he sav er vro yezh an enebour, o c'hoapaat dre se aberzh ar vrogarourion, en anv ar frankiz! - hag al luskadoù politiki-

(1) An noblañsoù gall e Breizh a lakaan eveljust e renk ar werin.

kel pe gravezel a glask uhelaat stuz speredel ha danvezel o c'henvroiz hag a zle chom dieub en o oberiantiz gant ma tegemerint beli ar Stad vrezhon ha kement talvoud a zo stag outi.

Gouzout a ranker a-hend-all e vez degaset ar veli a-wechoù da gemer divizadurioù en desped d'ar mennoz foran. Ul lezenn evel an hini a voe mouezhiet ur c'hantved bennak a zo en darn-vuiañ eus broioù Europa diwar-benn an deskadurezh kentañ derez rediel - end-eeun - ne voe ket kavet mat er penn-kentañ gant ar gwiskadoù poblañs ma oa bet empennet evit o mad: ur bugel a chome er skol a oa ur bugel a gendalc'he da goustañ ker d'ar gerent.

E gwirionez ne ziwan an diaesterioù en ur vro nemet adal ar mare m'en em gav enebet enni meur a rumm a saverion dalvoudoù. Eno moarvat emañ dalc'h ar gudenn ha d'ar gudenn-se ez eo diaes reiñ un diskoulm. An talvoudoù a zo difennet gant ur rumm dispac'herion a vez rannel alies. Kredet e vefe awalc'h ne c'hell ket ur remziad bukañ ouzhpenn un amkan; uhelvennad ur gevredigezh klok ha peurvat, diouzh ma vefe gallus, ne c'hellfe bezañ sevenet nemet da heul ur pebeilerezh a-hed an istor. Pa vez krog ur rumm dispac'herion pe zispac'herion da ergorelaat talvoudoù zo e kasont da get a-wechoù pe, da vihanañ, a-ziwar wel rummoù arall a nevezerion a c'hellfe o zalvoudoù klokaat o re. Evel-se eo c'hoarvezet er broioù komunour e-lec'h eo bet kaset da get an talvoudoù kravezel gant an dispac'h kevredigezhel. An uheljal - evit ur stourmer kristen - e tlefe bezañ un dispac'h a unanfe talvoudoù liesseurt hogen dav eo anzav dres n'eo ket aes kas da benn hevelep dispac'h ha n'eus ket bet gwelet betek henn a skouer anezhañ.

Pezh am eus nevez displeget diwar-benn ster ar brezel pe ar Stad ne ziluz tamm ebet ar c'hudennoù buhezal a zo stag ouzh an eil pe egile: ar brezel a chom ur walenn

spontus gouest da vreinañ ar re a ra koulz hag ar re a c'houzañv anezhañ; hag arver ar veli, dreist-holl en ur Stad a enkadenn hag a reizh strizh a vrein ivez ar re o deus perzh er galloud hag o doug, evel m'em eus merket, d' en em dremen o unan da zoueed; hag an dallentez pe ar follentez washañ evit ur stourmer kristen e vefe pe zianaout ar gwall-zistresadurioù-se pe asantiñ dezho dre ma vijent didec'hus. Rak diwir e vefe asuriñ n'eus ket un emzalc'h kristen dirak ar brezel hag ar Stad. D'ur c'hristen avat ez eo ar politikerezh ur skiant seul ziaesoc'h da bleustrañ ma rank derc'hel kont, ouzh he fleustrañ, end-eeun, eus reolennoù ha sturiennoù na aparchantont ket outi (1). War ar marc'had, ar bed ma rank oberiañ ennañ n'eo na kristen na vuhezal da vat zoken. An diskoulm kempoell a vefe moarvat en em dennañ diouzh ar bed; o plegañ avat d'ur seurt tentadur e tegemerfe ar c'hristen un doare manikouriezh ha na glot ket gant an aviel hag e tiskouezfe ivez ur meni laoskentez rak kilañ dirak an arvaroù - hini en em goll en o zouez - ne rafe ken neuze, a-benn lezel ar re all en diwezh d'en em zaoniñ en e lec'h tra ma rafe-eñ eus ar gravez ur goudor klet da saouriñ ennañ e zioegel ha ma tilezfe war un dro ar bed d'an enebour.

Moarvat, e pep amzer hag e pep kevredigezh e vo mat da hiniennoù en em ouestlañ da Zoue ha d'ar gevrin-elezh. Met dlead ar c'hristen a chom er bed eo dres krouiñ ar gevredigezh a aotreo da gemennadurezh an aviel dougen frouezh. Chom avat hep tremen diouzh ar plegennoù ma emdro ar bed drezo a zo koulz ha gortoz ar burzhud a-raok bezañ kroget da stourm zoken ha tentañ Doue; a-hend-all, souzañ dirak an diaesterioù e-lec'h klask o zreo'hiñ n'eo na kalonek na kristen.

(1) Degemer a c'hellfed eveljust emañ an divezouriezh er-maez eus tachenn ar politikerezh e-lec'h ne vefe nemet darempredoù a nerzh. Padal, ar mennad speredel reizh eo a drec'h en diwezh en ur brezel. Alies ivez ez eo an torfedoù politikel fazioù politikel a gas d'an traon ar stad vac'hom deziz pe zeiz.

Moarvat e tle ar c'hristen òrc'hel d'un emreizh bennak er politikerezh zoken ; ne c'hell ket mac'homañ an dud war an digarez nemetañ e ranker skarzhañ penn-da-benn kement a c'hellfe skoilhañ pe ziaezañ ar Stad ; en tu all d'an trec'h e tleer eta damantiñ d'an eneberion. Me 'oar pebezh arvar a zo o chom hep diazezañ start diouzhtu sichenn ar Stad ; ma ne ziwaller ket e vo tonket da savadur ar Riez kouezhañ en e boull evel maz eo c'hoarvezet en hor bro endev er c'hantvedoù tremenet. Arabat eo avat evit keloù se chom hep reiñ d'an amzer ar roll a rank kaout e pep politikerezh. War hir dermen e tizher palioù zo ; ar furnezh hag an habasketed a zo ivez vertuzioù politikel. Ar pep pennañ eo lakaat an tren war ar roudenn hep goulenn digantañ mont d'ar foz diwar re zifrae.

Setu, e korf un nebeut pajennadoù, dalc'h ar c'hudennoù a glasken diskoulmañ e diwezh va studioù eil derez a-raok dont tre em buhez c'hour, hag a ziskoulmis neuze, e gwirionez, a dastorn, diwar anien. Frouezh va frederiadennoù d'ar mare-se e voe evelato va lakaat da gemer a-zevri va emouestladur politikel ha da veizañ anezhañ evel ur c'halvedigezh ha n'he doa ster nemet oc'h ober dave da Zoue ha d'am atebegzh dirazañ. Merket em eus mat bepred ne oa atebegzh wirion ebet nemet dirak Doue e ve (pezh a c'houlaka ne vo ket hor boud ensammet en netra a-benn ar fin: e kement a ra ne c'hell ket an den en em goll a-grenn) ; ar Framm evel an Istor n'int nemet kealioù ha gerioù, skeudoù ac'hanomp-ni hepken ha n'o deus nemet un dalvoudegezh pleustrek. Dibaot eo avat ar re a dizh emouezañ ouzh siriusted ha sakrelezh an ober; evit kalz stourmerion e tro an ober d'ur c'hoari pe d'un albac'henn na greder mui enni ha ^{na}servij mui nemet da ziverrañ an amzer ; difretezh ned eo ken neuze.

Ar re en em ro da vat d'ur stourm avat a veiz ar sakrelezh anezhañ ha techet e vint, evito da vezañ digravez ha digredenn a-wechoù, da engervel anv Doue evit gwennañ un

embregadenn na gredont ket sammañ warno o unan dre ma emleg eus o òrzh arver ur galloud peuzdoueel. En amzer-hont, da skouer, e c'hoarveze gant Hitler ober meneg eus Doue en e brezegennoù, un tamm avat, a gredan, evel ma engalv re all o "flanedenn" ; Doue Hitler a oa paotr mat a-hend-all hag a ziwalle d'ober an disterañ poan spered d'e azeuler ; "amen" a zistage dagement sotoni pe dorfed a rae, pezh na zougas ket chafis d'ar c'haezh diaoul, ha, siwazh, da nouspet milion a dud arall war un dro.

E gwirionez ez eus un doare da engervel Doue hag a zo ober goap anezhañ. N'eo nemet a-dreuz un hengoun kravezel hag a zo ivez darn eus an Istor hag ar sevenadur, a rank eta bezañ jubennet, eo e c'hellomp dianaout ar gwellañ youl Doue ; dre an dud en Istor eo e komz Doue, dre Framm an Iliz, lakaomp, hogen ivez dre Frammoù all. Evel-se ne c'hell ket an ober politikel e unan, krouer a Istor endeeun, tremen hep ur vent kravezel resis.

A-benn distreiñ da hanez ar retred e unan e lavarin en doa graet an tad Georges berzh awalc'h gant e brezegennoù peogwir e oa deuet tre tri pe bevar eus va c'henskolidi er c'hloerdi e miz Here war-lerc'h ; unan anezho, ur skoliad mat, na petra 'ta, a oa aet zoken betek Paris, e "Saint-Sulpice" a zo egiz ma ouezer, ur c'hloerdi miret d'ar "C'hallaoued speredek" ; ne oa ket chomet ; ne oa nemet ur breizhad, goude holl.

Evidon-me, er sizhunioù war-lerc'h e c'hoarvezas ganin breutaat gant an tad "Plomet" diwar-benn kudenn ar "c'halvedigezh" ; outañ e anzaven e oan bet tizhet gant arguerzh an tad a brezege ar retred ; hogen ouzhpennañ a raen eveljust n'oan ket douget tamm ebet da heuliañ hent ar velegiezh dre ma felle din mirout va frankiz a vrogarour breizhat ; an tad Plomet a zaele ouzhin neuze em bije da sentiñ n'eus forzh penaos e ne vern peseurt framm ha peurgetket

en hini an deskadurezh eil derez gall, o vezañ n'em boa diskleriet meur a wech e felle din mont da gelenner. D'ar c'hraf-se ne responten netra rak n'em boa c'hoant ebet da ziskuliañ da zen gwir zoare va freder. Evelato en devoa an tad Plomet prestet din un nebeut levrioù a gravez hogen n'em boa ket o digoret. E gwirionez e oa graet va soñj en a-rack ha n'em boa ket dremmet a-zevri biskoaz plegañ d'am morc'hed. Evel-se em boa paouezet buan da c'houde a gomz a-zivout ar c'hudennoù-se.

E gwirionez n'oan ket nemeur evit kaout darempred gant an tad Plomet ; re ziforc'h e oa hor personelezhioù an eil diouzh eben ha re bell hor stummoù soñjal an eil diouzh egile. Bezañ, egiz ma vennen, hervezañ "un héros de la Bretagne indépendante" ne oa ket sirius meurbet ; hag evidon-me e varnen kriz awalc'h e vennozioù politikel diouzh m'en devoa diouto ; da skouer, an tad Plomet a vurutelle an Amerikaned dizamant awalc'h d'ar mare-se ; met, d'am soñj, ur seurt emzalc'h enep-amerikan, a-berzh un den en em dremene a-wechoù da C'hall, a oa bugelel ha diskiant rak anat e oa ne c'helle Bro-C'hall gortoz dieubidigezh ebet nemet digant an Amerikaned e ve : ar re-se hepken a oa gouest da drec'hiñ an Alamaned. Fellout a rae d'an tad Plomet ivez pediñ war un dro evit Bro-C'hall ha Breizh; dav e oa bezañ istrogell, a soñjen avat, evit magañ seurt brizh-trivlierezh relijiel : daoust hag ar C'hallaoued a bede evit Breizh ? An tad Plomet e gwirionez a gendalc'he da reiñ da Vro-C'hall un dalvoudegezh sakr hag a nac'hen outi evel Breizhad dres.

Moarvat e tiskoueze bezañ un tammig brogarour hogen bepred en un doare brizh-trivliadel am lakae da gemer doñjer. Da geñver lidambrougadeg ar Pask kentañ er skolañ en devoa treset gant bleunioù anvioù "Dihunamb" ha "Gwalarn" en alezioù al liorz ! Ur gwenedour mat e oa ivez. Setu, en abeg da gement hon disranne war dachenn ar politikerezh ha dre ma n'em boa ket kalz a istim outañ evel Breizhad e oa diaes dezhañ reiñ din un ali am befe selaouet gant evezh. Hogen ivez peseurt kravez a c'hell bezañ en ur vro n'eus ket anezhi ?

P e n n a d 9

Adkregiñ a rin bremañ da venegiñ va deizlevr:

Diriaou 8 a viz Mae 1941

Aet on e kêr hiziv gant M., N. ha C. a-benn prenañ dilhad, ar pezh n'eo ket un afer dister. Da gentañ n'eus tamm dilhad ebet er stalioù koulz lavaret ; ha, d'an eil, int div wech keroc'h get bloaz zo. Va gwiskamant en deus koustet, a gredan, mil lur bennak.

A-hend-all en deus ar Prefed komzet ouzh va mamm diwar va fenn ha diwar-benn va breur : "mauvaises têtes" omp, war e veno ! Va mamm n'he deus ket taolet re evezh ouzh ar c'hlemmoù-se ; n'he deus ket klasket kennebeut va dibennadiñ evit pezh a sell ouzh ar brezhoneg : me ' gred he deus kollet kalon. Erbedet he deus din hepken chom hep studiañ re ar yezh er mare-mañ en abeg d'an arnodenn o tostaat.

An dienez a vefe o ren e Rijsel, a-hervez. Setu an naonegezh o tont ; distreiñ a reomp d'ar grennamzer. Gant ma ne zeuy ket seurt gwalenn betek enomp e Breizh gant ar morerezh gall !

Disul 11 a viz Mae 1941

Ar C'haolourion o deus graet o displegadeg hiziv. Deuet int er-maez war ar straed etre teir eur ha peder eur, a gredan ; troet-distroet o deus war ar straed, laouen da sabatuiñ gant o zaol-kaer. Kouezhet int e belbi !

Dimerc'her 14 a viz Mae 1941

Bremañ ez eo difennet ouzh an dud yaouank dont er-maez d'abardaez war-lerc'h eizh eur. Eval-se ne c'hellin ket mont d'ar prezegennoù er c'helc'h keltiek e-kerzh ar sizhun a zeu. Setu pezh am eus-me gounezet gant kur dispar ar C'haolourion. Erfin, bez e c'hellin studiañ er gêr.

Diriaou 15 a viz Mae 1941

Graet ez eus bet deomp ur gaozeadenn diwar-benn ar micherioù digoret deomp gant ar vachelouriezh, d'ar mintin-mañ, e ti an "Excelsior", gant un den bennak deuet a-ratozh eus Paris, Rozier e anv. Komzet en deus epad div eur, ken e oan tost da gousket a-benn ar fin. N'on dedennet e gwirionez nemet gant ar vicher kelenner pe ur vicher all damheñvel. Selaouet em eus eta e-doug dek munud bennak ha n'emeus ket desket kalz a dra. Kement a ouzon eo ez eo hanter serret ar vicher a gelenner : unan diwar seizh a c'hell kavout ur plas, emezañ. Lavaret ez eus bet deomp koulskoude e oa arabat koll kalon hag e oa ar gwellañ heul-iañ hor c'hoant gwirion. Petra a rafen e gwirionez ma ne studifen ket al lennegezh er bloaz a zeu ? Padal en em c'houlennan a-wechoù ha tu a zo da gas da benn div gefridi war un dro : kelenner en ur reizhiad estren ha stourmer evit ar vro war dachenn al lennegezh ? Neb a gil dirak an diaesterioù avat, hennezh n'eo ket un den. A-hend-all, n'eo ket evidon e fell din labourat, evit va bro ne lavaran ket. Pezh a zo masaus avat eo ne c'hellan gouestlañ va holl oberiantiz da Vreizh diwar vremañ : ret eo bevañ a-raok ma teuy Breizh da vezañ dieub hag an dra-se a gemero un tammig amzer. Un dra a soñjan alies ivez : dellid Breizh a vo diouzh hon dellid-ni a stourm eviti. N'ouzon ket hag-eñ ez eus un dalvoudegezh bennak ennon ; Doue a oar ; hogen ne vern penaos e tleomp strivañ da dizhout an dalvoudegezh a aotreo deomp harpañ hor bro ar gwellañ. A-hend-all e c'hellomp fiziout e Doue peogwir ez eo reizh hor stourm.

Diriaou 16 a viz Mae 1941

Ar c'henlabour a zo boulc'het da vat gant Darlan etre Bro-Alamagn ha Bro-C'hall. Sinet eo an emglev, a-hervez, ha skañvaet e vefe bet darn eus sammoù an dalc'hidigezh. Aesoc'h e vo tremen al linenn-harz evit mont tre er gemva dieub. Ar re a oa bet prizoniet endev er brezel kontañ

ha paket adarre er brezel-mañ a vo kaset d'ar gêr. Tabut bras a zo savet etre ar C'haolourion hag ar Betenourion e ser Darlan ha Pétain a gred kenlabourat gant an "enebour a viskoazh".

Disul 18 a viz Mae 1941

Aet omp da bourmen dre straejoù Roazhon hag a-benn ar fin omp chomet a-sav war ribl ar ganol, nepell diouzh ar Skol-apotikerezh, e-kichen Sant-Heler. Kejet hon eus gant Bigouden. D'abardaez, pa zeuas S. d'hor gwelout e c'houlennas hag-eñ e oa paet ar re-se gant an H.B. evit dougen o gwiskamant broadel ! Lenn a reas ivez an H.B. am boa prenet end-eeun ha kavout a reas anezhi kemmet : ne lavar ket mui droug diwar-benn hor c'heneiled vat ar Saizon. Lavaret he deus din ivez e vefe ret diwar vremañ gouzout un tamm istor Breizh evit tremen ar "certificat d'études".

Dilun 19 a viz Mae 1941

Hiziv arnodenn embregerezh-korf evit ar vachelouriezh. N'em eus ket graet berzh-mat en dro-mañ. Kerse eo ganin:tu a vefe bet da bakañ pontoù gant an danvez-se (droch eo zoken reiñ kement a bouez d'un danvezourt se : Vichi a fell dezhañ moarvat trevezañ an Alamanned a zo kiriek da gement-se.) Ar peurrest eus ar beurevezh hon eus tremenet o selaou kanaouennoù eus Trénet ha Chevalier!

En endervezh, echu gancomp hon arnodenn, omp distroet dre an tram betek ar maerdi. Darn a yeas d'ar fiñvskeudenndi. Evidon-me ha va c'havandad Orio ez eomp da gavout L.M. a oa o prientiñ mont d'ar Skol-veur d'ur gentel goltieg gant Per ar Rouz. Neuze, goude bezañ embrouget hor mignon betek leurgêr Hoche, e oamp diskennet endro d'ar c'helc'h keltiek e-lec'h e oa bet aozet un diskouezadeg taolennoù ha levrioù brezhonek ; taolennoù eus Yann Goulet ha Langleiz a oa da welout eno ; unan anezho - gant Langleiz end-eeun - a oa he zalbenn "Deiz al lugalvadeg" : ur Vreizhadez darev da ouelañ o sellout ouzh ar skritell a wallour.

Diriaou 22 a viz Mae 1941

Yaou-Bask. Aet on er-maez gant C. ha N. Goude bezañ graet un dro en o c'helenndi ez omp distroet da ziskouezadeg ar c'helc'h keltiek. Ur sell am eus taolet en dro-mañ ouzh al levrioù brezhonek : ouzhpenn ur rummad eus Gwalarn e oa un toullad oberennoù gant Taldir, Ar Rumeur h.a. Kement a dud a oa da gentañ avat ma ne c'helljomp ket dont tre diouzhtu. Sonerezh breizhek hor boe troda glocvout avat : biniou, kanaouennoù brezhonek ha gallek, ar "Fleurs d'Ajonc", an "Dalc'h soñj", "Kousk Breizh-Izel", "A-hed an noz" ivez evit klozañ. Blaz ar rannvroelezh a oa gant kement-se holl e gwirionez.

Tro am eus bet da gejjout gant Stephan eno. Ne ris avat nemet e gevarc'hiñ (1). Skrivañ a ra ebarzh ar "Bretagne". Ma n'hon eus avat nemet tud seurt-se evit dasorc'hiñ Breizh warc'hoazh e c'helloumañ chom en he bez da viken. Ballot a lavaras din da noz e oa hemañ hanter emrener ; marteze ; met, daoust ha gouzout a ra zoken perak ez eo "hanter emrener" ? E gwirionez ne wel nemet politikorezh gall e kudenn Vreizh. Petra 'vern dezhañ e chomfe Breizh breizhek pe get, e treidstevfe ar brezhonek pe get ? Kenderc'hel a rafe moarvat da c'houlenn un tamm frankiz evit Breizh. D'ober petra avat ? Egiz pa ne vije nemet kenwerzhourion e Breizh. Estreget an armerzh a zo en ur vro koulskoude. N'eus forzh peseurt "rannvro" eus Bro-C'hall a c'hellfe goulenn kemañ-all a "frankiz" evit difenn hec'h armerzh ! Maz omp Gallaoued n'hon eus ezhomm eus tamm frankiz ebet.

Dec'h ivez em boa gwelst L.M. er c'helc'h gwisket e "Breizhad" gant un tog rubanoù h.a. An dra-se em eus kavet un tammig meurlarjez ; seul vui m'en em gave gant paotred ha merc'hed ar c'helc'h, togoù kouerion ha koefoù war o fenn hogen netra nemet galleg plat ganto.

(1) Hemañ a oa ur paotr genidik eus Plouarzel-Roazhon, bet e klas prederouriezh ur bloavezh em raok e Sant-Marzhin. Bras, lank, blev melen gloanek dezhañ, kribet war-dreñv, kuzh e zaoulagad adreñv ludedoù korn tev, treut ha tric'hornek e zremm. Lazhet e voe gant kilstourmerion c'hall e gorn-bro e 1944. Un dremm iskis lemm evel ul laonenn gontell en devoa.

War-lerc'h ar c'hanaouennoù eta - soñj am eus ag unan a oa bet kanet e rannyezh Wened diwar-benn ur c'hemen-er - hor boa klevet ur brezegenn gant Rouault diwar-benn "Breizh armerzhel". Diskouez a reas penaos e oa disvouedet Breizhiz gant ar Stad c'hall. E arguadur avat ne dizhes ket kendrec'hiñ an holl : darn a lavare e oa an Alamanned kiriek d'ar gwalloberoù a oa tamallet gant ar prezeger d'ar C'hallaoued.

Disul 25 a viz Mae 1941

Aet omp er-maez hiziv adarre, gant C. ha N. Evel ar wech diwezhañ e rejomp un dro er c'helc'h keltiek. Eno e kejis gant M. a gomzas din eus an dastumad barzhonegoù savet gant Langleiz "Kanoù en noz" am boa goulennet digantañ. Kalz a dud a oa er c'helc'h adarre hag e-touez ar re holl en em gave eno e kavis ur c'hamalad kozh Couvé e anv, skoliad e Sant-Marzhin warlene hag a gendalc'h gant e studioù e Sant-Stefan er bloaz-mañ : e soñj emañ tremen ar vachelouriezh hag ar "Brevet" war un dro. Tra m'edon e sal ar c'helc'h ne ris nemet marvailhat gantañ : ur pismiger daonet a zo anezhañ avat ; hini ebet eus ar c'hanaouennoù a voe kanet ar wech-mañ ne gavas mat ; darn eus ar re-se a anaveze a-hend-all : nevez zo en devoa prenet un dastumad tonioù brezhonek. Unan eus e gamaladed, skoliad e Sant-Stefan, a oa gantañ, un iskis a baotr a hopas warnon egiz pa vijen bet mignon gantañ a viskoazh : "Te an hini eo a zo atebek eus ar Strollad e Sant-Marzhin ?" a c'houlennas. Drezañ ivez e ris anaoudegezh gant B.D.B., ur broadelour eus Sant-Visant, yaouank hag abaf un tammig. A-benn ar fin e toullas kaoz gant L.M. hogen da hemañ e tisplijas dre maz ae dre c'hwi outañ.

Goude bezañ selaouet deroù prezegenn Yann Fuere e lezis Couvé da selaou ar peurrest anezhi ; komzoù fur rener ar "Bretagne" a zeree mat awalc'h outañ rak n'eo ket ar paotr-mañ gwall zesket war gudenn Vreizh, 'mas aon. Ret e oa din bezañ distroet e koulz e Sant-Marzhin.

Dilun 26 a viz Mae 1941

An "Hood" a zo bet kaset d'ar strad gant ar "Bismarck" hag hemañ d'e dro gant listri saoz all. An emgann war vor-se en deus graet kalz trouz.

A-hend-all ez eus tabut atav er skolaj etre ar re a zo a-du gant ar c'henlabour hag ar re a zo a-enep. Pétain ha Darlan a vez taget bemdez gant ar C'haolourion, gant De Bande dreist-holl ; Davoust a zifenn ar c'henlabour a zle lakaat Bro-C'hall da zassorc'hiñ, a-hervez. Ar re all ne brizont ket e selaou eveljust. Farsus awalc'h eo ar ren-daeloù-se : e pelec'h emañ unvaniezh ar C'hallaoued ?

Dimec'her 28 a viz Mae 1941

Ur vodadeg a-du gant ar Marichal ha diwar-benn ar c'henlabour a zo bet dalc'het er "Royal", dindan renadur an ao. Lamarat. N'on ket aet d'ar vodadeg-se. War an eus klevet ne voe ket Lamarat evit distagañ e brezegenn; da bep mare e veze troc'het ar gomz outañ gant c'hwitelladennoù ha garmadennoù a-du gant Pétain pe zDe Gaulle, pe a-enep dezho. Krogadoù a zo savet zoken etre ar C'haolourion hag ar Betenourion ; de Saint-Laurent a zo bet gwallgaset gant Morel er skolaj dre ma nac'he diskouez evit ar c'hozhiañ meur an doujañs a zleje kaout.

E diwezh miz Mae em boa bet tro da zivizout adarre gant an tadoù Hamon ha Plomet diwar-benn kudenn Vreizh. An tad Hamon, en devezhioù-se, a gemenne din e oa Flandrez o vont da gaout hec'h emrenerzh ha kavout a rae dezhañ e oa reizh an dra-se ; evit Breizh avat en devoa un ali arall ha ne grede ket e c'helle-hi tizhout he frankiz. E vroudañ a raen evelato da zeskiñ ar yezh, da vihanañ, ha respont a rae din e c'hortozfe e ve Breizh dieub.

Evit an tad Plomet em eus diskleriet meur a wech e dro-spered. A-wechoù e soñjen em boa e c'honzet d'ar vroadelouriezh hogen emberr e vezen difaziet : nac'hañ a rae,

da skouer, studiañ ar brezhoneg, o siguriñ n'en devoa ket amzer. N'oa ket disteroc'h digarez eget hennezh, a gave din.

D'an 31 a viz Mae e oan deuet da dremen un nebeut devezhioù ehanoù e Sant-Jermen. Sioulloc'h e oa ar speredoù eno eget e fin ar bloaz kent, un nebeut mizioù a-raok. Evelato e oa bet atizet spered va zud gant un darvoud en devoa graet kalz brud e Breizh d'an ampoent. Ur Breizhad eus Konk a oa bet fuzuilhet gant an Alamaned evit bezañ en em gannet gant ur soudard alaman ha dizarmet anezhañ. E-kerzh ar c'hrogad e oa bet gloazet e unan, torret e ziv-esker, kaset d'ur glinikenn e Kemper e-lec'h e oa deuet an Alamaned d'e gerc'hat. Daoust da zifraeoù prefed gall Kemper - tad a diegezh e oa an den, tri bugel dezhañ - e oa bet fuzuilhet war ur gador, - egiz O Gonaighle -, e-tal e arched (ar munud-se, avat, a oa bet ouzhpennet moarvat gant ar vojenn, a-benn kreskiñ euzhuster an torfed).

Diwezhatoc'h em boa bet tro da gomz gant L.M. a oa eus Konk-Kernev end-eeun diwar-benn an afer-se. Dezrevellf en doa din penaos e oa c'hoarvezet an traoù. Evit echuiñ, goude chom dilavar epad ur frapadig, en devoa diskleriet ne oa ket a-du gant an Alamaned, hogen hep ober addispleg ebet en tu-hont da se. N'hor boa ket kaset kaset pelloc'h hon diviz rak ne gavemp penn ebet d'ar gudenn : adarre ne oa na fur na c'hallus tagañ an Alamaned a waske an dud e Breizh hogen hep lakaat en arvar ar vroadelezh evit c'hoazh.

Kendalc'het em boa da strivañ gant va zud, e soñj o gonit d'am mennozioù. D'ar c'houlz-se he devoa kroaziet va mamm war ar spi ez echufe ar brezel hep dale prest awalc'h e vefe bet da zegemer n'eus forzh peseurt beli gant ma vefe bet reizh (hogen hini an Alamaned ne oa ket reizh). Dont a raen a-benn da lakaat anezhi da anzav he defe plegst da veli ar Saozon e Breizh gant m'o defe degaset ar

peoc'h ; evit keloù se ne rae van ebet ouzh ar stourm evit Breizh dre ma ne c'helle ket ober berzh, war he meno, dreist-holl o vezañ ma vefe trec'h ar Saizon a-benn ar fin.

Va zad ne oa ket ken aheurtet en e vennoziou.

Daoust ma oa a-du gant ar Saizon evel an holl e oa muioc'h spiswel e varn diwar o fenn, diouzh ur savboent gall evel-just : koun en doa, da skouer, o doa ar Saizon skoazellet an Alamaned da adsevel war-lerc'h ar brezel kentañ. Nac'hañ a rae ivez kendaoniñ Pétain a-grenn ; doujañs en doa evit ar soudard kozh, na petra 'ta ! Digoroc'h e oa e spered a-zivout kudenn Vreizh. Dont a raen a-benn aesoc'h d'e lakaat da gomz brezhoneg eget va mamm d'an ampoent-se. Lenn a rae an "Heure Bretonne" a gaven da brezañ er vourc'h (gwerzhet mat e veze eno) ha diwar neuze e c'hoarveze gantañ menegiñ ar gazetenn -mañ.

Bep an amzer, pa veze tommedik d'e benn moarvat, e soure ar "me" brezhon war an "dreistme" gall en e spered. D'un abardaez e deroù miz Gouere - d'an 12 ez resis - e oamp pignet a-gevret betek ar vourc'h a-benn pourchas ur pakad sigaretinier (va zad ne c'helle ket dioueriñ ar butun(1) hag ar si fall-se a verreas e vuhez emichañs). War an hent, p'edomp o sevel gant an tornaod, n'en doa prezeget nemet brezhoneg ganin. Er vourc'h avat - diwezhadik e oa dija - en doa goulennet digor er stalioù a oa prennet a-benn neuze, e brezhoneg bep taol hag eñ o tiskleriañ d'an dud sabatuet e oa Brezhoned anezho hag e tleent gouzout brezhoneg. Egiz m'em ais merket, sebezet e oa Sant-Jermeniz da gentañ, met, na petra, gouzout a raent e oa va zad genidik eus ar goueled ha ne c'hellent ket a-se kavout iskis e ali.

Ret eo din ouzhpennañ, peogwir emañ ganti, e oa lorc'h em zad o vezañ m'em boa addesket ar yezh a-benn

(1) Un danvez rouez e oa deuet ar butun da vezañ. O vezañ avat ma ne oan ket douget tamm ebet da vutuniñ em boa profet va c'hartenn vutun d'am zad.

neuze ha bourrañ a rae o lavarout d'an holl e ouien ar yezh gwelloc'h egetañ, pezh a oa gwir en ur stumm, daoust ma soñjen a-wechoù n'em befe ket d'ober kement bec'h da beurzeskiñ ar yezh m'em befe gouezet anezhi a vihanik eveltañ.

Adal d'eroù miz Mezheven e oa paouezet kentelioù Abeozen diwar-benn 'Barzhaz Breizh' hag ar 'Gogynfeirdd' kembraek. A-hend-all, an tiegezh Mee en doa diannezet : aet e oa d'en em staliañ en ur pennti 29 st. Edmond Rostand, en ur c'harter sioul, hogen pellik diouzh kreiz kêr. En devezh-se, antronoz an dilojadeg, - o tont eus Sant-Jermen war varc'h-houarn da gerc'hat "Kanoù en noz"- em boa kavet an it. Mee e-kreiz an dispac'hadeg ; gwall ziaes e oa bet dezho pourchas eoul-maen evit ar c'harr-samm dilojañ, emezi ; ret e oa bet d'he gwaz mont betek Paris da gaout an aotre. Goude marvailhat epad ur pennad he doa goulennet diganin ha ne c'helljen ket pourchas dezhi konikled ha patatez (seurt servijoù a veze goulennet bep an amzer diganeomp o vezañ ma vevemp war ar maez). Prometet em boa dezhi ober va seizh gwellañ evit reiñ dezhi he goulenn. Neuze e oan aet kuit endro da Sant-Jermen. Aliesik e tleent distroñ d'an ti-se, plijus gant he liorzbig a-dreñv, er bloavezhioù war-lerc'h.

D'ar 6 a viz Mezheven e oan deuet endro da Roazhon, d'ur yaou. D'abardaez e oan aet gant va breur hag un nebeut kamaladed da ober un dro er foar war ar Mailh ; brañsigelloù ka kirriigoù-horos a oa staliet eno ; Alamaned a gaved eno ivez eveljust, o kemer ebet a-wechoù gant merc'hed eus ar vro, pezh en doa plantet droug em c'hamaladed, Constant hag Orio dreist-holl. Gant bagadoù bigoudennd hor boa kejet ivez :stank tre e oant e Roazhon d'an ampoent. Distroet e oamp diwezhat d'ar gêr, goude m'en devoe va breur gouezet ur volenn wer evit nav lur en ul lotiri bennak.

Disul 11 a viz Mezheven 1941

En endervezh omp bet oc'h ober un dro er "c'houronkva". O tistreiñ e tremenjomp dre an "Tabor" e-lec'h e kejjomp adarre gant ur vandennad vigoudenned yaouank o komz brezhoneg, hag int fichet en o c'haerañ.

Hiziv ivez ez eus bet dalc'het ur vodadeg gant ar R.N.P. Sturiet e oa an abadenñ gant ar mavdiern gall Scapini. Tabut a zo savet adarre etre Gaolourion ha Petenourion. Hamon a gav an tabutoù-se trist meurbet ; evit ur gall marteze, evit ur Breizhad avat...

De Saint-Simon a damall hepken da "Vreizh atav" evel ma lavar, chom hep bezañ krenn a-enep d'an Alamaned. Disheñvel eo e vennoz diouzh hini re all a harz ouzh an Emsav dre m'emañ a-enep da Vreizh ha netra ken.

Ur munud fentus : Hamon en deus goulennet - n'oa ket e unan oc'h ober a-hend-all - hag-eñ e oa ar Bigoudenned hor boa gwelst en Tabor merc'hed eus ar "C'helic'h keltiek" treuzwisket e Bigoudenned !

Dimeurzh 13 a viz Mezheven 1941

Taget eo bet Siria dec'h da veure gant ar Saizon hag ar C'haolourion war zigarez e oa erru Alamaned er vro (nijerion, a-hervez) pezh a zo nac'het gant gouarnamant Vichi eveljust. An holl gazetennoù gallek amañ a zo dirollet a-enep d'ar Saizon, ar geneiled kozh troet da dreitourion. Petra a lavar ar skolidi e Sant-Marzhin ? Nemet Potenourion douet evel C. hag H. a garfe lazhadegañ an holl Saizon gwitibunan - hogen daoust hag ar c'henaouevion-se a oar perak emañ a-enep d'ar Saizon ? - an darn-vuiañ eus va c'hamaladed ne reont forzh ebet eus 'aloubidigezh' ar Saizon.

Un emgann war vor a zo bet etre listri saoz ha listri gall. Tri lestr saoz a vefe bet goueledet. Krogadoù start a ya endro etre Gallaoued ha Saizon. Hervez ar re-mañ ne vefe nemet morianed en armeoù gall du-hont.

Skritelloù a zo bet peget gant ar "R.N.P." war vogerioù kêr. "Rennais, vous n'irez pas fleurir les tombes de ceux qui vous attaquent en Syrie et qui vous ont abandonné lâchement en Juin dernier h.a.h.a." Ar skritelloù-se n'int ket bet diroget c'hoazh : souezhus eo !

Darlan en deus graet ur brezegenn : dispennet e vo Bro-C'hall ma ne genlabour ket gant Bro-Alamagn. "C' est plus qu'une crainte, c'est une certitude que nous aurons une paix désastreuse s'il n'y a pas de collaboration avec l'Allemagne. Je prévois l'avenir le plus sombre... h.a." Ne gav ket din avat o deus ar C'hallaoued komprenet kalz tra.

Disul 15 a viz Mezheven 1941

Displegadeg De Gaulle. War am eus klevet e oa bet serret dorjoù ar vered en deizioù-mañ. Hervez Augier ez eus en em gavet un toullad tud, merc'hed dreist-holl war ar c'haeoù. Kanet o deus ar 'Marseillaise' ha garmet o deus 'vive de Gaulle'. A-hend-all n'ous ket bet kalz trouz.

Act omp da vale betek Koad ar Bili. Tabut adarre du-se diwar-benn kudenn Vreizh, gant Rialland, Boujard, René Lebreton ha de Saint-Laurent. Hemañ a zisklerias : "La France est une et indivisible..." Gwir eo n'eus ket ur Breizhad anezhañ. Boujard a gavfe mat awalc'h he defe Breizh hec'h emrenezh, gant ma vefe kevredet gant Bro-C'hall e-pad ar brezelioù ! L. avat ne fell dezhañ klevout komz eus netra ha prometet en deus e lakfe fuzuilhañ ac'hanon da vefe erruet ar Saizon er vro. "C'était leur intérêt d'être Français," emezañ pa oan o tiskouez er c'hontrol kement hor boa kollet diwar ar stagidigezh.

Disul 21 a viz Mezheven 1941, d'ar beure
Brezel etre Alamagn ha Rusia : setu ar c'heloù

emaon o paouez klevout gant ar skingomz d'ar beure-mañ. Aet eo tre an Alamaned e Bro-Rusia da darzh-an-deiz. Kavout a rae din koulskoude e oa bet sinet ur feur-emglev a nann-tagañ etre an div stad-se. Ken boazet omp avat diwar vremañ ouzh darvoudoù seurt-se ma ne daolomp ket mui pled outo pa c'hoarvezont ; ar brezel n'eo ket mui dinatur hiziv. Soñj am eus, bloaz zo, p'edon o tac'hout dirak an Alamaned, em boa kejet gant ur micherour eus arsanailh Brest, nepell diouzh Kemper ; hemañ en doa dioget din o doa ar Rusianed diskleriet ar brezel d'an Alamaned, o doa aloubet bro-Alamagn hag e oant degouezhet endev dirak Berlin. Setu e ziougan deuet da wir - en ur stumm all - ur bloaz war-lerc'h hag en un doare dic'hortoz rak an Alamaned eo en dro-mañ o deus taget ar Rusianed. Niverus, moarvat, e tle bezañ an digareziou o doa d'ober ar gammed-se ha sur e c'hellomp bezañ e vint dezrevellet hir ha pizh en ur brezegenn bennak eus Hitler, evel maz eo boaz hennezh d'ober bep taol. Koulskoude ne gredemp ket kalz e vefe c'hoarvezet ar brezel-mañ, daoust ma ouiemp e oa bet dastumet kalz a soudarded alaman war harzoù Rusia. Hamon, tuchañtik, en doa asuret ne savfe ket brezel etre Alamagn ha Rusia dre ma ne oa ket bet torret an darempredoù kannadouriezhel etre an div vro hag o vezañ ivez ma sellfe daou seurt galloud dre ziv wech abarzh en em deurel an eil war egile.

Gaolourion ha komnourion a zo laouen gant ar c'heloù-mañ. An darn-vuiañ eus ar C'haolourion avat a het e ve trechet ar Rusianed da gentañ ; uzet e vo an Alamaned gant ar brezel nevez-mañ ha seul aesoc'h e teuy ar Saozon a-benn anezho a-c'houdevezh.

Digwener 27 a viz Mezheven 1941

Derc'hent an arnodenn hiziv. O vale en "Tabor" omp bet ; eno on chomet da lenn kazetennoù ar "Bretagne" hag an "Ouest-Eclair", dindan ar gwez. Goude-se omp aet d'ar

c'houronkva e-lec'h e vanis da enoeiñ o klask deskiñ un tamm strilhouriezh hag o lenn an H.B. Distroet on d'ar skolaj da deir eur bennak.

Dec'h, diriaou, en devoa graet Daniel ur brezegenn d'hor c'helenner jedoniezh -q- a-benn e drugar-ekaat evit ar pezh en devoa graet da zeskiñ e zanvez deomp e-doug ar bloaz hag ivez a-benn e zigoll evit ar cholori spontus a oa bet aozet a-enep dezhañ da geñver displegaded De Gaulle. Kement-se a reas kalz plijadur d'hor c'helenner kaezh a asuras neuze e talc'hfe un eñvor gwell eus e skolidi eget a soñje da gentañ. Evit digareziñ e emzalc'h e sigur displegaded De Gaulle e lavaras penaos "il tenait de son père un tempérament pacifique et il avait toujours pensé que le patriotisme ne consistait pas dans la haine..." h.a.h.a. (1).

Tremenet em boa eil lodenn ar vachelouriezh d'an 28. Testenn an displegadem a oa: "Elfennadur ha desk-rivadur gant skouerioù eus faltazi ar c'hrouer arzel." Re awenet e oan bet gant an destenn-mañ moarvat rak n'em boa ket tizhet urzhiañ an danvez re fonnus am boa dastumet na da echuiñ va foelladenn zoken ; n'oa ket ar skiantoù evit va digoll. N'em boa ket kalz a spi d'ober berzh ha ne voen ket kerseet nemeur pa ouezis pemzeltezh war-lerc'h e oan bet korbellel. Pezh a gavis hegasus eveljust e voe an tamalloù a voe graet d'ar brezhoneg kaezh a lakjod kiriek d'am c'hwitadenn.

Evelato e oa bet mat an aergelc'h er gêr epad an dhanou-se. D'an 30 a viz Mezheven em boa gouezet e oa bet adsavet ar "province de Bretagne" gant Vichi (da lavarout eo e oa bet krouet ur rannbarzh melestrañ nevez a

(1) Meur a C'hall a voe techet d'ar c'henlabour, dreist-holl e-touez emgannerion gozh, evit abegoù trivliadel. Ken "trivlius" ez eo en em adunvaniñ gant an enebour, dreist-holl an enebour a-viskoazh ha bezañ pardonet gentañ. Ne reer ket politikerezh mat gant trivliadoù mat bepred avat. Gwell eo prederiañ diwar-benn gwir vad ar gevredigezh m'omp ezel anezhi.

zalc'he pevar pe bemp departamant kozh eus Breizh). Va mamm ha na veize ket mat seurt soutilderioù mererezhel a oa bet prest da soñjal e oa bet daskoret da Vreizh un tamm frankiz bennak peogwir e rae ar gouarnamant gall anv anezhi adarre. Goude prederiañ, en diwezh, he devoa divizet n'oa ket se un dra fall, goude holl, rak, emezi, "gant an tamm frankiz-se e vefe 'doujet' muioc'h ar Vreton- ed a oa bet dismegañset awalc'h betek neuze hag int ar re ziwezhañ e pep lec'h er Frañs nemet pa veze anv a ober brezel eveljust : neuze edont er c'hentañ renk..." Mat e kave va mamm ivez en defe goulennet an ao. Chateau, maer Roazhon, un tamm frankiz evit Breizh en amzer-se(1). Dre vras evelato, evit va mamm muioc'h eget evit va zad, e chome ar garantez evit Breizh war ur bazenn drivliadel. Va mamm, da skouer a oa bet fromet, o klevout er skingomz dezrevelladur ur pardon e Rumengol : ar c'hantikoù a oa skignet neuze he doa klevet en he yaouankiz.

Ehanoù hañv 1941 a dremenis eta adarre e Sant-Jermen, evel boaz. Aliesik avat e tistroen da Roazhon war varc'h-houarn. D'ar 4 ha d'an 12 e oan aet du-se endeeun. En devezh-se em boa degaset d'an it. Mee ar c'honikled -- bev -- he devoa goulennet diganin : al loened paour o devoa graet ur veaj drubuilhus awalc'h e don ur sac'h stag ouzh sturier va marc'h-houarn.

Ur pennad amzer e oan chomet e ti ar Mee. D'ar mare-se e oa Roparz Hemon o paouez dont d'ober e annez e Roazhon ha diskouezet e oa bet din e lojeiz nevez war voulouard Metz a stok ouzh ar straed Edmond-Rostand. Dres d'ar mare-se ivez e oa an it. Mee o pleustriñ war ur pezh c'hoari eus Roparz Hemon "Meurlarjez", a-gevret gant he gwaz ha Meavenn ; hi a zlee kemer roll ar wreg ; Roparz Hemon hini an ozhac'h.

(1) Klasket em boa diskouez ster tarzhadur ar monumant o 1932 oc'h en em harpañ war ar skiant o dda va zad eus o stad a zismegañs breizhat.

Anv a oa bet ivez en devezh-se eus darvoud ar beurunvanidigezh a oa nevez c'hoarvezet un nebout devezhioù kent (meneg anezhañ ne oa bet graet ken, dre zegouezh, evel pa vije anv eus un darvoud natur ha tonket), eus bombezadegoù o doa drastet kêr Vrest er mizioù diwezhañ : distrujet e oa bet nouspet ti ha savadur e kêr ha pourgetket ar monumant savet d'an Amerikaned ; Brestiz a gonte, a-hervez, e oa bet graet an taol gant an Alamaned.

E-keit se e oa erruet bugale an it. Mee ha re an it. Andouard a oa bet o pourmen e liorzhañ Vorpaz hag int holl o vrezhonegañ, ma oan bet bamet ouzh o c'hlevout.

Kent din loc'hañ e oa bet diskouezet din an doare sukr nevez berus a c'helled pourchas ebarzh boutailhoù : deuet e oa ar sukr a-benn neuze da vezañ un danvez rouez.

War an hent da zistreiñ da Sant-Jermen em boa graet un dro e tiez ar strollad ha prenet eno niverennoù eus "Peuples et frontières". Em lojeiz avat n'em boa ket kavet an niverenn eus "Gwalarn" e oan o c'hortoz gant mall abaoe ur pennad amzer.

E deroù an ehanoù em boa paouezet a soñjal en dervoudoù. Prederiet e oan gant an droukverzh a oa c'hoarvezet ganin ; gwall bell e hañvale bezañ ar brezel e Rusia ha ne santen ket pizh e aparchante ouzhin kement a zegouezhe keit all. Notet em boa evelato e oa bet aloubet Enez Island gant an Amerikaned d'an eizh a viz Gouere, hep ober avat addispleg ebet.

Padal e selaouen evel boaz ar skingomz saoz. Savboent ar re-mañ o tezevell ar brezel e Rusia a oa disheñvel awalc'h, na petra 'ta, diouzh hini an Alamaned. Er c'helaouennoù gallek dindan reolerezh ar re-mañ ne oa anv nemet eus ouzhuisterioù sevenet gant ar Russianed : ur brezel a-enep d'ar varbariezh e oa ar brezel a-enep d'ar "Volcheviked" e Rusia. Diouzh un tu all, er skingomz saoz adarre, e klaske

ar "C'hallaoued dieub" broudañ o c'henvroiz dre zegas da soñj dezho hengoun o istor ha pergen meizadoù meur dispac'herion 1789. O bruderezh avat a gaven pilpouz awalc'h: diskouez dispac'herion c'hall 1789 evel dieuberion a oa ober goap. Daoust ha n'o doa ket staget an hanter eus Europa ouzh ar Stad c'hall en anv gwir ar pobloù d'ober diouto pezh a garent ? Ha pobl Breizh touellet ha teoget ganto, dalc'het dindan gazel gê, peseurt frankiz a c'helle embreger ? Lakaet e ve bet roet dezhi ar gwir da zibab he zonkadur, peseurt rezid a vefe bet en dibab-se moa-hi dic'houzvez a-grenn eus hec'h istor hag he yezh, pa n'oa ket evit barn a belec'h e teue dezhi he reuzeudigezh ? Kentañ ampleg ar frankiz ez eo ar gouzout hag an dra-se dres eo a rae diouer da bobl Vreizh pa oa bet nac'het outi gant ar C'hallaoued pep anacoudegezh eus he broadelezh wirion. Pilpouzion ne oa ken eta ar Republikaned c'hall a wechall evel a neuze !

Evidone gwirionez, kentoc'h eget da zarvoudoù Rusia, daoust pebezh levezon bennak a c'hellent kaout war donkadur Breizh en diwezh hogen n'em boa krog ebet warno, e taolen evezh ouzh an degouezhennoù a denne da gudennoù Breizh pe a c'hoarveze tostoc'h deomp.

D'ar 16 em boa notet gweladenn er gêr daou vrezhoneger dizesk hag am boa klasket kelenn diwar-benn o yezh. A-hend-all e oa sioul ar vro ha ne zeue deomp heklever eus ar brezel nemet dre ar skingomz e ve. D'ar c'houlz-se e oa birvilhet ar "genlabourerion" gant mennad ar "groaziadeg" a-enep d'ar "Volcheviked". E Paris e veze skignet prezegennoù brudañ diwar-benn al "Légion française" a oa he ratozh ober eus Bro-C'hall kevredadez Vro-Alamagn. Strolloù gall alaman-gar nevez a oa bet savet ; Buccard ha Constantini o doa diazezet un emsav "Jeunes Français", dezho rochedoù glas - giz ar rochedoù e oa e politikerezh en amzer-se - a voe anavezet hep dale dindan an anv "Francistes" hag a gavas izili e-touez fagourion c'hall e Roazhon e-lec'h en em gavjont enebet ouzh

paotred ar Strollad Broadel meur a wech. Ar re-se a gomze e Radio-Paris end-eeun ; gant kalz a helavarded e youc'hent e cant o vont da saveteiñ Bro-C'hall dre ar c'henlabour gant Bro-Alamagn ha n'o doa ar C'hallaoued da enebourion nemet ar Saizon hag ar Volcheviked unanet ; seurt helavarded - a hañvale bezañ gwirion a-grenn - a strafuilhe va mamm : eviti ne c'helle ar vrogarouriezh kaout nemet ur yezh(1).

An Alamaned o doa kresket c'hoazh o bruderezh en devezhiou-se. Pa oan deust d'ober troiadoù e Roazhon d'an 22 ha d'an 25 á viz Gouere em boa spurmantet adarre enskrivadurioù e lizherennoù-moul e pep lec'h war ar mogerioù, ar -V- peurgetket. " Victoire pour les Allemands" war bont Bezon, e Roazhon war an "Nouvelles Galeries" a-hed ar c'haoù h.a. "La Victoire anglaise" est la victoire de John Bull. La Victoire de l'Allemagne sur la Russie c'est la victoire de l'Europe nouvelle". Ar Strollad gall R.N.P. ivez a stank-ae e vruderezh kerkoulz all. E gwirionez, e-touez ar re a oa douget d' ar c'henlabour e oa meur a wech ez-sokial-ourion a oa dedennet gant ar stourm a-enep d'ar Volcheviked hag hoalet gant orin poblet pe bourc'hiz-bihanel darn eus harperion ar genelwerinelouriezh. Mab ur skluzier eus Moust-erel-war-Izol, rener ur skol kentañ-derez uhel en ur gêrig e-kichen Roazhon, a oa troet a-du gant an Alamaned goude bezañ bet divac'het (brezelvac'had e oa bet betek neuze) ; prezeg a rae a-du gant ar c'henlabour ha va zad a oa heuet awalc'h ouzh e selaou (2).

Kemm a oa bepred etre bruderezh skingomz Paris hag hini Vichi. Diskan paotred ar c'henlabour e Paris a oa "Pas d'attentisme". Ret e oa lammat en tren -mat! - a-rack ma vije loc'het ; goude e vefere ziwezhat ; arabat e oa dreist-holl chom ar fri war ar gloued. Va zud, eveljust,

(1) Strafuilhet e veze ivez pa gleve Hitler oc'h ober anv eus Doue. Krediñ a rae e gwirioned an dud hag ar gerioù eviti ne c'hellent kaout da ster nemet an hini a roe dezho.

(2) Eus reter ar vro e oa ar skolaer-se ; e wreg a oa ganidik eus ar c'hornog hogen n'o doa mennoz breizhek ebet nag an eil nag egile.

a zistaole a-grenn bruderezh ar genlabourerion e Paris. Muioe'hik avat e cant tizhet gant hini Vichi, va zad da vihanañ dre ma oa anezhañ ur soudard kozh eus al lu gall hag a zouje Pétain. War-dro an 13 a viz Eost en devoa graet an "illustre vieillard" ur brezegenn ; e-touez re all en devoa tamallet ar"gorvoerion" a denne o mad eus reuzeudigezh ar re all ; ha va zad a oa bet laouen o c'hellout tuiñ dezhañ en dro-mañ.

Vichi, avat, renet gant Darlan, a emdroe war-du ur stumm a ouarnerezh faszat. Divizet o doa paotred al levierezh vichiat kas da benn un "dispac'h broadel" a oa hanter sokialour, hanter faszat pe zamgristen an awenadur anezhañ. Seurt gouarnerezh en devoa eveljst ebeberion e-leizh. Setu en doa diferet gouarnamant ar Stadvichiat aozañ ur c'herreizh -diogel-stad (pezh a glot gant, mui pe vui, gant DST ar Stad c'hall a hiziv) hag ivez lezioù-barn arbennik a-enep d'ar gomunourion.

Tregaset e oa va mamm gant an devoadoù-se ha daoust ma oa-hi enebet ouzh Vichi hag a-du gant ar Saozon e erbede d'am zad diwall ha chom hep diskouez re e vennozioù o vezañ ma oa-eñ kargiad ha gopret gant ar "Stad c'hall" diazezet e Vichi.

En devezhioù-se a-hend-all e oa bet sevenet ur gwall-daol a-enep da Laval. Un den yaouank, Collette e anv, en doa tennet warnañ e Paris, pa oa oc'h ensellout ur bagad eus al "Légion française anti-bolchevique", a gredan. C'hwitet en doa ar paotr gant e daol ; Laval ne oa ket bet gwall c'hloazet ; damc'houde e oa-pare. Harzet e oa bet ar muntrer, barnet d'ar marv ; Laval avat en doa graet trugarez dezhañ ha ne oa ket bet eronezet ar varnedigezh. Hogen e Londrez e oa bet graet un haroz eus Collette hag unan eus ar gomzerion a-berzh ar "C'hallaoued dieub" en devoa distaget en e enor un tamm prezegenn lennegel tre e stumm hag a groge evel henn : "Tu es venu, dit-on, de Normandie..."

Evidon-me, e-giz m'em eus merket, em boa lakaet va holl albac'henn adarre e tremen va arnodenn da vat e miz Here ha ha chom a raen er gêr e-doug an deiz da studiañ danvez va arnodenn. Heuliañ a raen ur rumm kentelioù dre lizher gant an "Ecole Universelle". Ned aen ket nemeur da bourmen daoust ma oa kaer an amzer. Evelato em boa graet un tammig tro d'ar 26 a viz Here e pardon Santez-Anna, en ur chapel digevannez, pintet e lein an tornaod, e skoaz da vourc'h Sant-Medarz. N'em boa kavet netra breizhek er pardon-se nemet ur c'hantik bennak.

E-pad an ehanou-se n'em boe darempred ebet gant an Emsav koulz lavaret. Padal em boa degemeret ul lizher digant Orio, va c'hamalad eus Sant-Marzhin, a c'houlenne kaout levrioù da zeskiñ brezhoneg. O tiskrivañ dezhañ em boa diskleriet e pelec'h e c'hellfe pourchas al levrioù-se; ne gav ket din avat e kasas va c'havandad da benn biskoazh studi ar yezh. Evit pezh a selle ouzhin, daoust maz ae ar pep brasañ eus va amzer gant prientadur an arnodenn c'hallek, em boa kavet tu awalc'h evelato da zañzen un tammig studienn diwar-benn gouezh Waien a oa komzet gant va mamm ha va zad (dont a raen a-benn d'o lakaat da ober tamm pe damm gant ar yezh a-benn neuze). Diwar an alamaneg ivez em boa troet ur gontadennig eus ar skrivagner Theodor Storm : "Immensee" (1) he zalbenn.

Tizhet em boa ivez prenañ geriadur bras Vallee a gouste ker awalc'h evidon d'ar mare-se, o tintal d'am zad a-benn tennañ arc'hant diganto. Seurt oberenn a oa dibaot awalc'h endev d'an ampoent.

Ne zeuen ket er-maez eus va c'hamb, koulz lavaret, em eus lavaret. A c'horre ar prenestr, a-benn en em zihuediñ, e arvesten ouzh an hañvourion a bourmene endro

(1) Al labour-se a zleean echuiñ e miz Here ha kinnig da Roparz Hemon e fin ar bloaz. Hogen hemañ en doa kavet re drivliadel ar gontadenn-se eus Storm. Kontadennoù eus Hauff, diwar an alamaneg bepred, em boa troet ivez war-dro ar mare-se. Chomet int ivez diembann.

d'ar skluz hag a-hed brielloù ar ganol. Berzet e oa an aodoù gant an Alamaned hag un toullad Parizianed a oa deuet da dremen miz Eost war ar maez e Breizh ; darn o doa kavet bod e leti ar "C'hi du" er vourc'h. En o zouez e oa un nebeut yuzevion ; ur wech, dre zegouezh, edon war ribl ar skluz, tra ma oa ur yuzev yaouank o klask digeriñ dorjoù ar skorf traon dre ober bec'h war an treustoù-luskañ ; unan bennak avat - o sellout a c'horre ar pont e oa - am boa klevet o lavarout e oa an dro gentañ dezhañ gwelout ur yuzev o labourat ; n'ouien ket hag-eñ e oa eus an den-se ur Parizian pe ur broad ; marteze, a skriven ebarzh va deizlevr, e oa dezhañ an dro gentañ end-eeun kejjout gant ur yuzev ; din-me atav e oa ar wech kentañ. Hevelep kasoni ouzh tud n'anavezad ket a varnen evel ur brizh-trivlied dreist d'am intent(1).

Adal kreiz miz Eost em boa staget da heurel perzh ouzh an darvoudoù adarre. Dija em boa notet e dibenn miz Gouere o doa ar Rusianed grataet ar frankiz endro da Boloniz, pezh am boa kavet dizoare awalc'h eus o ferzh o vezañ ma oant penn-giriek gant an Alamaned da zistrujidigezh ar Stad polonat daou vloaz a-raok.

E-kreiz miz Eost e oa savet brezelekaenn Rusia d'he barr uhelañ. D'ar seitekvet a viz Eost o doa kroget an Alamaned da aloubiñ Ukraina ; diraezet o doa Nikolaievsk ; d'an 31 e tizhent Dniepropetrovsk. D'ar c'houlz-se avat e padé kad Rusia abaoe miz hanter ha gwiriañ a raen ne oa ket deuet a-benn an Alamaned da dapout un trec'h prim evel m'o doa graet er c'hornog. Sammañ a raen ar c'hwitadenn-se war ec'honder ar vro, an diouer a hentoù, ha ment an armeoù rusian, evel-just. D'an 19 a viz Gwengolo, teir sizhun war-lerc'h, e oa bet kemeret Kiev ha Smolensk, Minsk ha Gomel gant al luoez alaman ; ar re-mañ, ouzhpenn, o doa kelc'hiet seizh armead

(1) Diwanet eo an enep-yuzeviezh e-touez kelc'hiaourioù bourc'hizion ha bourc'hizion vihan, kenwez-hourion pe bleustreñon vicherioù rez, dre m'o doa da gevezañ ouzh kenrenkadidi a orin yuzev alies.

rusian. Evit keloù se ne oa ket anat tamm ebet e teufe ar maout gant an Alamaned abarzh nemeur. Klask a raen jediñ pebezh chañsoù o doa ar Saozon hag an Alamaned da drec'hiñ pep hini diouzh o zu en diwezh met e gwirionez n'em boa tu diogel ebet da ziawelout an dazont. Moarvat e selaouen ivez ar skingomz saoz ; arnodiñ a raen keñveriañ ar sifroù kemennet gant ar gevredidi saoz ha rusian hag an Alamaned hogen eveljust, ne dizhen ket o lakaat da glotañ. Hervez an Alamanen e kolle ar Rusianed 80.000 den bep sizhun, 350.000 en ur miz ; 675.000 prizoniad a oa bet graet ivez e Kiev ; hervez ar Saozon avat ne oa ket muioc'h get 340.000 soudard rusian dirsk ar gêr-se. Ar wirionez istorel en degouezhennoù-se a droe adarre d'un tasmant.

Unan eus heuliadoù aloubidigezh Rusia gant an Alamaned e voe lakaat komunourion ar broioù dalc'het ganto da stourm a-zevri ouzh ar genelwerinelourion. E Kastellbrien, e Breizh, e oa bet fuzuilhet endev un niver a gomunourion evit talvezout muntridigezh un ofisour alaman en Naoned. D'an 12 a viz Gwengolo 1941 e oa bet fuzuilhet daouzek komunour all. Heugus e kaven ar gizioù brezel-se a lakae lazhañ prizonidi dizifenn. Goude-se avat, da noz, en doa diskloriet ar c'homzour a-berzh ar C'hallaoued dieub e ve fuzuilhet 24 Alaman dilennet a-ratozh evit an daouzek fuzuilhad komunour ha pevar c'henlabourer gall ouzhpenn evit daou Aljeriad a oa bet lazhet gant an Alamaned ivez evit bezañ klasket tremen da Vro-Saoz hag emezelañ e lu De Gaulle. Kelc'h ar sponterezh hag an talv-gwall a oa o serriñ.

N'eo ket eus an darvoudoù-se koulskoude hor boa komzet gant mignoned eus va zad a oa oa deuet d'hor gwelout d'ar 4 a viz Gwengolo. Eus Kleden e oant genidik ha Betrom a oa anv unan anezho. Va zad n'edo ket er gêr en devezh-se a-hend-all

(1) Muzulmiz a oa eus an Aljeriz-se. An emsav broadel aljeriat dister meurbet en amzer-se.

(oc'h ober un droiad war ribl ar ganol e oa ha ne oa ket distroet a-raok an noz). Lakaet em boa ar gaoz war gudenn Vreizh, evel ma raen bepred. Betrom a oa bet kargiad en "Indez-Sina" ha tro en devoa bet eno da anavezout an emsav vi namat ; digor awalc'h e oa e spreda-se e-keñver Emsav Breizh. Eñ e unan a oa bet kastizet ez vugel - gant ar Simbol - evit bezañ komzet brezhoneg er skol. "Ar brezhoneg a zo ur yezh koulskoude," a lavare Betrom.

Ar pezh am boa evezhiet e oa e emzalc'h diwar-benn an divyezhegezh. Evitañ ne dalveze ar boan deskiñ ar yezh er skolioù nemet en ur Vreizh dieub e ve. Neuze ne oa ket ezhomm a zivyezhegezh. Rak koulz e oa lezel ar brezhoneg da vont da get en ur Vreizh c'hall.

Gant plijadur em boa selaouet komzoù fur an den-se a ziskoueze he doa pobl Vreizh muioc'h a skiant-vat eget a garje ar rannvroelourion bezañ hol lakaet da grediñ.

Va mamm hec'h unan a oa tuet gwelloc'h d'ar yezh a-benn neuze. Lennet em boa dezhi ur pennad gant Meven Mordiern, bet moulet war Arvor e fin miz Eost, a-zivout kelennadurezh ar brezhoneg er skol ; mat e oa bet kavet ganti. Diasur avat e chome va zrec'hadennoù rak awalc'h e oa d'am mamm klevout er skingomz brezhonek ur werz bennak o tagañ ar Saizon - se a oa c'hoarvezet war-dro an nav a viz Gwengolo - evit treiñ a-enep d'an Emsav adarre. Hemañ, ret eo lavarout, evel n'em eus merket, na aesae ket va labour bruder.

D'an 18 a viz Gwengolo em boa tremenet lodenn dre skrid ar vachelouriezh evit an eil gwech. Loc'het em boa diouzh Sant-Jermen da bemp eur hanter diouzh ar beure, war varc'h-houarn, evel boaz, a-benn en em gavout el lise Kastelbrien da eizh eur. En dro-mañ avat em boa kavet un destenn a oa muioc'h diouzh va grad : " Darempredoù etre ar meiz hag

ar yezh" am boa bet da zisplegañ. Deuet e oa va foelladenn da vat ganin ar wech-mañ.

D'ar c'hentañ a viz Here e c'hoarveze dalc'h dre gomz ar vachelouriezh, e savadur kozh Skol-veur ar Skiantoù war ribl ar Winun, e-tal ar Pont 'Pasteur'. Di e oan degouezhet, abred diouzh ar mintin, ebarzh karr-tan an ao. Bartelemy, perc'henn ar vengleuz e-kichen du-mañ. Berzh am boa graet adarre, dreist-holl e prederouriezh ; an ao. Burloud am boa bet neuze da arnodenner ; tro vat am boa graet ivez en alamaneg hag en istor ; siwazh, e fizig hag en hollvedoniezh ne oan ket bet ken skedus. Bezet pe vezet, deroet e oa bet din evelato an titl a vachelour gant ar meneg "mat awalc'h". Disammet kaer e oan : adal miz du e c'helljen kregiñ gant va studioù er Skol-veur.

Graet em boa va mad eus an amzer vak am boa dirazon betek an Hollsent evit diskuizhañ un tammig ; ezhomm am boa ivez goude bezañ kiet keit all epad an hañv. Evelkent n'em boa ket klasket ober pourmenadennoù war varc'h-houarn evel ma oan kustum er bloavezhioù a-raok. E gwir e oan chomet er gêr ; ur wechad, d'an 9 a viz Here, e oan aet da nouiñ er ganol hogen ken yen e oa an dour hag e miz Ebrel : 13^e derez dezhañ hepken. Un nebeut labourioù a raen er gêr : dastumet em boa etivi evit ar goañv ; mont a raen da gerc'hat amann er mereurioù tro-dro, a-dreuz al lanneier hag ar pinegi, adañv ar mengleuzioù ; dizoleiñ a raen ur vilin-avel roz kollet e-kreiz ar gwez ; selaou a raen ouzh ar gouerion a gomze o zrefoedaj romanek : "J'lêsi... J'fu a la vil...yañ... i va pege... y a pa manier..." o klask adkavout tres ar brezhoneg, hep en em douellañ re avat diwar-benn ar c'heñveriadurioù a c'hellen ober.

E-keñver boued, er miz Here-se a 1941, n'hor boa ket da glemm. Amann ha legumaj a gavemp er mereurioù a-fonn ; sukr a chome ganeomp : eizh podad kaotigell a oa bet

aozet er gêr adarre ; sardined a veze kaset deomp eus Gwaien ; gwazi a zessvemp war ribl ar ganol. Ar bitailh rouesañ e oa ar c'hig : ar Prefed gall e Breizh n'en devoa aotreet nemet 100 grammad bep sizhun d'ar Vretoned tra ma tarnaoued 250 grammad da annezerion Paris ; seurt gwall-ziforc'h a bourchase danvez bruderezh evit an "Heure Bretonne". Va zud, koulskoude, a zeue a-benn d'en em ziluziañ ha da bourveziñ kig awalc'h d'o ziad.

D'ar 4 a viz Here e oa distroet va breur ha va c'hoarezed da Roazhon, el lojeiz a oa bet nevez disko-achet gant va c'hoar henañ, st. Sant Melani. Chomet e oan va unan penn e Sant-Jermen eta. Ar pep brasañ eus va amzer am boa gouestlet neuze da studi ar yezh. En deizioù-se em boa degemeret un toullad levrioù brezhonek : "Ur Breizhad er C'hanada", dastumet gant Meven Mordiern ; "Owen ha Lunet" troet gant Abeozen ; "Pirc'hirin ar mor" am boa lennet neuze evit ar wech kentañ. Un niverenn eus Gwalarn a oa e dalbenn "Lennadurioù kembraek" a oa degouezhet ganin ivez : bez e oa anezho un teskad a skridoù kembraek tennet diouzh al lennegezh klasel e yezh-plaen gant an droidigezh anezho e brezhoneg keñver-ha-keñver. Kerkent em boa staget gant studi ar c'hembraeg hogen ne zleean kas houmañ da benn nemet tri bloaz war-lerc'h, goude m'em boe peurdremenet an aotregezh war al lennegezhioù klasel.

Selaou a raen ouzh ar skingomz vrezhonek. E deroù miz Here e oa bet skignet ur pezh c'hoari eus Langleiz "Koroll ar vuhez hag ar marv" hag ivez ur brezegenn diwar-benn Kalloc'h, bet selaoust gant va zad a hañvale tre bezañ douget da vennozioù an Emsav diwar neuze, daoust ma ne oa ket c'hoazh evit merzout sklaer peseurt diskoulm politikel a oa da reiñ da gudenn Vreizh. E gwir e oa dalc'het e spered dreist-holl gant emdroadur ar brezel.

E deroù miz Here e oa erruet lanvezhiad an aloubidigezh alaman e Rusia d'e boent gourlenn. An Alamaned

a oa krog a-benn neuze da zielec'hat. War-dro an 9 a viz Here e oa bet toullet - ur wech ouzhpenn - talbenn an armeoù rusian ; kemeret e oa bet kêr Orel (ur greizenn a ijinerezh war-dro glaouva Toula) ha tizhet Vaizma, 150 kilometrad diouzh Moskov ; luoez rusian a oa kelc'hiet war-dro mor Azov ; en ardremezioù Rostov ha Briansk ez ae endro emgannoù arall ; ivez nes da c'henoù ar Stêr Don. Hogen kêrioù Leningrad hag Odessa a harze bepred ouzh an alouberion ; en hanternoz Gomel ha Moskov zoken o doa gallet ar Rusianed kas war-raok enep-argadadegoù. Dont a raen da zastum ne zeufe ket Hitler a-benn da beurziskar galloud-brezel Soviediz a-raok ar goañv.

Hitler, end-eeun, en devoa graet ur brezegenn war-dro ar mare-se. Enni e tegemere e oa nerzh-lu ar Rusianed dreist d'e soñj. E Lunden - goude ma anzaved e oa grevus emgav al lu rusian - e jubenned ar brezegenn-se evel hini un den dic'hoanaget ; o klevout addisplegoù ar vrudourion c'haolat en defe kredet unan e oa al lu alaman oc'h ober e dalaroù ; hervez ar c'heleier embannet ganto o doa an Alamaned kollet 3.000.000 a soudarded epad an emgannoù tra ma n'oa bet lazhet nemet 270.000 den ha gloazet nemet 720.000 den e-touez ar Rusianed ; ar re-mañ a ziogege o devoa distrujet 4.916 kanol alaman ha diskaret 9.000 karr-nij enebour. Setu d'vihanañ pezh a greden klevout e skingomz Lunden.

Eveljust e selaouen ar skingomz saoz gant ar spi da c'hellout diverzout ur wirionez keitat diwar-benn an darvoudoù hogen he bruderezh gall feuls ha kasonius a zisplije din a-grem. En devezhioù-se ivez a-hend-all e klaske ar vrudourion c'haolat loavañ hag hoalañ ar gatoliked c'hall. Ar bruderezh-se avat a gaven pilpouz adarre dre ma kounen ne oa ket bet ar gouarnerezh gall kent ar brezel hag abaoe pell douget end arbennik d'ar relijion. Me'felle din kredañ awalc'h e oa Hitler mab Satanaz ; met d'ar c'houlz-se e ranken resev e oa Stalin e filhor : rak eus houmañ ne oa ket ur sant kennebeut.

Da vihanañ, e oa hennezh mennoz va zuñ. Amsteriek awalc'h e oa o emzalc'h dirak an darvoudoù. Prest e oant da grediñ e vefe deuet tre an Alamaned e kêr Voskov ; pezh a hentent e gwirionez eo o defe en em gendistrujet an daou enebour.

D'ar 6 a viz Du em boa graet un droiad e Roazhon evit daskoriñ levrioù studi d'ur c'hamalad Gospan a oa bet korbellel er vachelouriezh. Keloù en devoa roet diwar-benn darn eus hor c'henseurted. Diwar-benn A.D., ar skoliad mat a oa o klask mont da gloareg d'ar mare-se en devoa diskleriet gant un ton asur : "Ca fera un bon curé..." am boa kavet fentus awalc'h.

Pourchaset em boa ivez levrioù brezhonek e levr-di Breizh. Un nebeut levrigoù eus an "Notennoù diwar-benn ar Gelted kozh" am boa prenet, hag ivez "Nominœ Oe" eus Jakez Riou a oa bet nevez adembannet neuze gant SAV war ur paper disteroch eget an embannadur orin gant "SKRID HA SKEUDENN".

Ur gwel am boa graet ivez d'am breur ha d'am c'hoarezed, st. Sant-Melani.

Evel-se e oa echu va bloavezh-skol brederouriezh. Ar politikerezh hag ar brezel o doa dalc'het ennañ kalz muioc'h a blas eget ar brederouriezh hec'h unan e gwirionez.

Padal - ha se a oa iskis - daoust da gement-se en em santen distag diouzh ar freuz hag ar reuz a oa o ren e pep lec'her bed d'ar mare-se ; da gentañ eveljust, dre ma ne oan bet deoget gant galloud stad ebet ; ivez, a gav din, peogwir e nac'hen kemer perzh war-eeun en un Istor a hañvale din bezañ diskiant ha diboell, er-maez eus va c'hrog, n'eus forzh penaos. Estren e oa ouzhin Europa ar galloudoù meur demokratel - sañset - ha pilpouz koulz hag hini an impalaeriezhoù mac'hoù ha divezh a oa oc'h en em zrailhañ kenetrezo hep trugarez ebet. Ne c'hortozen d'ar brezel nemet an disoc'h en defe gellet harpañ Breizh da adkavout he frankiz hogen d'ar brezel e unan e roen a-hend-all ster ebet.

Moarvat e oa empleget va emzalc'h gant peurzic'halloud an Emsav ; an emzalc'h-se, e gwirionez, a emskianten evel un dilez kerkoulz hag evel ur gwarez hogen kavout a rae e ziazez ivez er gredenn am boa e oa degouezh va bro disheñvel krenn diouzh hini ar re all ha ne c'helle ket ar sevenadur a empennen eviti bezañ heñvel mik ouzh sevenadur ebet bet diazezet betek neuze gant ar Stadoù hengounel war gevandir Europa. En ur ger, dre ma soñjen he doa Breizh ur c'halvedigezh en hor rannved e nac'hen ivez sammañ ar walenn dibocell a oa o trastañ Europa d'an ampoent.

====+

D.i.b.e.n.n.a.n.t.r.e.d.e.l.e.v.r.e.n.n



